

M. J. ...
+

BRUD

Niv. 3

GOANV 1958

BRUD

ar Yez hag ar Vro

Kelaouenn lennegel drimizieg Emgleo Breiz

Bloavezh kenta - Niverenn 3

Goanv 1958

Komananchou

Komanant-bloaz :	900 lur
Komanant-skoazell :	1.500 lur
An Niverenn	250 lur

Kas ar skridou, al liziri hag an arhant da :

BRUD - Revue littéraire d'Emgleo-Breiz
B. P. 17 Brest
C. C. P. 1921-04 Rennes

Niv. 3



Ar Yez hag ar Vro

TAOLENN

◆ BRUD	Bloavez mad d'an oll	5
◆ Per HELIAS	M'eo diêz din	7
◆ MAB an DIG	KARANTEZ	8
◆ Visant SEITE	Merien	23
◆ Danevellou YEUN AR GOW :		
	Sorserez Beleg	24
	Askoan ar Hemener	33
◆ Per HELIAS	Piou e-neus lazet an hini koz	39
◆ YEUN AR GOW	Ar Sterenn	54
◆ Kristian BRISSON	Karront ar Mor	55
◆ MAB an DIG	Soazig Gankour	60
◆ Urvan PERENNES	Ar re veuzet	61
◆ BREHONEG BRO-GUENED :		
	Lihér ur habitén ar ur pomb gwern	72
Fransèz Treh-er-Bou-		
LOM	Istoér ur « Symbol »	75
ER JOUBIOUX	Sonj a vugaléah	76
« Bro-Guéned »	Diarbenn « BRUD »	77
◆ L. LOK	Pennad-Kaoz gand eur halvez	78
	gand Ladri, bouteger	79
◆ BREZONEG BEO AR BOBL :		
Alain KERGUTUIL	Lizer eur zoudard (1839)	80
L. KERLANN	Resusitet!	83

Itron QUEMENEUR .	O vond da weled eun neiz moualh...	85
Loeiz LAGATHU ..	An tevenn minet.	86
Fanch AR MAHE ..	Chanson Bretoned Kazarn Hardi (Mezier)	87
◆ <i>LODENN AR YAOUANKIZ :</i>		
Marivon AR GOW .	Eur miz e Bro-Gembre.	89
J.-P. LORIN	Ar halvar hag al lann	93
Ernest BARZ	Kontadenn Nedeleg	94
◆ <i>NOTENNOU AR FURCHERIEN :</i>		
L. LOK.	Kantik ar Purgator	96
	Adoromp Holl	97
Kampourien KERLIVIO	Traou klevet ha dastumet gand kampourien Kerlivio. Poullaouen.	98
L. LOK.	Geriou dastumet e Rosporden hag e Pouldregad	101
◆ <i>AMAN HAG AHONT</i>		103
◆ <i>C'HOARIVA BREZONEG</i>		109
◆ <i>EMBANNADURIOU EMGLEO BREIZ</i>		111

Bloavezh mad d'an oll

BRUD a ginnig he hetou kaloneka a vloavezh mad da gement hini a zigouez dezañ lenn ar gelaouenn : kerkoulz d'ar re a vev war zouar Breiz, hag o-deus bet an eurvad da dremen ar gouelioù e korn o oaled, d'ar re a zo strewet war o labourioù du-mañ du-hont e Bro-Hall, ha dreist-oll d'ar re a zo eet er broioù pell, en armeoù pe war al listri. Ra vezo evito ar bloaz-nevez unan a yehed, a laouenidigezh hag a fiziañs en amzer da zond.

Fiziañs dreist peb tra e amzer da zond ar brezoneg. Ra vo kavet adarre er bloaz-mañ, niverusoh eged biskoaz, hag unanet, Bretoned a youl vad evid komz, lenn, divenn ha kelenn ar yez.

Ha peogwir e vezer kustum da gomañs ar bloaz-nevez en eur zegas derou-mad d'ar vignoned, e hellint kaoud e **BRUD** eun dastumad foun-nusoh hoaz eged boaz a bennadoù a beb seurt, bourruz pe fromuz da lenn, kenteliuz awechou, bepred enno eun dra bennag da dañva.

Klasket on-eus mond war wellaad, heñchet aliez gand an eve-ziadennoù dibabet ganeom e liziri ol lennerien. Trugarez d'ar re o-deus bet ar vadelez da skriva deom. Laouen om bepred o reseo kelou diganto hag o houzoud petra a zoñjont diwar-benn ar pezh o-deus kavet (pe n'o-deus ket kavet) e **BRUD**. Mad a reont barn ha burutella : o gwir hag o dever eo. Strollad an aozerien o-deus studiet piz o aliou, ha klas-ket dalhmad ober hervez o menozioù.

Setu perag on-eus lakeet en niverenn-mañ notennoù da zisplega gerioù na gaver ket er geriadurioù hag int brezoneg yah koulskoude. Ar geriadurioù, siwaz, a zo diglok, ha n'ez eus merk ebéd enno euz meur ha meur a dro-lavar veo, implijet er vuhez pemdezieg e korn pe gorn euz Breiz.

Evid lakaad sklêrroù hoaz an traou, e virim hiviziken er gelaouenn eun nebeud pajennoù d'ar « Goulennoù ha Respontoù », diwar-benn kement tra a hellfe ober poan benn d'unan bennag : yez, istor, lenne-gez, buhez Breiz, hag all. Skrivit deom eta heb aon ebéd. Unan gou-ziég bennag a furcho evidoh, a zikouro ahanoh da zirouestla ar gudenn, hag ar respontoù-ze a vezo talvouduz evid an oll.

Laouen om ivez o weloud o vond war gresk gand ar bloaz-nevez « Lodenn ar Yaouankiz » hag hini « Brezoneg Beo ar Bobl », tachen-

nou ken pouezuz evid amzer da zond ar brezoneg. Taoliou-esê awechou, savet gand ar re yaouank war o studi, hogen diskouez a reort eun ampartiz da skriva e brezoneg hag a hellfe dougen frouez heb dale.

Lod marteze a vo techet da gaoud tano an danvez ha paour ar menozioù e pennadoù « Brezoneg Beo ar Bobl ». Arabad eo barn ar skridou-ze hervez reolennoù striz al lennegezh uhel. Gwelloc'h eo klask enno eun testeni gwirion euz stad ar yez komzet, euz kredennoù ha trivliadoù an dud, euz an doareoù-beva er mare-mañ pe en amzer dre-menet. Aze emañ o zalvoudegezh, ha red mad eo o embann evid ma ne vint ket kollet, rag meur a dra ez eus enno da bennaoui d'an dud n'eo ket ar brezoneg yez o havell.

Forz penaoz, e kred deom e kavo peb hini e vleud en niverenn-mañ, ha kinnig a reom anezi d'ar Vretoned a ouenn vad, evel eur boked glan poulzet er vro en desped d'ar goañv dirollet.

BRUD.



M'eo diêz din

M'eo diêz din
Plega va 'fenn dirag lod a zo,
M'eo diêz din
Dilenn ar gwir
(Ha bez ez eus eur gwir kennebeud?)
Mesket er zah leun-tenn a hevier;
Ober va hent m'eo diêz din
E-touez an dud, a-dreuz an traou,
Ma rankan mond da-heul an ton
Ha blejal gand mouez piên ar chatal
Heb ranna hogen na padal;
M'eo diêz din
Kloza va mez dre m'on re zister,
Eva, re wan, dour-zall va daelou
Ha diwall va hounnar em hreiz
Pa n'on ket gouest da gaoud va zu;
M'eo diêz din, m'eo diêz din,
Gweled al laer o tastum madou,
Kant paour o larda eur hov-don,
An torfetour meulet a zoujañs,
Ar farisian er chantele,
Ar skiant prenet gand eun diot,
An onestiz taolet d'an teil,
Ar bed o trei war an tu gin
D'an daoulamm ruz o vond da goll
Ha dall ha bouzar peb den ganet,
N'eo ket awalh din d'en em chala,
Nann.

Diêsoh hoaz, diêsa tra,
Pa ne hortozan hu pe veno
Na digand an eil, alas, nag a-berz egile,
Diêsa tra beva e peoh ganin va-unan.

Per HELIAS (25-6-56).

MAB AN DIG

KARANTEZ

AN NOZ A ZISKENNE

Div eur a oa edo eet kuit ar baotred, en eur strakal o 'boutou koad, o youhal, fouge enno evel bouchou bihan o vond er-mêz euz o hraou.

Bremañ edont er gêr, oh ober ar zervij gand ar re vraz, pe o kignad chalotez d'ober al lipig.

Ar zal skol, a nebeudou a golle gand he sklêrder, c'hwez klouar o gwad entanet.

An avel a zourre er-mêz, a zute dindan an nor hag e mantell ar ziminal. Dour puilh ar barr diweza a glevet o tirlinkad war an hent braz e-kichen.

Tiez Kerdangi a deuze a nebeudou en deñvalijenn.

Soazig a skrobe atao ar haierou. Raouliet ' oa da beder eur ar paour kêz plahig! Kaer he-doa youhal, ober an neuz da veza droug, ne helle ket en em gaoud da lakaad e pennou kalet ar baotred lezennou distrantel an doare-skriva.

Eur vunutenn pe ziou, o spered a blave war ar gentel evel eur gelienenn war beg o 'fri, med d'an daoulammou e nije pell, war goueliou gwenn ar bigi o krena, war ar bezin a deue gand ar mor, war al leue bihan edod o hedat, war ar hi a harzo bremañg karantezuz d'e vestr, pe zoken, ya pe zoken, rag an avel vor a lak da dridal, aliez a-raog ar poent, ar halonou... e mousc'hoarz strobineluz eur verhig euz ar skol e-kichen.

Komz a hellit, dimezell!

Skuiz maro e veze bemdez ar paour kêz Soazig. Nag a boan gand paotred! Nag a boan, hag evid kennebeud a 'frouez!

Hag a lede atao liou ruz war skradennou kropet he hailboned.

*

**

« Dao eo din enaoui ar bleuzeur » a zoñjas. Lezel a reas da goueza he 'fluenn.

Nervennou he dorn dehou a oa evel sonnet gand ar skuizder. Skuiz ' oa ivez he choung hag e savas he 'fenn. Soazig, en eur zastum ar bleo du troïdellat a oa diskennet d'ober allazig d'he zal.

He dremm leun a yaouankiz a oa koant ha plijuz.

He daoulagad lemm ha glaz en em gollas buan en eun huñvre.

*

**

Ar mor a gane a beb tu, d'ar pardaez, war enezennig Vaz. An heol a alaoure an aot, an dour, ar bigi, Rosko, Kastell-Paol, hag o zouriou... Enez Vaz a neue en aour, ha Soazig enni a gane. Gand laboused gwenn Sant Paol e tañse war an tonnou spered ar plahig evel kilhet ganto. Ezenn yah an avel, dastumet gantañ c'hwez vad ar meneziou, mogedell frealzuz ar bezin, a deue evel o c'hoarzin da 'floura he horv hag he halon.

O, an euriou tremenet, euruz, evel dindan eur glao a vleuniou, harp en ti bihan toennet izel, a welas o sevel, o vousec'hoarzin d'ar vuhez, Soazig, merhig koant Enez Vaz!

D'ar skol e rankas mond evel ar re all. Hag o veza m'oa lemm he spered, e oa lakeet dizale en eur skol uhel e Kastell, Kastell bro an touriou kaer hag ar hleier sklintin, a zo brao beva enni. Koulskoude Soazig n'he-doa ken mall nemed redg diarhen e-touez ar reier, kizellet gand boubili ourlet an tonnou, ha kleved, e-leh soniou drant ar hleier, storlog ar 'hregin er paullou hag hiboud an donder o krozal.

An dud war ar studi a zo truezuz o doare. « Kerz d'ar skol, va 'faotrig... va merhig... hag az-po bara gwenn da zebri... ha gwin ruz da eva! Ar bezin ne stag na ne boulz er parkeier. Breina a ra d'ober teil! »

Siwaz! Nag a dud diwriziennet euz bro o havell... a vrein. Teil! Teil 'fall a-wechou war ar marhad!

Mad e ve ma hellfent goude o studi dizrei adarre d'ar vro he-deus o greet, d'ar hornig douar o-deus sunet e lêz.

Peurvuia, netra d'ober. Kemeret o-deus hent ar mên-goilh. Beteg ar penn e rankint bale, heb kila!

Arhant a vo en o godellou, louzou c'hwez vad war o horvou, hag aour en o genou, profou kaer, kinniget d'an doueou. Ezomm a zo anezo, ha red eo o larda, evid ma kendalho da vleunia, e gwas-ked an traoniennou, e disheol ar gwez dero, war drêz gwenn on aochou, an eurvad gwirion.

*

**

Skolêrez! Ha skolêrez en eur skol baotred! En tiegeziou e poaze ar hig-ha-farz. An tad koz a ree tan dindan ar podad, war e var-

lenn eur verbig vihan. E tiig enez Vaz, he zad, he mamm, he c'hoar a varvailhe hag a c'hoarze!

Ha bremañ ez aio da goania, he-unan, eur goan zister, ha den war he zro!

Den war he zro?

Daoust ha n'he-deus ket bet ar vousetaj hed an deiz? Tolom-pi a-walh a vez ganto. Eun tammig sioulder ne ra ket a zroug, dimezell!

Den war he zro?

Daoust ha Bonjig n'eo ket deuet bremañ da zegas dezi eur guc'henn vrennig? Daoust ha da zul, dreist-oll, ne deu ket leun a dud da boulen kelou euz o bugale, da rei dezi eun drañ a veuleudi evid he labour, hag a-wechou, med ral eo... (gwelloc'h e kavont he bas d'an Aotrou person, rag ar plah a roio dezo eur banne kafe, hag er zal, mar plij!) da ginnig dezi eul lurig amann?

Den war he zro? Alo 'ta! An dud a zo mad eviti! N'he-deus ket da glemm!

An dud ne gomprenont ket, ne 'fell ket dezo kompren.

Ar hi a zo eürusoh egeti en e log. Eveltañ he-deus boued, med ar hi, e teu tud an ti aliez d'ober dezañ eun tammig kamambre, da rei dezañ eur pokig.

Gwechall, eme on tud koz, e veze gwelet aliez en noz ar goulou red, eur houlaouenn, o redeg he unan dre ar mêziou, war ar stêriou, hag ar mor. Dioustu, pa 'n em gave unan bennag, ar goulou-red, eur houlaouenn, o redeg he unan dre ar mêziou, war ar veva e-unan.

Kalon eur plahig, kalon Soazig, a zo eun delenn, den da hoari ganti. Eun delenn ne zon ket he-unan. Red eo bizied ampart ha skañv evid he lakaad da gana!

Kalon eur plahig, kalon Soazig, a zo evel ar goulou red, inouet maro he-unan. Koant ha lugernuz eo, med da betra e servij sklêri-jenn ha koantiri ma n'ez eus den d'o zañva?

Eun dra avad a hell ober he-unan: gouela.

*

**

Soazig he-deus lakeet he daouarn da guzad he dremm, he daouarn sklaset war he jodou tomm bero, war he zal leiz gand ar hwezenn.

Ne weler mui en noz du, nag an daolenn zu, nag he bleo du, hebken skleur he daouarnigou gwenn savet war-du an neñv, evel re eur beleg e-pad an overenn.

KOAN

Ar Paotr (ne veze ken greet nemed an dra-ze euz Job, rag pennher a oa) e-noa lakeet kolo fresk dindan e gezeg, draillhet lann evito. Koaniet 'oant, ha bremañ gand e bilpenn e tastume ar vaoz a oa el leur harp en ti.

— « Dare koan. Deus va faotr! » eme dezañ e vamm.

An diennerez a droe hoaz eun tammig, an targaz marellet a viaoue, sonn e lost. War an daol eur hleuzeur-lutig a daole e hou-lou. Ar zoubenn a oa trempet; he êzenn a zave gwenn war-du stal ar bara hag a leunie an ti gand c'hwez vad an irvin, ar harotez, ar panez, ar hig sal. Ne oa bet tamm abaoue mern-vihan hag an avel a oa fresk; ar galon a oa eta digor.

Heb eur ger ar Paotr a yeas d'e gorn-tro dirag e dad ha goude eun tamm pater e stagas da zebri.

— « Warhoaz ez aim adarre da balarad », eme an ozah. — « N'out ket re skuiz? » — « Tra an oll! Da ugent vloaz, pennad! » Ar vamm a lezas da bara eur pennad he zellou war dremm plijuz he hanfard yaouank. — « Na pebez mañ am-eus! » a zoñje. « Atao laouen evel eur pintig. Kreñv, eur marh-labour! Sentuz, ger ebed gantañ morse. Tamm troet ebed da eva. Ha! Va 'faotr n'eus ket dezañ! N'eo ket souezuz e plijfe da verhed koanta ha pinvidika ar barrez! »

— « Sell 'ta », emezi uhel. « Janig an ti all he-deus goulennet ganin da beleh az-peus soñj mond disul goude lein. »

— « Da glask neizou! » eme ar Paotr en eur hoarzin.

— « A! Ne blij ket dit kalz Janig. Douar vad he-deus koulskoude, ha bez ez eus... »

— « O, nag hi nag eun all. Diwezatoh e vo gwelet. Arabad kabestri ar hezeg yaouank re abred, mamm! O lezit eun tammig da ruilha o herh! » Hag a kemeras eur skolpad fars ha kig bevin. An hini druz ne blije ket dezañ tomm. Yen avad e ree gantañ, da nav eur, war e vara.

*

**

— « Doue r'ho pennigo! » — « Bennoz Doue deoh! » — « An dimezell, douetuz, eme ar vamm, erru da gerhad he lêz. » Ar wreg a yeas da leunia dezi he 'fod bihan.

— « Deuit eun tachadig da gichen an tan da domma, rag yen-sklaz eo ho taouarn. » Hag en eur zelled outi pisoh: — « Med ruz-tan eo ho penn. N'ho-peus ket a derzienn? » — « O nann, eme Zoazig », a ruzias hoaz muiob. — « An avel vor a zev e Sant Pabu, koulz hag en Enez Vaz. Med kendalhit, mar plij, gand ho koan. »

— « EDOM, eme ar vamm, o komz euz a verhed yaouank d'ar Paotr. Figuz eo an tamm gantañ. Sell! Paotr... Setu amañ unan diouz da zoare. » Hag e c'hoarze, digor he ginou, eur fourchetead farz harp ennañ. Merhed Enez Vaz o-deus brud da veza teodet dreist ha ne reont ket a van ouz ar flipadennou. Gand eur mousc'hoarz e respontas goustad Soazig: — « En eun tiegez braz evel hemañ n'ez eus ket ezomm a zimezelled na ouzont na goro na ribotad. »

— « A-wechou e tesker buan ribotad! » eme ar Paotr en eur c'hoarzin. — « Ya, med neuze e koller meur a ribotadenn », eme kerker ar plahig.

— « C'hwí ho-peus eur vicher vad », eme ar wreg, « atao en disklao, er gwsked, e-leh ni, bepred dindan ar gwall amzer. » — « O, arabad deoh klemm re; ni a garfe aliez aveli eun draig bor penn. Peb micher he-deus he zu mad hag he diareneb. Merhed an tiegeziou n'eo ket ken 'fall-ze o doare, ha ma karfent e ve hoaz gwelloc'h. »

— « Ez eo komz, med an arhant a zo e godellou an aotrouien! » — « En armeliou koz ez eus ive, ha seni a ra aliez kalz kaerroc'h! »

Ar Paotr a zelaoue, sonn e benn, laouen. — « Poent eo din mond da glask va hoan, eme Zoazig, kenavo warhoaz! »

En e wele-kloz, kaer ' oa dezañ trei ha dizrei, Job ne gave ket ar housked. Re skuiz ' oa, douetuz, e izili gand labour tenn an devez. Hanter voredet, serret e zaoulagad, e wele dirag mantell ar ziminal bleo du perlezennet o lintra; jodou ruz-ruz, evel bonboniou, a ree avi; eur mousc'hoarz goapauz eun tammig, med ken lizzin; ha daoulagad du ivez, med leun a vuhez, skedusoh eged ar hleuzeurig, daoulagad dalluz o para warnañ, o vired outañ da gousked.

AR HROG ER BERN KOLO

Soazig a deue abretobig da glask he lêz. Ar Paotr e veze teñval e benn p'en em gave diwezathig, beteg ma kleve war an treuzou trouz têt he boutou ler-goad, hag an ti o tirlinkad gand he mouez flour. A-wechou, êz deoh gouzoud, e klaske digareziou: al labour, tud deuet d'he gweled, evid en em gaoud eun tammig goude an eur. Arabad re, rag mall he-doa ive da weled Job. Med ar merhed a zo lemm kenañ o spered, war draou ar garantez. Plijoud a ra dezo lakaad da jom da hedat ar wazed, ober dezo zoken tammigou poan, skei taoliou kizell war galonou ar re a garont evid rei dezo ar stumm, an doareou o-deus c'hoant, beteg ma vint daoulinet e-harz o zreid, evel sklavourien dirag o rouanez. Oll int heñvel, ar merhed, zoken ar gwella anezo. Ha piou oar? Peogwir Doue eo e-neus greet an traou

e giz-se, ma vije a hend-all, marteze e yafe hoaz falloh an traou er bed-mañ.

Chom a ree ive diwezathig. Eun deiz en eur varvailhad, eh en em lakeas gand ar vamm da walhi an traou, hag a reas goap ouz torch ar skudellou, a gave heñvel ouz eun touseg dispak e vouzellou.

Eur pardaez, da hedat ma ve tremenet ar barr, e chomas da hoari eur bartiad domino. C'hoari dreist a ree, gand Job, êz deoh gouzoud; hag ar re goz a houllonderas o godellou, evid maga ar pod. En egar edont e-pad ma vousec'hoarze laouen Soazig da Job, ha Job da Zoazig. Eur wech-all e tirollas, e-pad m'edo en ti, glao hag avel. Job a roas da Zoazig e borpant martolod, ha gand aon na gouezfe el lagenn, e yeas d'he has beteg drav ar porrastell. C'hoarzin a reent o-daou, dorn-ha-dorn. O, nag e tride e galon, gand an dornig mistr ha tomm, evid ar wech kenta en e hini. O daou, douetuz, e hunvrent, rag ar podig a zirapas araog m'edont en em gaved e traon al leur. Hag e tizrojont, dorn-ha-dorn, d'e leunia a-nevez. En noz teñval, dindan ar glao, diou galon a gane evel daou labousig e beure glaz an nevez amzer.

— « He! Eur 'froudenn yaouankiz! Lez ta! Klev nag a hoarz a zo ganto en eur ober ar zervij! Lez an dud gand o haoziou! Gwarizi! Gwarizi! Job a zo eun den 'fur, eun den a skiant. Pa deuy ar poent da zibaba, e tigasao amañ eur vaouez hag a ouezo he micher. »

An ozah e-noa c'hoant lakaad eun harz, ar wreg a 'felle ganti lezel he 'fennher en e roll, hag e ve bet laouen o weled merhed yaouank an tiegeziou braz diwardro o koll o 'fenn, abalamour ma ne zelle ket outo ar Paotr, abalamour ma kave gwelloc'h eun dimezell. Goude e vo gwelet.

Gwechall, en tanteziou, ar baotred yaouank a zastume gwriziou e trêz an tevennou. Ganto e reent eur voul vraz a anvem *flammaj* hag a stagem outañ eur gordenn. Deiz an tanteez e lakeem an tan ennañ hag ar voul a veze troet en noz teñval. Nag ' oa dudiuz koroll ar 'flammaj er straejou diwardro! Med eun nozvez daou 'flammaj entanet a yeas a benn-herr d'en em steki, hag unan, distaget, a oe strinket en eur parkad gwiniz. An tan a grogas ennañ hag e oe oll dismantret.

Skeudenn ar garantez a-wechou. Evez! Evez! Dre hras Doue ral eo kement-se. Peurvuia an daou 'flammaj a ya goustadig d'en em staga an eil ouz egile, hag en noz teñval e skedont, m'eo eur blijadur o gweled.

— « Job, Job! Ar hrog ne hellan ket mui e denna euz ar bern

kolo. Deus ta d'am zikour! » Job a deuas d'ar red diouz ar hraou kezeg.

An noz a ziskenne. Peb tra a oa sioul, e peob. En ti dre ar prenestr e weled ar re goz o varvailhad. Dre ma helle, Soazig a zache war ar brog. Ar Paotr a dostaas outi.

— « Va lez! » — « Nann, emezi, on daou! »

Ar bleo du a nije, hag a deuas d'ober kêzig d'e joug. Pe e lakaas e skoaz dindan he 'fenn, pe e lakaas he 'fenn war e skoaz! Piou 'da damall? Traou a zo diêz awechou da houzoud. Ar brog a oa deuet euz e log. N'edo ket ken stard ha ma zonzjed ar bern kolo. Med atao a reent an neuz da zacha warnañ.

— « Va Zoazig! » Hag e roas dezi eur pok, an hini kenta. — « Va Jobig! » Hag e roas dezañ eun all, ha ne dlee ket beza an diweza.

— « Job! Job! E peleh emañ? Dare koan! » — « Ya, dioustu, mamm! Med ar bern kolo a zo diaz eget gwall vuan er bloaz-mañ. Tenn mantruz eo tenna traou anezañ! »

**

NAG E VE KAER AN TIEGEZ !...

Tremenet ' oa beilhadennou dudiuz ar goañv, o-doa digaset an nevez amzer e diou galon. Nag ' oa kaer ar vuhez!

Soazig er skol a oa laouen evel eun dorhanig, e-touez he 'faotred. Hailhon oant awechou, pennog, poud da gas araog. Med al labour a oa deuet eviti da veza skañv. Bleuniou ar garantez warnañ a zispake o deliou tener, leun a hwez vad.

Gouzoud a ree da bed eur e tizroe Job euz an aot, peur e tlee tremen, sonn e benn, war e garrad melchen; hag e teue da gichen ar prenestr da gutuilh eur mousc'hoarz. Ar re vrasa a wele sklêr, en em roe taoliou ilin, a lakee o dorn war o ginou evid embann goustad: « Job ar Paotr he dous! » Med ar skolaerez a oa deuet mad gand an oll. Ne oa rebech ebed d'ober dezi. Hini ebed euz he bugale n'enoa c'hoant d'ober an disterra poan d'eur vestrezig ken koant.

**

— « Nag eo tremenet buan ar goañv! » a zoñje Job en e vag pa yee da vezina. Ar mor a luskelle e hunvreou, ha pa deue da fulori, etre an houlou gwenn, en eur roevad, e kave dezañ gweled dirazañ, o nijal, bleo du ha ken flour ar plahig a gare.

Ar wir garantez a laka da zevel. Abaoue m'oa eet diouz ar skol ne zigore ket mui eul levr. Bremañ, evid tostaad ouz e vestrezig,

setu m'edo en em lakeet endro da zeski. Mond a ree d'an iliz evel ar re all. Feiz e-noa, ya, med ar hiz a ree kalz en e vuhez gristen. Soazig a reas dezañ sklerijenna e hent, kompren gwellob e zeveriou, lakaad da vleunia e vuhez, e garantez, e karantez ar Mestr-Oberour, e-neus greet or halonou eun draig heñvel ouz e hini.

Hag e savent o daouïg, dorn-ha-dorn.

Nag e ve kaer an tiegez!

**

Deuet ' oa an deizioù kaer endro. Er prajou, er parkeier, er hleuziou, ar vuhez a dride. E kalon ar yaouankizou ive e korolle ar vuhez. Job ha Soazig ne gredent ket hoaz mond o-unan d'ar 'foariou, d'ar pardonioù. Med da bardon Lanbaol ar Paotr a baeas d'e zousig eun hanter-lur basianted. Merhed pennou braz ar barrez a zellas outañ a-dreuz, hag en eur zond d'ar gêr dre Vezou ar Bouz diou pe deir a lavaras d'e vamm, deuet da gerhad ar zaout: « Peur e vo friko Jef? »

**

Kaoz a zave er poullou, e peb leh. Ar glaourenn a goueze, a boullade, a eonenne. Ar Paotr, eur pennher, dezañ kement a leve, o rinkla etre daouarn kement a verhed hag e ve bet laouen ouz e gaoud da bried, evid eun dimezell ne ouie ober netra!...

Ar warizi a zourre, a lakee da goll ar penn, da skarza loustoni evid labeza an daou yaouank en em gare.

Eur zadornvez ' oa, derhent gouel an Dreinded. Job a oa ouz an daol o tebri eun tamm bara, rag o vezina e oa bet, ha n'e-noa debret tamm abaoue ar beure. — « Paotr, eme dezañ e vamm, kemeroud plijadur, c'hoari a zo mad. Arabad eo mond re bell! Ne ran ket kalz a van ouz kaoziou an dud, ha gouzoud a rez, da dad koulz ha me e-neus lezet ganez da gabestr war da voue. Med e peb leh, er mathajou, war an henchou, ne gomzer mui nemed diwar ho penn, ar vestrez-skol ha te. Me ' gav din e ve gwellob tarda. A hend-all emañ e riskl da gaoud da zah p'az pezo c'hoant ober da zibab. »

— « Va dibab, mamm? Med a-bell-zo eo greet. »

— « Penaoz? »

— « Ya, ha ne jomin ket da varbata. Soazig a vezo va 'fried. »

Ar vamm a zigoras he ginou, hag a lezas he daouarn da goueze war an daol.

— « Paotr, n'emaout ket mad! Eun dimezell frizet, gwenn he daouarn, ne oar ket eur hagnad wardro eun tiegez, da verh-kaer en ti-mañ, eur bapa! »

— « Eur bapa ma karit, va mamm. Beza eun tammig bapa ne ra ket a zroug d'eur vaouez. Va zoñjou din-me n'int ket heñvel ouz ho re. Doujañs am-eus evid ar re goz. Giziou dezo a oa mad. Re all n'am-eus ket ezomm anezo. Eur vuhez nevez a zigor. On tiegeziou evel an traou all a rank mond war-raog. Leun a gorniou enno a ve mad o dilastri. Doareou nevez a zo da labourad. Muioh eged merhed all ar barrez-mañ Soazig o anavez. A laz-korv e labourim, on daou, evid ober euz an tiegez-mañ an hini kaerra, an hini laouenna, ennañ beo-buhezeg karantez en Doue hag or Breiz. »

— « Kollet az-peus da benn, n'eo ket posubl, gand ar hoz uriaou-se he-deus roet dit da lenn ! »

— « Nann, n'am-eus ket e gollet, hag arabad deoh koll hoh hini ! »

Gwenn-kann e oa eet ar wreg, krena a ree gand ar gounnar. Mellou he daouarn dirag daoulagad he mab, e lavaras dezañ : « Biken eur seurt dizenor, kleved a rez ! » Hag e redas er-mêz en eur youhal, en eur leñva.

PARDON LOKMAJAN

Job eo a gasas he litrad lêz da Zoazig d'ar pardaez. N'ber havas ket er gêr. Dindan an nor e lakaas eul lizerig : « Arabad dit dond ember. Warhoaz avad bez e Porz ar Vilin da ziv eur. »

Nebet kenañ e oa lakaet ar paouër-kêz merh gand ar ger-ze. Petra ' zigoueze ? Ne' gouskas ket kalz ar plahig.

A-veh ma welas Job goude an orvintin, ha teñval e kavas e benn. Petra ' venne ober e Porz ar Vilin da ziv eur ?

Pardon Lokmajan a oa. War hent Lanniliz, goude ar milinou, e tigor eun draonienn euz ar re gaerra. En tu kleiz eh en em zispag, o lintra, divreh arhant an Aber-Benniget. Unan en em astenn etre lanneier alaouret ar Hotaill ha Brendu, evel ma kemerfe evid o briata kouldri ha maner Merznaot. Pellobig eur wazennig a ya da hoari e-touez gwez braz Porz ar Vilin. Ne weler pelloh, gand an heol o para, nemed aour o lintra. Ma sellit dirazoh etre diou dorgenn goloet a vrug ruz, e welot o skedi lien gwenn bigi Treglonou.

A gleiz, brug ive. Ar menezioù a droh ar gwel. Ne welit nemed bleuniou melen al lann, ar balan. Hag en eur hornig-tro, kuzet dindan ar gwez, eur chapelig euz ar hoanta. Eno da zul an Dreinded e tired leun a dud euz Sant Pabu, Plougin, Treglonou, hag euz a belloh, da bedi Majan, unan euz ebistel kenta or Breiz, ha dreist-oll Santez Anna, or Mamm Goz euz an Neñv, a jom atao e kalon peb Arvoriad ken birvidig ar garantez eviti, ar fiziañs enni.

Euz Sant Pabu an dud peurvua a deu war vale da Lokmajan. Lod koulskoude a gav gwelloc'h kemered eur vag e Porz ar Vilin.

Peder pe bemp a ya beb bloaz eno, laouen war ar mor blod evel dour eul lenn...

— « Sell, Job ar Paotr ! » a lavaras eur gwaz. « O vond emañ da Lokmajan. »

— « Or hemeroud a ri en da vag, Job ? » — « Va bag, eme Job, ne zavo ket hirio he eor. » Hag e sellas ar Paotr war e dro. Soazig a redas d'e gichen.

— « Deus ganin, Soazig », emezañ, têt e her. Job a dostaas ouz ar ribl ar hanod bihan, en eur zacha war e gordenn. Rei a reas an dorn da Zoazig da bignad ennañ, bounta a reas war ar vagig eun nebeud. En eul lamm edo e-barz e-unan. Ha krog er roeñv e stagas da boleñvad. Ar vagig gand tiz a dehas.

— « Petra ' rez, Job ? eme dezañ Soazig. Kemend-all a dud a zo war an aot ! Evid an taol-mañ eo greet ar stal ouzom ! »

— « Va lez d'ober, Soazig. Digoret an emgann ! Gwelet e vo gand piou e vo an treh. » Hag eh azezas en he hichen, e vreh war he skoaziou, hag e kontas dezi ar pez a oa digouezet an deiz araog er gêr.

Komzou tenerra pardaeziou ar goañv, promesaou dudiusa diou galon yaouank leun a garantez, a deuas da vleunia war ar mor glaz. Ar bleo du a nije, ha ganto, goustadig, Job ar Paotr a boarie. — « Biken den ne lazo or harantez. Soazig », hag e stardas he 'fennig koant war e galon, en eur holei he dremm tomm-bero a bokou.

Ar mor a oa izel hag e Lokmajan, kaer oa dezo klask douara, ne gavent nemed lehid du. Job a dennas e loerou, a droñsas e lavreg hag a lammas er mor. E dreid a zankas eun tammig. — « Deus ! » emezañ, d'e zouzig. Hag etre e zivreh e tougas d'ar zeb, a-wel d'an oll, e deñzor.

Dorn-ha-dorn, en eur varvailhad e-kreiz eur boblad tud ez ajont d'ar Chapel. Hag eno, daoulinet en eur gichen, e chomjont pell da bedi an eil evid egile, evel daou vugel, ar vamm-goz Santez Anna.

Ar pardaez a oa deuet p'en em gavas ar vagig en-dro e Porz ar Vilin. — « Warhoaz goude peder eur ez in d'az kweled d'ar skol », eme Job. « Kenavo va dousig ! »

Warhoaz ! Warhoaz !

Paour-kêz Job! Ne welez ket, n'ez eus ket eun touseg ha ne vije ket deuet euz e doull, n'eus ket eur zilienn ha ne ve ket deuet euz ar poull, n'eus ket eur velhouedenn gousket ha ne ve ket en em zilet er-mêz euz he zreuz kaol, n'eus ket zoken eur hrant euz an Aber ha ne ve ket diredet gand tiz war e giz, beteg an douar, gand o glaourenn, gand o mehi, gwasoh kalz eged deiz pardon Lanbaol.

En taol-mañ, paour-kêz Job, e vernint oll loustoni o hornailhen, beteg ma hellint ho peuzi, Soazig ha te. Tennet az-peus warnout, war da vuia-karet, kas an oll, an oll dud vad, an dud a goustiañs, an dud santel. Brud ar skwer 'fall ho-peus roet, deiz pardon Lokmagan, e-neus redet evel an tan!

Tad ha mamm Job a oa o ouela e korn an oaled. — « Eur vez eo ! » a lavaras ar vamm kerkent ha ma teuas en ti. Hag an daou goz er-mêz.

Ar hloher a gontas d'ar person, eun den mad, trugarezuz, ar pez a zigoueze. Eun tachad goude e teuas d'e gaoud ar plab, gand teir pe beder maouez a vrud vad, mammou a familh. — « Ne hellom mui fizioud or bugale e seurt tud ! Eur vestrez skol oh ober traou evelse, spontuz eo ! »

Ha re all a deuas. Ar skolaer e-unan euz ar skol a gichen a gavas abeg en daou yaouank. D'ar poent-se edo strisoh al lezenn eged bremañ !

Evel d'ar reverdi, ar hoummou a beb tu a zavas. Enebi outo ! Paour-kêz Job ! Pa zav an dispah ez eo gweloh kuzad, a hend-all e vezer bruzunet. Klasket az-peus stourm, ker e kousto dit !

War-dro nav eur noz eh en em gavas gand Soazig eul lizer : « Goude ar skwer 'fall ho-peus roet, ez oh pedet da zastum ho traou warhoaz kerkent ha goulou deiz, ha da gemered hent ar gêr. »

An treh a jome gand an dud vad, an dud a skiant, an dud onest. Hag evid gwella mad eneo ar beherien, e oa kavet an tu d'o 'fellaad an eil diouz egile, en eur vired outo d'ober o himiadou, da gaoud tro da goueza a-nevez en o 'fhebed mezuz.

O karantez dreist da gaer !

AN DIABARZ EO NA ENEB KET

Job ne ree van mui nag ouz den nag ouz netra. Labourad a ree avad er parkeier, en aot. D'ar zul ha d'ar goueliou e chome da gousket e penn ar bern kolo. Ouz taol ne veze koulz lavared ger. Job ne vouze ket, nann, med diouz teñvalder e benn e weled e oa gwall hloazet e galon.

An hañv a deuas, an eost a oa trohet ha dornet. An amzer vrao, an ed puilh, al leuriadou alaouret, ne rejont dezañ laouennaad tamm ebed. An tad a lavare awechou d'ar vamm e nehamant spered. — « Teh! a responte. Arabad dit ober van. Ankounahaad a ray evel ar re all. Ar hleñvejou yaouankiz a dremen ha ne jom roud ebed war o dilereh. »

Tostaad a ree Hanter-Eost. Bezin a gaved e-leiz evid trempa an douarou. Job a oa en e vag, eun all gantañ, a-dreñv kein enez Trevoh. N'oant ket pell evid leunia, ha bremañ e hedent ma zavfe ar mor evid dizrei. Peb hini en e gorn a hunvree. — « Soazig, paour-kêz Soazig ! » Tenna a reas euz e vruched eul lizerig melenet-gand e hwezenn, bet lennet hag adlennet :

Jobig, va Jobig !

« Digemetet fall kenañ on bet er gêr. Eul lizer a zo deuet d'am heul, da ziskuilha ar skwer 'fall am-eus roet. Kollet am-eus brud vad va familh ! Eur verh a vuhez fall ! N'on ket gouest zoken da hounid va bara. Ra 'z in buan pell diouz an ti-mañ d'ober va 'forh en eun tu bennag all. Setu petra 'glevan bemdez. Kerkent ha ma kavin eun dra bennag ez in da labourad, n'eus forz pe du. Arabad dit skriva din. Da lizeri a ve lennet, hag a lakafe ar gutun da darza hoaz gwasoh. Gedom deveziou kaeroh, va Jobig. Dond a raint. Biken den ne lazo or harantez. Soñj am-eus euz da gomzou er vagig, va dousig. En emgann dirollet Soazig a zalho sonn he 'fenn eveldout. Pa vo tremenet ar barr-arne, evid klevet a-nevez da galon o lammad, da bennduig a lakay adarte e skouarn war da vruched, hag e hoarri bemdez gand rondellou flour bleo da vava da viken. »

— « Job ! Job ! Eun taol gwall-amzer o tond ! » Koumoul du a zave etrezeg. Porsall. Ar mor en em lakee da brontal, evel eul loan gouez war-nez sailha. Gwagennou, eonenn warno, a zave. Ar vag en em lakaas da storlokad. — « Buan abalen ! » eme Job. An avel ne groge ket mui er goueliou. Ne oa nemed avel-dro.

Enez Treoh, ken dudiuz pa vez tomm an heol, gand milierou a laboused o hournijal, a gemer, pa vez fall an amzer, tres eun douar milliget. War he herreg uhel rouz o 'fennou, e sailh an tonnou, evel kezeg pennfollet o tond a zaoulammou euz an iverniou, en eur hournijal, dispak o moue, warno liñseriou ar maro.

O daou eh en em lakejont da roevad, a laz-korv, evid pellaad diouz ar herreg. Med ar mor e-unan, evel ma ve ennañ avel-dro, setu m'en em lak d'ober poullou, a gornigelle evel sabotou. Islonkou

a zigor, toullou torr-gouzoug. Gleb dour-teil o hwezi e roeñvont o daou dre ma hellont. Mogidell a zav, ne weler mui an treiz. Ker-
vigorn d'e dro a deuz, ha Korn ar Gazel. A-veh ma weler hoaz
skeud ar Hi.

Ha setu souradennou kreñv, treiz, o lakaad da strakal al lienn
hag ar wern. — « Diskennom ar goueliou ! » eme Job. Uhelloh-
uhella e save an houlou. Diou pe deir o-doa sailhet warno, hag e
oant treuzet betek o eskern. Lod a zeue a-dreuz, re all a hed. Euz
eun tu d'egile e oa strinket ar vag, a vennas aliez mond d'ar strad.

Daou zen gouest edont, stard o divreh, ha trehi a rejont ar
stourmad. P'edont oh en em gaoud dirag enez Garo, eh en em lakaas
da goueza glao dour puilh, a dorras an avel.

D'an deiz warlerh Job a rankas chom en e wele. Terzienn e-
noa kenañ. Diouz ar pardaez e oa ranket mond da glask ar medisín.
— « O, ne vo netra, emezañ. Gwall baket eo, med gand louzeier e
pareo buan. » Eizteiz goude an derzienn a gendalhe. Eur miz diwe-
zatoh, stad ar hlañvour a jome atao heñvel. — « Ne gomprenan
netra, eme d'ar gerent ar medisín. Ar re all a bare, med hemañ, *an
diabarz eo na eneb ket*. Eur ranngalon vraz bennag a dle taga ho
mab. »

An dud a deue en ti a gleve ar Paotr o torlonkad. Ne 'felle ket
dezañ gwelet den. — « Dre uz emañ o vond ! » a lavared.

Ar hleñved a grignas d'ar red-tan e izili, e zremm. E vamm
en em guze da ouela. Eun deiz, krignet marteze ive he houstiañs, e
teuas d'e gichen, e krogas en e zorn hag e lavaras dezañ : « Job,
pa vi pare, me da lezo da vond gand Soazig. » — « Re ziwezad ! »
emezañ, hag e troas e benn en tu all.

Miz here a deuas. An deliou melen ha ruz a zistage diouz ar
gwez hag a holoe al leur. An diskar-deliou, amzer 'fall evid ar re
glañv ! Diou pe deir gwech hed an deiz ar Paotr e-noa taolet gwad.
D'ar pardaez e oa galvet ar beleg. Da zerr-noz, goustad, e lavaras :
« Pardoní a ran. Kenavo er baradoz ! » Hag izelloh-izella, teir
gwech : « Soazig ! Soazig ! Soazig ! »

Hag e tremenas.

Harp en iliz emañ e vez gand eur holoenn sklent. E dad, e
vamm a varvas ive d'o zro, ha den ne deuas mui goude an ofisou da

deurel eur bannig dour benniget war bolz dister ar paour-kêz Job.
Den ebed mui!...

Ar vuhez a gendalh. An dud a ankounaha buan. Peb hini n'eo
nehet nemed gand e bez-c'hoari e-unan, ha pa gouez eur c'hoarier
war al leur : « Her sammit pell abann ! Eun all a vo kavet ! »

Soazig ! Den ne oar petra eo deuet da veza. Evel ar re all,
emichañs. Gwir a lavare mamm Job : « *Ar hleñvejou yaouankiz a
dremen ha ne jom netra war o dileth.* »

UGENT VLOAZ GOUDE

Eur pardaez a viz here. Glao a ree ha glao yen. En eur lakaad
da strakal o boutou-koad ar vugale a yee er-mêz euz o 'frizon, en
eur youhal. En eun taol krenn, ger ebed mui. Eun itron vraz a
deue er zal, gwisket pinvidig. — « Aotrou, me a zo bet emañ oh
ober skol, ugent vloaz zo. C'hoant am-eus bet dond d'ober eur zel-
lig em zi labour a wechall... N'on ket chomet pell e Sant Pabu, med
en em blijet em-eus emañ... An traou a zo chomet heñvel, a welan. »

Hag e varvailhe, gand eur mousc'hoarz a ziskoueze eur galon
vad ha plijuz. Ne greden ket ober re a houlennoù, med euz he 'fenn
he-unan e komzas. — « Me a zo euz Enez Vaz... Eet on ahalen
da Bariz, ha goude-ze d'an Amerik. Deuet on hebken d'ober eun
droiad... Va digarezit, rag n'am-eus ket kalz amzer. »

Da nav eur noz e teuas d'am haoud mab ar hloher. — « Er
vered ez eus unan war he daoulin, e-tal eur bez, ouspenn div eur zo,
dindan ar glao ! Ne fiñv tamm ebed ! Me ' zo bet en iliz, a zo tre-
menet en he hichen. N'he-deus ket greet a van. »

— « He lez, va faotrig, ha kerz da gousked ! »

D'an deiz warlerh, war bez Job ar Paotr e oa, nann eur boked,
med eur vriad roz ruz tan, dudiuz, skeduz, evel n'am-oa gwelet
morse. Ar bez paour ganto a oa goloet.

Roz ruz evel an tan, tan ar garantez, atao ken birvidig. Roz
ruz hag a embanne, a gane d'an oll dud o gwelas : « *Ar wir garan-
tez ne varv biken. Na den na netra n'hel lazo.* »

Ya, zoken ar maro dirazi a gilo.

Ar garantez diwanet e penn ar bern kolo

Da viken a vleunio.

Karantez ! Karantez !

Roz ruz

Peurbaduz !

GERIOU NEBEUD ANAVEZET

Lipig	saoz evid debri gand ar fars, greet gand tammou tonen, amann ha chalotez.
Ourlet	dilemm.
Ar mèn-goilh	mèn ar sakrifis (goilh: guillotine).
Ar vousetaj	bugale eun tammig hailhon.
Tolompi	trouz braz.
Bouchou bihan	Eur bouch : eun ebeul bihan (va bouchig, a vez lavaret d'ar vugale).
Ar vaoz	loudouriaj, teil ha dour anvoez.
Pennad!	touadell (bon sang!).
Diareneb	an tu kontrol d'an tu mad, an tu-gin.
Tanteziou	tantad : tan bras; tantez : tan braz da geñver eur gouel bennag.
Kêzig	allazig, illig.
Eun dorhanig	laouenanig.
Poud	diêz da fiñval.
Tarda	chom a zav.
Eur hagnad	tamm ebed.
Eur bapa	eur verhodenn.
Uriaou	levriou.
An orvintin	an overenn-vintin.
En eur gichen	an eil e-kichen egile.
He zreuz kaol	treuzen (treujenn).
Forh	maouez a vuhez fall.
Da hrontal	grontal : krozal.
Sabotou	sabot : kornigell (toupie).
Torlonkad	pasaad evel eun den klañv e skevent.

Merien

En eur vale dre ar hoad,
'N eun dachennig tirien,
Em-eus flastret gand va zroad,
Eur grugellad verien.

Kastell al loenedigou,
Brenn geot ha koadouigou,
Am-eus dismantret.
Chom a ran mantret,
Va halon rannet
Ha leun a geuz
Dirag ar reuz
Am-eus hadet
En ti karet.

Merien a vil-vern,
Merien ruz, merien du,
A virvilh a bep tu
'Vel dreinigou spern.

'Maint o redeg, penn 'follet,
War an douar dizolo,
Mesk-ha-mesk drailhou kolo,
Darn anezo peurgollet.

'Mañ ar grugell freuz-difreuz,
'Vel eur gaoter o virvi.
Merien braz gand eskilli,
Skrab-diskrab a-héd, a-dreuz.

Merien mesket fall-difall,
O koroll a-stroll
Dizeblant en oll
War gorrhou flastret
Mahagnet, gloazet,
O 'faourkêz c'hoarezed all.

Ar béd-mañ a zo hirio,
Evel m'eo bet ato,
Eur grugellad verien garo.

Visant SEITE.

DANEVELLOU YEUN AR GOW

forserez beleg

Abaoe ma 'z eo eet da 'fall, e Pont-Koblant, ar pont koz a zavas ar Romaned eno gwechall da dreuzi ar Stêr Aon, ez eus bet grêt eur haer a hini-all gand melladou mein-benez, war bilerou teo ha frammet-mad.

D'an ampoent e oa Pont-Koblant, ar gêriadennig-se savet a beb tu d'ar stêr vraz ha rannet ganti e diou lodenn, bro ar mengleuziou mein-do. N'ouzon ket ped biskoaz a oa aneo en oll, ouspenn eun dousenn moarvad. Hirio hoaz e heller gweled ar bernou atred braz-meurbed a zo bet tennet diouto er Stêron, Roz-Peron, Ti-Zal, ar Park Fall, Lezkuz, Mengleuz ar Pont, Kajenn, ar Mogerou, ar Stêr-C'hourtê, Lezvrec'h ha... me ' car. Niveruz e oa ar vengleuzierien a gave labour enno, eun tri-hant bennag da-vihanna, darn o chom e Pont-Koblant ha, darn-all, e pennou-tier war ar mêz, e Goezeg. Lotei ha Pleiben.

Kerkent hag echu o devez ganto ha bet, siwaz, en ostalidi oh eva hag o lakaad *war ar hoch* beb a *hanter-gal* a *hini krênv*, e teue bemdez, pa veze brao an amzer, eun nebeud mad euz ar re a oa o chom e Pont-Koblant ha tro-war-dro da aveli o 'fenn ha da henaouegi war ar pont nevez. Azezet war an diou vardell anean pe groñchet outo da zelled ouz an dour o redeg dre zindannañ, e tremenent o amzer o savarad etrezo, evel ma ra pesketerien vak ar perzier-mor, bodet war ar hêou da gomz euz an amzer hag ar besketerez.

Eun doare leurgêr e oa ar pont nevez ha, beb abardaez, e veze kavet warnañ pôtre-doull du o fas gand moged an tennou min hag ar bouldrenn savet euz ar spledadou to dizahet, ha faouterien ken taraset-all o genou, gwisket o daou gov-gar gand bodreou pilhou ha tammou sier koz a reent *truilhou* outo. Kaoz vraz a veze ganto ha, piou bennag a dreuze ar pont, e kontent *pemp ha nao* diwar e benn, dreist-oll pa n'o-deveze ket anaoudegez anean. Ha neuze e lavare pep hini e bez da gavoud abeg, evel just, ha n'eo ket da veuli. Kalz aneo

ne oant bet biskoaz er-mêz euz ar vro ha n'o-devoa gwelet morse den gand dilhad giz kêr. D'ar mare-se ne dremene war ar pont nemed brageier braz Goezeg, tokeier boulouzennet pôtre-doull Pleiben ha, beb eun amzer eur glazik bennag euz Brieg pe an Eder.

Setu perag, eur wechad, pa yeas ebioù eur gwaz dilhad bourbiz gantañ, euz ar seurt a veze grêt, eun tammig diwezatoh *dilhad lakez* outo, e chomas sebezet ar bôtred. Oll e tispourbellent o daoulagad o selled outañ heb kredi lavared eur grik. Pa oe eet pellig diouto, e klaskjont gouzoud piou a oa an istrogell-se, gwisket ken iskiz, a deue d'o bro heb mez da veza goapaet. Med den ne oe gouest da roi eur respont vad, nemed Yann an Dirêzon, lezanvet an Dich, a zigoras e henou da ziskleria : « Abaoe ma klever ano eus ar Gouarnamant, piou ahanom a hell lared e-neus gwelet anean ? Ha ne vefe ket hennez ar Gouarnamant-se a vez kement a gaoz diwar e benn ? » Ne gavas ket ar re-all abeg en e gomzou, rag petra gweloh o-dije kavet da lavared ? Hag e oent techet da gredi emede ar wirionez gand an Dich.

Eur wech-all, pell-braz ' zo abaoe, tost da bevar-ugent vloaz marteze, emede an aotrou Braz, kure Goezeg, o tond d'ar gêr war e droad euz bourh Pleiben. Mall a oa warnañ hag e kerze difrê gand e hent. En em gavet war ar pont nevez, ne gemeras ket amzer da roi eur zell zoken d'ar gorn-blegenn a ra ar stêr diouz tu ar Stêr-C'hourtê, ken kaer, koulskoude, gand ar gwez-pupli braz a zo a beb tu dei ha koad glaz ar Mogerou en-istribilh ouz ar roz a-uh d'he doureier.

A beb tu d'ar pont e oa, evel boaz, eun toullad mengleuzierien azezet war an diou vardell vein-benez, echu o devez ganto. Ma ne oant ket mezo, o-devoa doare, koulskoude, da veza evet meur a vanne.

Dre ama, n'ouzon ket hag heñ eo heñvel e leh-all, ez eus meur a bazenn e stad an dud ne vezont ket diwar an dour. Bez' e hellont beza bistrenket, tommet, tommet-mad, badaouet, rouz-vezo, mezo, mezo-mad pe vezo-dall. Lakeom e oa tommet d'ar re-ma ha ne gredan ket e rafem eur fazi braz.

« Salud deoh, pôtre ! » eme ar beleg, gand eur vouez laouen, en eur vond ebioù. « Salud deoh, aotrou kure ! » a respontas ar wazed. Med an Dich, seh e houlañchenn, a houlennas arhant eur banne digand an tremeniad. « Muioh a ezomm a vefe da denna diganeoh evid da lakaad ennoh, war a welan », a zistagas kema d'ar mengleuzier.

Moarvad ne blijas ket ar homzou-se d'ar hlasker-banneou rag, kintuz deañ o vond etremeg ar beleg, e lavaras : « Ma ne roit ket din gwercz eur banne, e vezoh talet ganin e-barz ar stêr war ho penn ! »

— Hopala ! ma denig, gwelloc'h pôtr evidoc'h a ranko beza an hini a gredo krogenn ennon d'ober din eur seurt tra ! » a oe respont ar hure, eun tamm mad a waz aneañ. Hag e kendalhas gand e hent, goude beza kaset an Dich diwar e dro.

**

D'ar mare m'emedede an heol o vond da guzad a-dreñv tuchenn Pennoù'h, e klañvas an Dich. Sammet e oa gand an derzenn hag e krene evel eur bern deliou. Diouz e dal mezevellet, e tivere eur c'hwezenn sklask. Evitañ da veza tennet meur a *deurenad* en e vuhez, n'en-devoa ket enfor o-dije troet morse an traou en dro deññ kement ha ma reant an abardaevéz-se. Ha, koulskoude, ne oa ket mezo-dall, nemed tommet hebken, evel m'am-eus lavaret.

En em ruza a reas d'e di ha ne oa ket hoaz noz tre pa yeas d'e wele, heb dibri tamm d'e goan. Peurlies, p'en-deveze evet muioc'h evid e lod, ne zalee ket d'en em roi da gousked. Med, ar wech-ma, kaer en-devoa troi ha distroi war e holhedad pell, ne gave tu êz ebed da ziskuiza. Gwasoh hoaz: ar beh a oa warnañ ne ree nemed kreski hag, en eun taol berr, setu dibradet e wele diouz an douar, gand eun nerz diaouleg bennag, ha taolet ar penn an neh aneañ e-leh m'emedede kent ar penn an traon.

Hogen ne oa ket echu ar c'hoari divalo. Nebeud goude a yeas ar gwele beteg toull an nor hag e kouezas eur zamm ken pouner war gorr ar mengleuzier, ma kinnige flastra dindannañ. Kredi a reas ar reuzeudig e oa unan-bennag war e horre oh e voustra hag e vouga didruéz. E-kreiz an deñvalijenn deuet neuze en ti, e klaskas gouzoud piou pe betra a oa kirieg d'an heskinerez-se, med, e zaoulagad leun a strafuilh hag e zaouarn o tispaha, ne weljont na ne gavjont netra.

Trohet e anal ha stravaget gand ar spont, e lammas er-mêz euz e wele da gaoud an dizober euz ar pouez iskiz her gwaske ken dizamant. Diambaf-kaer e oa neuze an Dich; treh e oa bet e gorrivad aon da nerz an evaj ha divadaouet-krenn an den. Siwaz ! ma oa divorfil e spered, e oa eet koz ha kabab e gorr en eun taol.

Chouket e wal-gein kement hag hini eun teurtig, ne oe ket evid he eeuna daoust d'ar beh a ree. Daoubleget ha stouet e rankas chom, e-giz m'e-nije bet eur gaouad remm kriz e chouk e gil. Lammet e oa war e ziouskoaz ar zamm her flastre kent war ar gwele, hag e puke brema e zivesker dindannañ. Sevel a reas e zivreh d'an neh hag, a-dastorn, e klaskas adarre an abeg d'e ziezamant. Ha pa yeas e zorn ouz eun dra bennag na wele ket hoaz, hag a gavas donjeruz hag hudur, e oe ken spouronet ma redas eur grenienn ankeniuz penn-da-benn e gorr ha ma tilmmas en eur skrijal, war dreuzou e di, da houlen sikour d'e vuhez.

Enkrezet gand an hopadennou a glevant, e tiredas daou zen

nebeud goude. Mignoned e oant d'an Dich ha gantañ emedent, war ar pont nevez, pa oa eet an aotrou kure ebiou. Unan aneo a oa Yann ar Holonier hag egile, eur mengleuzier ive eveltañ, lezanvet ar Haro-Bijoh. Sebezet-maroc'o oent o kavoud Yann an Dirêzon diarben ha war lost e roched, ken krommet hag eur wareg war-stenn, ar c'hwezenn o tivera diouz e dal hag an eonenn etre e zent. O gwalh o-dije c'hoarzet dirag eur seurt taolenn, paneve da liou ar spont a bare war e zremm ha d'an huanadou truezuz a deue euz e henou.

« Petra ' zo c'hoarvezet 'ta, Yann ! » emezo, souezet ha mantret. « N'ema ket an tan-gwall en ho ti 'mechañs ? »

— Petra ? » a zistagas an Dirêzon, stravaget gwasoh-waz, « ha dall oh 'ta, pôtrêd kêiz, pa ne welit ket ema Pôlig war ma chouk ha peg ennon gand e grabanoc'h ? Ya ! an Diaoul kernoc'h hag all, daou droad forheg deññ heñvel-mil ouz re taro braz Ti-Zal ! »

O klevoud komzoc'h ken diskiant, e tirollas ar Holonier hag ar Haro-Bijoh da skrigna ha da hoapaad, rag, war a gredent, e oa kollet e voulienn gand an Dich. Med hema, droug ennañ gand o godiserez, a zavas e vouez a-nevez: « Marteze », emeañ, « ne gredit ket abanon, genaoueien a zo ahanoc'h ? Ema ama, koulskoude, war ma hein hag e hellit gweled aneañ, kerkoulz ha ma ran-me, ma n'eo ket stanket ho taoulagad gand ar pikouzh!... Pouner eo ive, kenseurted paour, ha pladet e vin gantañ ma ne rit ket deññ tehed kuit ! Aiaou ! ma Doue, truez mar plij ! Petra am-eus-me grêt 'ta evid kaoud eur blanedenn ken paoniuz?... O hortoc'h petra emaoch 'ta, krenerien rag ho skeud, da stlapa aneañ diwarnon, e leh chom d'alvaoni evel ma rit ?... »

En aner e tispourbelle an daou vengleuzier o daoulagad : na liou na tres ne welent euz Pôlig. « Ma Doue ! Yann gêz », emeo, « petra ' zo krog ennoc'h 'ta ? N'eus diaoul ebed war ho kein nag en dro deoh. Moarvad eo touellet ho taoulagad ha gwella ho-peus d'ober eo mond en-dro d'ho kwele. »

— Didrouzit din gand ma gwele », a respontas an Dirêzon, « pa n'on ket gouest da badoud ennañ ! Goude ' ouzon mad petra ' laran ha, daoust din da veza heñvel ouz eun den furzod, n'eo ket kollet ma skiant-vad ganin. Sorset on ha netra ken hag anavezoud a rit, kerkoulz ha me, an hini e-neus grêt an taol... Hag ankouaet ho-peus 'ta ar zell kasauz e-neus taolet warnon an aotrou kure bremaig ? Ma ! hennez an hini eo e-neus digaset an diaoul war ma zro, war zigarez m'am-eus goulennet arhant eur banne digantañ ! »

Kouezet e oa an alvaon war an daou-all ha, ne vern pegen droch e komze an Dich, e teujont da gredi e belle beza gwir ar pez a lavare. Hervez m'o-devoa klevet diwar o 'fenn, e oa barreg ar veleien d'ober kalz traou iskiz ha dreist galloud an dud dizek, beteg lenn ar Vif, *koñjuri* ar re varo ha, zoken, killia an dud kerkoulz pe welloc'h hag ar zorserien.

Kenderhel a ree an Dirêzon da randoni : « Allas ! Doue », emeañ, « eur verzerenti eo chom da ziwaska kement-ma a boan ha n'on ket evid taloud ken. Dao ' vo deoh ober kazellig din ahann d'ar vourh, rag henoz e rankan mond da govez ha da houlenñ skoazell digand unan euz ar veleien. Setu m'en em daolas d'an douar, war e galabousou, ha ma lakeas e benn dindan an nor, o tiskrapa hag oh ober beh da vond en tu-all. Hogen koll a reas e boan hag e amzer, en desped d'ar zikour a roe deaÑ an daou-all o vunta warnañ. « Boud on gand an hailhon ivern-ma ! » eme an Dich d'e vignoned a-benn ar fin. « Kaer am-eus, n'on ket evid mond en tu-all, rag chom a ra peg em dioukoaz hag harp a gav d'e gernoù ouz an nor ! »

**

Ne gontin ket dre ar munud troiad on trikon mengleuzierien. Red eo gouzoud, evelato, em Pont-Koblant war-hed tri-hard leo diouz ar vourh, dre an hent tosta, ha n'eo ket hema an hini kompesa eus an tolead.

War-bouez mallozia ha termal e walh ha gand skoazell ar Holonier hag ar Haro-Bijoh, krog unan a beb tu en e zivreh, e teuas an Dich a-benn da dapa gorre ar zao hir a zo en tu-all da Harz-al-Lern ha da ziskenn, goude, beteg stankenn Bor-Kamm. Beteg neuze e oa eet, ruz-diruz ha stlej-distlej, da heul an daou-all, daoust deaÑ da glemm gand ar skuizder hag ar boan. Med, pa oe dao deaÑ sevel gand krebenn Stêr-Lap, e kreskas e verzerenti.

A-hed an hent, beb ugent pe dregont kammed, e ranke ober eun diskuiz, harp e gein gantañ ouz eur hleuz bennag. Ne ehane ket da lavared e oa sammet gwasoh evid gand daou zahad ludu griz, ar pezh na belle ket e zaou vignon da gredi pa ne welent ket atô netra warnañ. Ha chach-dichach hag harp-diharp, goude beza bet eun div eur bennag o tond gand an hent, e tigouezjont o-zri er vourh, an Dich ken chouket ha biskoaz hag e zaou genseurt brevet o horv war-lerh ar gwall-gefridi o-devoa bet d'ober.

Tavarn pe ostalidi, e-giz ma lavarere dre ama, a oa en ti kenta war an dorn dehou, evel ma roe da houzoud ar bod iliao stag en-istribilh a-uh d'an nor. P'en em gavas ar bôtred dirazañ, e c'hoarvezas eur burzud : kein an Dich, dizammet en eun taol-kont, a deuas ken eun hag eur vaz kled ! Sederat ha divebiet, e lammas ar reuzeudig gand ar blijadur ha, souezet-mik da heul eun dra ken dihorroz, e troas e benn da zelled war e leh. A-dreñv e gein e oa unan-bennag hag a anavezaz raktal, daoust d'an deñvalijenn, hag a hije deaÑ e zorn d'e bedi da droi en ostalidi da eva. E leh senti e tapas an Dirêzon hed e har, o reddeg par ma helle etremeg ar presbital, hag oh hopal d'e vignoned : « Hastom da dehed, pôtre ! Diskennet eo Pôlig diwar ma chouk hag ema brema, war dreuzou an ostalidi, oh ober sin deom da vond enni d'e heul ! »

Siwaz ! ne badas ket pell redadenn an Dich. A-veh e oa skaret kuit m'en em gavas ar pouez drastuz, war e ziouskoaz, d'e vaha ken

gwas ha kent. Med dirag dor-dal ar presbital, koz ha krignet gand an amzer ar penn an traon anei, e soñjas beza kavet an tu d'en em zizober euz e zamm. Ma hellje tremen dre zindanni e chomje hema war e lerh, moarvad, hag e-nije amzer da vond da houlenñ skoazell digand unan euz ar veleien. Setu m'en em daolas d'an douar, war e galabousou, ha ma lakeas e benn dindan an nor, o tiskrapa hag oh ober beh da vond en tu-all. Hogen koll a reas e boan hag e amzer, en desped d'ar zikour a roe deaÑ an daou-all o vunta warnañ. « Boud on gand an hailhon ivern-ma ! » eme an Dich d'e vignoned a-benn ar fin. « Kaer am-eus, n'on ket evid mond en tu-all, rag chom a ra peg em dioukoaz hag harp a gav d'e gernoù ouz an nor ! »

Kalz trouz a rejont o-zri evel-se, ken a deuas mevel ar presbital da zigori an nor, o kredi e oa unan-bennag deuet da glask ar beleg war-dro eun den klañv. An aotrou person, diouz e du, e-nevoa bet an heveleb soñj hag a oa savet euz e wele da wiska e zilhad. D'an ampoent ive, diwezad o tistroi d'ar gêr war-lerh he devez, e chomas Saig ar Briz, eun devezourez euz ar vourh, sebezet hag alvaonet dirag an ardou a oa gand on tri istrogell.

Kerkent ha digoret an nor vraz gand ar mevel, e sailhas an Dich er porz, kresket e nerz evel dre vuzud. Ahane e welas e oa goulou e-barz unan euz kambroù ar presbital hag, heb selaou ar mevel a lavare deaÑ emede o vond da hervel unan euz ar veleien, e kerzas d'an neh gand an diri, ar buanna ma ouie. Heb skoi war an nor, e yeas tre er gampr en eur grial a-bouez penn : « Kovesait ahannon, mar plij, rag emañ o vond da veza dastumet gand an diaoul da gas gantañ ! »

— Ha c'hwi eo, Yann ? » eme an aotrou person oh anavezoud an Dirêzon, unan euz e zisterra parrezioniz. « Penôz e kredit dond d'ar presbital d'an eur-ma da houlenñ beza kovesat, c'hwi ha ne deuit war-dro beleg ebed nemed eur wech ar bloaz, a-rôg ho pask ? ha gwall-glañv oh 'ta ? Me ' zoñj kentoh ho-peus evet eur banne re hag e vefe gwelloc'h deoh distroi d'ar gêr ha dond diwezatoh d'an iliz da amzav ho pehejou, pa vezoh diwar an dour. »

— Me n'on ket mezo ! me n'on ket mezo, aotrou person ! » eme an Dich. « c'hoant ruz am-eus da govez pe, a-hend-all, e vin klozet dizale e puñs an ivern. Aiaou, ma Doue, ho pet truez ouzin ! »

— Goustadig ! goustadig ! » a drobas ar beleg o weled an Dich ken ankeniet ha glaharet hag o soñjal, piou ' oar, e oa bet tizet ar mengleuzier marteze gand gras an Aotrou Doue. « N'eo ket ama ema ar hiz ganin da govez an dud hag, hervez gweled, n'emaoh ket o vond da vervel dioustu. Deuit ganin d'an iliz : eno ema ma badorgovez. »

Eur gerseenn e-nevoa Yann an Dirêzon da veza eet e kamp ar person ha n'eo ket e hini ar bure, evel m'e-nevoa c'hoantaet, rag

ouz hema hebken e falveze deñ kaoud savar. « Mar plij ganeoh ha ma ne vern ket deob, aotrou person », emeañ o termal hag o tarlaskad, « e kavfen koulz kovez ouz an aotrou Braz... »

— Kovez ouz an aotrou kure ? » a zistagas ar beleg koz, feuket eun disterra. « Marteze e kav deoh n'on ket ken gouest hag heñ da govez ha da roi an absolvenn ? Ouspenn ma n'ema ket e zizunvez, an aotrou kure a zo kousket, ha n'eo ket ganin-me e vo dihunet, d'an eur-ma, da zond war-dro eun den yah ! N'ho-peus ket a vez o tond ama heb digarez mad ebed, c'hwi vak a-walh war an deiz war-lerh ho labour ? N'oh ket klañv p'ho-peus gallet ober an hent war ho troad beteg ar presbital ! Ma sentfen ouz ma imor, sellit, e tis-kouezfen deoh e pe leh eo bet faziet ar mañsoner ama ! Ha, brema, m'ho-peus c'hoant da govez dioustu, deuit ganin d'an iliz pe, a-hend-all, emañ o vond en-dro d'am gwele ! Med ma 'fell deoh amzav ho pehejou ouz an aotrou kure, e vo dao deoh gortoz abañ d'ar-hoaz ! »

Ne gredas ket an Dich poueza birroh war ar gaouz ha, drouk-laouen, e heulias an aotrou person d'an iliz. E-keit ha ma oe ar beleg o wiska e zurpiliz hag o taoulina da lavared eur bedennig a-rôg troi er gador-govez, e hastas Yann an Dirêzon, sammet atô gand e veb diaouleg, da zouba e benn en eur piñsin, da eva dioutañ ha da strinka dour benniget outañ e-unan a heb tu, goude beza taolet boza-dou aneañ en e gerhenn hag e mañchou e chupenn. Dre ma ree e orbidou, eh esae deñ hag e skañvae ar zamm a oa war e gein. Hag heñ goude daved ar beleg ha da amzav outañ a vouez uhel ha gand keuz ha glahar, dirag e zaou vignon en em gavet ive en iliz, ar pehejou hag ar falloniq a vroude e goustiañs. « Peoh ! peoh ! nebeutoh a drouz ! » eme an aotrou person. « It da zaoulina er gador-govez ha bezit sioulloh, mar plij ! »

Pa zavas an Dich ahane, tapet gantañ an absolvenn, goude beza diskuilhet kement a oa bet oh ober diêz deñ, eh en em zilas eun dudi dreist-natur en e galon hag eh en em gavas dizamm-tre euz ar pouez milliget a oa kent war e gein. Ken sonn e gorr hag hini eur pôtr yaouank ugent vloaz, e tistroas d'ar gêr gand e zaou gen-seurt, goude beza trugareket an aotrou person.

Hogen ma oa laouen da veza en em dennet euz a-dre krabanoù Pôlig, e chome, koulskoude, nehet ha prederiet e spered. Ya, piou 'oar petra a oa hoaz da c'hoarvezoud gantañ pa n'e-nevoa ket bet digand an aotrou kure ar pardon e oa deuet da glask ? Hag echu e oa brema e drubuilhou da vad ? Daoust d'ar zôñjou teñval-se, ne reas nemed eur housk beteg div eur goude kreizteiz antronoz, ken brevet e oa e gorr abaoe an derhent...

*
**

Ne oe ket gwelet, an deiz-se, Yann an Dirêzon o labourad er

vengleuz nag oh eva en ostalidiou. Abaoe ma oa savet euz e wele, n'emed ket tre war e du hag e oa kroget eun tammig terzenn ennañ. Daoust ha chomet e oa warnañ eur roud bennag euz beli an droukspered ? N'on ket evid lavared, med ar pez a zo gwir eo e rede ar vrud, dre Bont-Koblant, e-nevoa diskleriet an aotrou kure ne oa nemetañ hag a hellje dizamma an Dich da vad, rag heñ e-unan eo a oa bet o lakaad pouez deñ war e chouk.

Dond a reas ar homzou-se da wir. Dre ma tostae an abardaez, e oa eet berr-anal an Dirêzon ha savet eur c'hwezenn yen war e dal. War-hed emede euz eur reuziad-all ken gwaz hag hini an derhent. Hag, e gwirionez, a-benn nebeud goude e steredenne e zaou-lagad skoelfet hag e harme d'an amezeien troet en e di d'ober eur gwel deñ : « Dallet on gant liou euzuz an heol a zo du-ze, ken ruz hag eur mell glaouenn-dan, a-uh Koad ar Mogerou ! » Neuze, en eun taol-kont, e yeas e gorr adarre e daou bleg gand ar zamm ankeniuz deuet d'e waska a-nevez.

Ne grede ket mond d'e wele gand aon da veza mouget gand ar gwall bouez-se a zavje hoaz war e vruched, moarvad. Klemmuz ha sempl e vouez, e pedas Fañch ar Bozeg, ar mestr-mengleuzier, deuet ive da houlenn kelou aneañ, da glask an aotrou kure da zond raktal war e dro. « N'eus nemetañ », emeañ, hag a zo barreg da zizorsa abanon, rag heñ an hini eo e-neus taolet ar gwall-blanedenn-se war ma gorre. »

Fañch, ar gwella hag an didrousa euz gwazed ar barrez, a oa lesanvet « An Den Dous » gand ar vengleuzierien. Truez a gemeras ouz an Dich hag e kerzas d'ar vourh, daoust ma oa noz a-benn neuze. An aotrou Braz a gavas er presbital hag e tisplegas deñ perag e teue d'e glask. Med, da genta, ne ziskouezas ket ar beleg beza goubet d'e zelaou, rag gwall fentuz e kave froudennoù an Dirêzon, ar mezhvier-se treveliet e benn gand ar gwin-ardant, evel ma ree outañ, hag e nabas dond d'e gavoud. Ar mestr-mengleuzier her pedas ken start, koulskoude, ma reas e venoz da zenti outañ a-benn ar fin, hag e yajont o-daou en hent.

Pa zigouezjont e ti an Dich, an noz-se, emede an oll war-zao e Pont-Koblant, bjr vilhet o 'fenn o hedal eun darvoud iskiz bennag da c'hoarvezoud. Reuzeudik ha mezeg, e houlennas ar mengleuzier digand an aotrou kure pardoni deñ e gomzou hag e hour-drouzou dizoare. Asanti a reas an aotrou Braz, gand ma prometje egile chom divezo hiviziken. Ha goude m'e-nevoe touet an Dich war e le na evje ken nemed peadra da dorri e zehed, e tehas dioutañ, en eun taol, ar zamm euzuz a flastre deñ e ziouskoaz hag eh en em gavas ken yah ha ken skañv ha diagent...

Hogen war-lerh an dra-ma, ma ne oe ket atô den d'e her, e hellan diskleria, heb aon da fazia, ne glaskas ket Yann an Dirêzon, morse ken, kaoud gwerz an disterra banne digand beleg ebed.

GERIOU NEBEUD ANAVEZET

Lakaad war ar hoch	Kemer e termen, e kred; ober eun ask war eun tamm koad evid derhel soñj euz priz eun dra kemeret e kred.
Hanter-gal.	Hanter-galopin (war-dro eur hart litrad).
Ar spledadou to . . .	Filons de schiste (galleg).
Meur a deurennad.	Teurennad = gwall-govad.
Stravaget	Spontet, spouronet.
Lenn ar Vif	Lenn leor an igromañs.
Boud.	Beza boud = beza trehet.
Goubet da	Tuet, douget da... « Goubet » a dalv ive kement hag « amateur » e galleg.



Lennit

Bleun-Brug

Chomleh : « Bleun-Brug », 21, rue Jos.-Doury, Nantes.

Komanant : 500 lur (Komanant a enor : 600 lur. — Komanant-madoberour : 1.000 lur).

C.C.P. 1541-90 Nantes.

Mar fell dech beza ezel euz ar BLEUN-BRUG, pe rei ho skoazell, kasit ho skodenn da

V. Seite, « Bleun-Brug, Châteauln (Finistère)
C.C.P. 544-22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

Askoan ar Memener

revallan

Deuet e oa an diskar-amzer hag ar miziou du n'emedent ket pell. War lein an tuchennou, kerkoulz hag e gouldid ar stankennou, eh en em zile eun avel dreut, bilimus ha sklas: anal ar goañv o tostaad. Krena a ree ganti ar gwez, evel astud chugudet gand an anaoued hag ar baourentez. Dalhmad o vond war greñva, e hije didruez ar fourradou feulz ar skourrou kinvig ha kraboteg. Ha dreist ar hamboulennoù, e nije diouto, evel strolladou lapoused pennfollet ha dall, deliou eet rouz ha distumm, echu o amzer ganto. Ha beb eun tamm, dre ma tostae an noz, skañvig ha munud da genta, e kreske hag e wasae ar glao, o lakaad an deñvalijenn d'en em leda buannoh hoaz war ar vro. Dizale e oe barradou ken gwaz ma veuzent ha ma tirañvent an heñchou hag ar harroñchou.

Dichadennet e oa ar gwall-amzer hag:

Eüruz an neb en devoa ti

Rag, er-mêz, ne bade ket ar hi.

**

Er penn-ti bihan, e gwasked eur mell kleuz garzet a geuneud dero, e oa sioul pèb tra. Trouz ebed ennañ nemed hini an tan o traskal war an oaled, e-keit ha ma yude an avel e lein ar ziminal. Beb eur mare e tislonke homa, dre zindan he mantell, bouliou teo a voged taguz hag a lakee da deñvalaad sked ar flammou o tañsal war an oaled hag hini ar goulou-lutig en e gantoler war gorn an daol-voued.

War ar penn uhella d'an daol, e-kichen eun dorz vara paket e-touesk eun doal lein groz, eur plad, eur skudell hag eur voutailhad sistr o-devoa doare da veza o hortoz unan-bennag da zond d'e bred. Ouz an drezenn e oa eur gaoter, eur meuz bennag o poazad enni, padal emede kazig rouz an ti war an oaled, o lavared e gredo penn e 'fri el ludu.

Hag o vond hag o tond dirag he zan, e-ser teurel evez ouz ar meuz emede oh aoza, eur vaouezig eet war an oad, eur boned-noz gwenn ganti war he fenn, a huanade beb eur mare hag a zehe, gand korn he zavañcher, an daelou a lakee ar moged da bizenna e korn he daoulagad.

*
**

En eun taol-kont e wigouras an nor o tigori, buntet euz an diavêz gand eur stokadenn nerzuz. Hag eh en em gavas eun den en ti, eur mell gwaz yaouank hoaz, an dour-glao o tivera diouz e zilhad gleb-teil.

« Ahanta! Chann », emean, laouen deñ. « 'm-eus aon emær ken brao ama hag er-mêz dindan ar glao pil-polos! »

— Chê! c'hwi an hini eo, paour kêz Per? » a zistagas ar vaouez oh anavezoud an hini a oa o paouez dond tre. « Petra ' zo a-nevez 'ta p'emaoh war vale ken diwezd dre eur seurt amzer? »

E leh respont, e houlenas an den kerkent war he ger: « Ha n'eo ket en em gavet ar hemener hoaz diouz e zevez, pe eet e vefe d'e wele pa n'eus liou ebed anean en ti? »

— N'eo ket digouezet Laou er gêr hoaz », emezi. « Gwelloh e-neus kavet gortoz, moarvad, ken a vo tavet ar glao a-barz kuitaad ar Rodoig, e-leh ma 'z eo eet d'ober eun devez-gwriad e ti Lan ar Hefeleg. Med lakait eun azez da gemered eur banne sistr, e-ser deport anean da zond abane. N'eo ket boazet da veza ken diwezd-ma oh echui e zevez ha ne greddan ket e talefe pell-braz ken. »

— Ma rank gortoz ar glao da devel, n'eo ket prest d'en em gavoud ama hoaz », a lavaras Per. « War wasa kentoh e ya an amzer. »

Eur banne sistr he-devoa diskarget ar vaouez deñ ha, goude beza lavaret « Yebed! », e stagas ar skudell ouz e benn.

« Ezomm ho-peus euz ar hemener du-ze marteze, Per? » emezi neuze.

« Ezomm awalh sur », a respontas an den, « pa 'z on deuet beteg ama dre eur seurt amzer. A-benn dimeurz penn-zizun emæred mab Fañch Kêrgeleenn, on amezeg. Ma breur Yann, hag a oa e dro da vond d'ar friko, a ranko chom er gêr gand ar gwiskad beskij ^{hannod} a zo deuet e chouk e gil. Da genta e krede e vijent pare a-benn neuze, med gweled a ra brema eo boud ganto, ha setu ma vo dao din mond en e leh da frikota. Med, gwasas pe ' zo, ma dilhad sul n'int ket brao a-walh ken hag e vo red din kaoud re nevez. Ha, peogwir ne vo ket hir an dale abann di, e teuan da glask ar hemener da zond duma, a-benn arhoaz vintin, d'ober din ar rumm-dilhad a rankan da gaoud. »

— O! mond a ray sur, rag c'hwi a zo unan euz e wella ostizien hag, evid amzao ar wirionez, n'e-neus ket losa a labour brema. Bezit dineh 'ta, ha fiziit warnañ heb mank. »

Emede Per o vond da gimidi diouz gwreg ar hemener, pa dao-

las evez e oa staliet an daol evid preda: « 'M-eus aon », emean, « ne vez ket koan a-bred ganeoh en ti-ma! »

— Din-me eo koaniet pell ' zo, Per baour », emei. « Med, siwaz! Laou a zo ken figuz ma ne blij ket deñ ar boued e-nevez e leh-all ha ma rank kaoud bemnoz eun tamm askoan war-lerh e zevez. Lakeet em-eus evitañ eun tamm kig dous da rouza er gaoter ha bremaig, a-barz ma yay d'e wele, e houlenno, hoaz ousspenn, eun hanter-dousenn grampeuz fritet. »

Huanadi a ree ar vaouez, dare da ouela ha tres an anken warni. Hag hi adarre gand he mouez glaharet: « Allas! revinet on gantañ, rag ar pezh a vad a vez en ti-ma a ya oll en e gory. Ne bad ket e dammig gonidegez da brema boued mad deñ ha, pa ne vez ket pasturet a-walh war e veno, e laka an aotrou ma zamm korv da zamanti, rag n'eus ket kalz a wazed-all ken gwallon hag heñ pa ya droug ennañ! »

Mezeg da genta hag en eur dermal, e tisplegas ar wreg reuzeudig ar vuhez kalet a ree dei he 'fried. Diouered a ree ar peb reta evid ma raje chegenn he gwaz hag e tape fest ar geuneudenn pa ne gave ket heñ druz a-walh ar geusteurenn.

Truez e-nevoe Per outi hag e klaskas he frealzi. A-barz kuitaad an ti: « Arabad deoh », emean, « en em jala ken; me ' oar penôz tenna ar giziou dizoare-se dioutañ. Klaoustre ne vo ket klevet ken o houlen askoan diwar henoz! » ^{ci soa} *de p'ant que*

*
**

Ma oa Per eur farser, leun e benn a droiou kuz, ne oa ket enn den flao ha n'eo ket war e lerh e veze klevet ano euz an troiou-kamm e-nevoa ar vrud da c'hoari d'e nesa. N'on ket gouest, eta, da lavared petra a ijinan an noz-se. Ma klask al lenner divinoud, n'eo ket sur kennebeud da ziluzia ar gudenn difazi, rag darvoudou sebezuz en em gav a-wechou, digompren-kaer deom, dreist-oll pa zellont ouz traoù ar Bed-All, ar pezh a c'hoarvezas ar wech-ma...

Hogen er Rodoig, goude e zevez-gwriad, e oa eet Laou ar hemener, war-lerh e goan, da lakaad eur hornad butun e korn an oaled, da hortoz ar glao da devel a-rôg distroi d'ar gêr. Met gwasaad a ree an amzer hag e kreske ar barradou foll. Diwezd-mad e oa pa sklê-raas an oabl ha pa davas ar glao.

Kerkent ha ma kavas deñ e hellje mond kuit heb beza rehlebet, e kemeras foet an nor hag e hastas da droha hent, gand aon rag ar haouajou. Hogen war-hed eur pennad abane, e-kreiz eur stankenn zon, e-nevoa eun *dourig*, pe eur roudour, da dremen. A-veh en em gavet eno, e krogas ar glao adarre da goueza a-varazadou. Treuzet e zilhad gand ar barrad spontuz, e yeas ar hemener da glask ar

— 35

gwasked dindan eur vodenn gelenn. Med ken braz e oe ar horvad aon a dapas eno, ma redas kuit evel eun tenn, en eur lakaad sin ar groaz en e gerhenn.

M'o-deus ar gemenerien ar vrud da veza aonig ha da sponta heb digarez, n'eo ket heb abeg, koulskoude, e oa stravaget Laou ar wech-ma. Euz a-dreñv ar vodenn gelenn e oa diskoachet eur mell korv den. kuzet penn, kil ha troad gand eul liñser wenn, hag eul letern war enaou gantañ en e zorn. Ha seul-wasoh e tenne d'eun tas-mant pe d'eur spes, ma stleje d'e heul eur jadenn houarn o ruza gand trouz war ar wenodenn, ha ma laoske, dre ma kerze, klemmou euzuz ha mantruz da glevoud:

Fest-koan goude koan
' Zalh an Anaon e poan!

Ker prim hag eul luhadenn e rede ar hemener, egile raktal war e zeuliu. War unan euz ar vein lakeet en eur renkennad evid treuzi ar roudour euz an eil ribl d'egile, e reas Laou eur barvachadenn. Astok e gorv e tiruilhas en dour, med, ken prim ha tra, e savas abane ha yao hag en hent adarre, e-giz ma vije bet an diaoul war e lerb. En tu-all d'an dour, e krimpas difrê gand eur roz uhel, etremeg eur mell gwaremm leun a vanal stank, kement ha sao eun den.

Siwaz! beb deg kammed e tape eur mell pezh lamm ha, bewech, e koueze war e henou. Spouronet muih-mui, e kredas e oa sorset ar valaneg, rag bodennou, skoulmet a-dreuz ar wenodenn, hen diskare didruez e-kreiz an deñvalijenn, pa luge e dreid enno. Ha bepred e kleve ar reuzeudig trouz ar jadenn o tispenn e roudou ha mouez ar spes o tistaga hirvouduz an heveleb komzou:

Fest-koan goude koan
' Zalh an anaon e poan!

Pell e padas ar gwall-c'hoari dindan an amzer dirollet, a-dreuz an douar aret, ar gwaremmadou lann hag ar harroñchou prielleg. P'en em gavas ar hemener dirag dor e di, e oa eet d'an eurvar hag e krene gand ar spont, evel eur bern deliou. Hag eur wech hoaz, heguz ha dicheg, e tregernas, a-dreñv e gein, ar gourdrouz skrijuz:

Fest-koan goude koan
' Zalh an anaon e poan!

*
**

Pa lakeas e dreid en ti, e tiffake gant ar verr-anal hag e yeas da hourvez pe gentoh, d'en em deurel war bank ar gwele-kloz. Eet e oa gwenn-kann e vlep, gell-du hoaz an deiz-se diouz ar mintin, ha ken gwall-livet e oa e zremm, m'he-devoe poan e wreg oh e ana-

vezoud. Ne dintas grik hag e chomas motet, e zaoulagad dispourbellet ha leun a enkreuz.

Goulenn a reas ar vaouez petra a oa c'hoarvezet gantañ, med ne deuas ket eur gamz euz e henou, e-giz ma vije bet skoet e deod. Hag hi neuze da lakaad war an daol ar meuz a oa ganti war an tan. « Poent a oa deoh' en em gavoud », emezi, « rag dizehet eo an tamm kig-ma hag eet da netra, keid-all ' zo m'ema aze o hortoz ahanoh! »

E leh sevel da vond ouz taol, e sellas ar hemener gand euz ouz ar hig fritet o tivogedi. Dinerz e vouez hag o krena, e vegelias d'e wreg, kouezet ar zabatur warni: « Doue ra viro e tebrfen euz ar hig-se! Sinadou am-eus bet ha trañsizonet on brema da viken, rag

Fest-koan goude koan
' Zalh an anaon e poan! . .

Yeun AR GOW.

GERIOU NEBEUD ANAVEZET

Chugudet	Tamolodet, daougrommet gand ar yenijenn pe an dienez.
Heskiji	Hesked, heskiji pe heskidi = goriou (galleg = furoncles)
Losa a labour	Nemeur, dreist kont.
Chegenn	Tinell vad, chervad.
Trañsizonet	Reketet, strailheret.

Per HELIAS

Piou e-neus lazet an hini koz?

Darvoud - polis,
bet skignet gand Radio-Kimerh
d'an 3 a viz meurzh 1957. ⁽¹⁾

(1) C'hoariet gand:

Ivona ABIVEN	oh ober	NAIG
Jeva LAURENT	—	GAID
Per TREPOS	—	LOM
Per HELIAS	—	An Aotrou LAGADEC

I

LAGADEC (o komz en telefon)

Alo, Ya, ar homiser Lagadeg? Me va-unan! Piou? Sekretour an ti-kêr e Landergad? Ha petra nevez a zo ganeoh? Eun droug-laz! O! o! Piou a zo bet lazet?... Mestr Kerdrenket! E peleh emañ Kerdrenket? A, mad-tre, gweled a ran... Ya, dioustu. A-benn ugent munud. Gortozit abanon ha ne leuskit den ebed da dostaad ouz ar horv. Nag ar vugale kennebeud! Den ebed. An oll draou evel m'emaint. Kenavo dioustu! (*Gervel a ra eur polis.*)

Lousouarn, c'hwi a deuo ganin da Landergad, ha prim. Eun den koz a zo bet lazet, sur awalh, e Kerdrenket. Kerzit buan da glask ho kamalad ar Gwivarh, hag ho-taou en oto, dirag an nor... Prim-tenn!

Hum! Eun den koz, eur mab ha diou verb, eun tiegez pinvidig, n'eus bet laeret netra. Petra zo c'hoarvezet? Eom da weled!

(*Trouz an oto o vond kuit.*)

II

(*E Kerdrenket.*)

LAGADEC, LOUSOUARN, GWIVARH, LOM, NAIG, GAID

LAGADEC

Lousouarn ha Gwivarh, chomit a beb tu d'an nor ha mirit ouz peb hini da dostaad. Me em-eus evid eur boutadig amzer gand an dud-mañ. Ma tigouez an aotrou Mêr, e kasoh kelou din dioustu.

A! Gwelom penaoz e vo diluziet ar gudenn-mañ! Piou e-neus kavet ar horv, da genta?

LOM

Me. O tistrei deuz ar park gand eur harrad melchon.

LAGADEC

Piou oh-c'hwi?

LOM

Lom, ar mab koz. An diou-mañ a zo va hoarezed, Gaid ha Naig.

LAGADEC

Bez ez eus tud all en ti?

LOM

Den all ebed.

LAGADEC

Na bugale?

LOM

Na bugale. N'on ket dimezet, na va hoarezed kennebeud.

GAID

Talvezoud a ra ar boan dimezi, p'eo ken 'fall ar baotred?

NAIG

Ha kaoud bugale evid gouzañv beb seurt dismegañs diganto, eur wech m'int deut braz. Evid selvij dezo da vatez e-pad ar vuhez penn-da-benn. Ar gwella gwaz a zo war an douar ne dalvez ket eun taol botez. Hag ar merhed a zo falloh hoaz.

LOM

Homañ ne raio ket peoh? Ma ne vefe ket bet ar homiser amañ, hag... an tad marq, war an oaled, ne vefen ket bet pell o krenna deoh ho fri, plahig.

GAID

Sellit 'ta! Hemañ e kred dezañ dija eo deut da vestr. N'eo ket eet an tad en douar hoaz, Lom, hag a-raog ma yelo, marteze e vo red gweled...

LOM

Gweled petra, beg toull?

LAGADEC

Ta, ta, ta!! Arabad eo en em zebri. Strafuilhet oh ho-tri, gouzoud a ran, gand an darvoud a zo c'hoarvezet hirio, med ne gollit ket ho penn. Ezomm em-eus ouzoh evid gouzoud penaoz eo... Lom, neuze e oah o tistrei deuz ar park gand eur harrad melchon. Ped eur e oa?

LOM

War-dro deg eur, n'on ket evid lavared gwellob. War ar mêz, n'emaer ket atao o selled ouz an eur, e-giz er hêriou. Ni a ra deuz an heol.

LAGADEC

Feiz sur. Med abaoe tri devez n'eo ket bet gwelet an heol.

LOM

Gouzoud a ran demdost deuz an oabl. War-dro deg eur e oa. P'eo bet echu ganjn diskarga ar melchon, on deut d'an ti da eva eur banne traou, rag o tarza gand ar zehed e oan.

NAIG

Atao o tarza gand ar zehed, hennez. Ha n'eo ket dour ar puñs a ziskenn en e gorr, m' hel lavar deoh!

GAID

Leuskit Lom da gonta ar gaoz, Naig. A-hend-all ne vo ket echu ganeom a-raog mare goro ar zaout.

NAIG

Hañ! Me gav din, bremañ p'eo maro an tad, em-eus aotre da gaozeal en ti-mañ, n'em-eus ket! C'hwï eo ar vestrez?

LAGADEC

Kendalhit, Lom!

LOM

Netra muioh! Pa 'm-eus digoret an nor vihan evid dond er gegin, em-eus gwelet, war an taol, an hini koz kouezet a-stok e gorr en tan. Ken e oa devet dezañ e jupenn hag e jiletenn hloan. Med an tan a oa maro. An tad a oa boazet da jom da domma war an oaled penn-da-benn an devez, abaoe ma oa deut re goz evid labourad er parkeier. Da gepta, em-eus soñjet e oa bet diskaret an hini koz gand eun taol-gwad, P'on tostaet outañ, avad, em-eus gwelet e oa bet lazet gand eun taol fuzul. Eun hanter-dousenn drajeou e-neus paket en e benn.

LAGADEC

Klasket ho-peus ar 'fuzul?

LOM

N'eo ket bet red din klask pell. Ar 'fuzul a oa stlapet e-leh m'emei. Sellit! War holhed ar gwele-kloz. N'em-eus ket cheñchet plas dezi e mod ebed. Gouzoud a ran, pa hoarvez eul lazadeg, divvennet eo teurel an daouarn war dra pe dra.

LAGADEC

Mad ho-peus greet. Ha goude?

LOM

Goude, on eet d'an daoulamm d'ar vourh, da glas kelou d'an ti-kêr.

LAGADEC

E peleh e oa ho tiou hoar?

GAID

Me a oa o soursial deuz ar zaout, e Park ar Stankenn.

NAIG

Ha me em-eus kavet va breur er vourh. Eet e oan da brena traouigou evid an ti, peogwir ar gegin a zo din d'ober.

LAGADEC

Mad. Esoh e vefe bet din ober an enklask ma vefeh bet o labourad asamblez ho-tri p'eo digouezet an taol.

LOM

Amañ, peb hini e-neus e labour hag e du. Kuit deom da gaoud fachiri. An traou a ya gwellob, seul nebeutoh en em welom.

GAID

A zo gwir. Peb hini a zo mestr war e labour. Ar zaout a zo war va hont ha ne 'fell ket din e tostafe den all ebed outo.

NAIG

Me a zo mestrez war an ti, penn-da-benn. Ar wazed n'o-deus netra d'ober war-dro an ti. Aualh eo dezo ober al lezenn en diavêz.

LOM

Ober a ran forz gand ho saout pe gand ho ti, loudourenned! Dre m'on-me mestr war ar marh hag ar stal-labourad-douar, ne hou-lennan netra muioh. Gand ar merhed n'eus netra da honid, nemed trouz.

LAGADEC

Mad, mad, mad-tre. Den ouzoh n'e-neus klevet an taol fuzul?

GAID

Re bell e oan.

NAIG

Me a oa pelloh hoaz, koulskoude!

LOM

Evidon-me, tostig aualh e oan, med an avel ne gase ket war va zu.

LAGADEC

N'ho-peus gwelet den ebed o tostaad ouz an ti?

LOM

Den ebed. Ne teu ket aliez tud war on tro, amañ. Ouspenn-ze, Kerdrenket a zo anavezet evid beza eun douarenn loened gouez. Ablamour d'ar merhed, ha n'int ket gouest da lakaad eur bannig d'eva nag eun tamm bara da zebri da zen ebed. Hag an hini koz a oa gwasoh hoaz.

NAIG

Re ger eo ar boued da veza drouzivet.

GAID

Ha re ger an amzer da veza kollet. Ma rankfem selaou ouz ar baôtred, ez afe ar stal ganeom war an douar abarz pell.

LAGADEC

Da biou eo ar 'fuzul?

GAID ha NAIG

Da Lom eo!

LOM

Din-me eo, ya. Med pell-zo n'em-eus na boled na drajenn ebed da lakaad enni. Re ger, hervez ar merhed-mañ.

LAGADEC

Ma, aualh em-eus klevet evid bremañ. Chomit war-dro an ti, ho tri. Na bellait ket. Me a rank mond d'ober eun dro da weled peb tra. Marteze ez eus chomet eur roud bennag war-lerh an drouglazer. Red eo din ivez gouzoud roudou daouarn piou a zo war koad ar 'fuzul-mañ. Goude kreizteiz, me a halvo abanoh, an eil war-lerh egile. Esoh e vo din selaou pa ne vezoh ket tri o prezeg asamblez.

LOM

Daoust hag e kredit, aotrou komiser, e-nefe unan ouzom lazet an tad?

LAGADEC

Ne gredan netra ebed. Va micher eo klask. P'am-bo kavet, me a lavaro penaoz, perag ha piou.

III

(Goude kreizteiz.)

LAGADEC ha GAID.

GAID

Perag ho-peus galvet abanon dirazoh, aotrou komiser. Amzer gollet. Me n'ouzon netra ebed. E Park ar Stankenn emedon gand va zaout.

LAGADEC

Gouzoud e ran. Hervez pezh a gont an dud, c'hwi, Gaid, a oar mad-tre penaoz ober war-dro al loened-se. Kaerra saout ar barrez eo ho re. Hag amann Kerdrenket eo gwella amann a vez tañvet war an tu-mañ. Bez e teu marhadourien a-bell d'e brena diganeoh.

GAID (*lorh enni*)

Klevet ho-peus? Gwir eo. N'eus maouez ebed par din evid sevel saout hag ober amann mad. Maouez ebed, er hanton.

LAGADEC

Lavaret a zo bet din, e peb tu. Koulskoude, abaoe eur miz ben-nag, n'eo ket ken druz an amann ganeoh, na ken mad al lêz, war feiz tud a zo. Ha treutoh e kaver ho saout ivez, Gwir eo?

GAID

Gouzoud a rit an dra-ze? C'hwi a zo eun diaoul a zen.

LAGADEC

N'on ket eun diaoul a zen, med va diskouarn a zo digor braz.

GAID

Spontuz eo. Kaer em-eus ober evel m'on boazet, va zaout a ya da 'fall ganin. Mied n'on ket da veza tamallet evid kemend-se, aotrou. Selaouit mad! En ti-mañ ez eus unan bennag hag e-neus taolet an droug war va zaout, ya, eur zorserez bennag, pe marteze eul lou-zaouenn vinimus da vaga ar hleñved.

LAGADEC

O, piou a vefe fall awalh? Hag ouspenn, c'hwi a zo atao a-dreñv lost ho saout. N'eus nemedoh-c'hwi hag a ra war o zro, n'eo ket gwir?

GAID

N'eus nemedon, med e-pad m'emaon o kousked? Pe pa yan d'an overenn d'ar zul? Bez e rankan kuitaad al loened paour a-wechou. N'emaer ket pell o trenka o lêz d'ar zaout. N'eo ket diêz tostaad ouz o neo, p'emañ ken tost ar marchosi ouz ar hreñch. Hag hennez a zo troiou en e gory.

LAGADEC

Hennez? Piou, hennez?

GAID

Ma... An hini e-neus kaset din va zaout da 'fall.

LAGADEC

A ya! Med ni a zo amañ o klask gouzoud piou e-neus lazet ho tad, Gaïd. N'ho-peus netra nevez da ziskleria din. A-wechou, dre zoñjal, e kaver traouigoù bihan, pa deuler evez, hag a zo enno kalz a bouez.

GAID

Netra nevez, aotrou komiser. D'am meno, ma hellit kavoud piou e-neus taolet ar 'fall war va zaout, e vezoh tost da houzoud piou a

zo bet digoustiañs awalh evid laza on tad. Ha marteze n'emañ ket pell, hennez. Piou oar!

LAGADEC

Me a glasko piz, Gaïd. Bremañ, kerzit war-dro ho saout. Red eo din gelver ho preur Lom, da houlenñ digantañ...

GAID

Va breur Lom! N'em-eus lavaret netra diwar-benn va breur Lom. Emichañs ne rannoh grik dezañ deuz ar pezh em-eus kontet deoh.

LAGADEC

Ar pezh ho-peus kontet din?

GAID

Ya. Ar zorserez war ar zaout.

LAGADEC

Ar zaout a zo war ho kont, Gaïd. Me n'em-eus netra d'ober gand al loened-se. Klask a ran piou e-neus lazet an tad.

GAID

Ya, med an hini e-neus lazet ar (zaout,) marteze e-neus ampoezo-[?] net an (tad,) Marteze... Forz penaoz, gwanet eo bet ganin, d'e dro...

LAGADEC

Kenavo, Gaïd. Deut eo ar mare da horo ar zaout.

GAID

O, va Doue, ya. Mond a ran buan!

IV

LAGADEC ha LOM.

LAGADEC

Abanta, Lom, marteze e hellfeh lakaad ahanon war an hent mad.

LOM

Peseurt hent?

LAGADEC

Hent ar wirionez: me a rank gouzoud piou e-neus lazet ho tad.

LOM

Me a garfe gouzoud ivez.

LAGADEC

N'eus bet gwelet den ebed en-dro da Gerdrenket hirio. Setu...

LOM
Setu petra ?
LAGADEC
Setu e ranker anzav n'ez eus nemed ar 'familh da damall.
LOM
Hervez ar feson, ya. Ne lavaran ket nann.
LAGADEC
'M-eus aon ne oa ket kalz a garantez etrezoh hag ho tad.

LOM
Karantez ebed. An tad a oa eun den droug, eun den kriz. Ma ouifeh pegement em-eus gouzañvet dindannañ. Nann, n'em-eus keuz ebed dezañ. Med ne vijen ket eet beteg laza va zad. N'eo ket traou d'ober. M'am-befe soñjet laza unan bennag, en ti-mañ. n'eo ket an hini koz am-befe taolet d'an traoñ.

LAGADEC
Ma komprenan mad, ar c'hoarezed a zo gwasoh hoaz eged an tad ?

LOM
P'eo mad ar merhed, war an douar-mañ, n'eus gwaz ganet ebed gouest da veza gwelloc'h egeto. Med, p'en em lakaont da veza fall, n'eus diaoul ebed en ivern hag a vefe treh dezo. E-giz-se emañ an traou.

LAGADEC
Ahanta, arabad mond re stard ganto. Marteze n'int ket ken mad, na ken fall. Ma vefe goulennet diganin, me a jomfe etre daou.

LOM
Selaouit, aotrou komiser. Ober a ran va labour gwella ma hellan. Abaoe eo deut an tad re goz, n'eus nemedon oh ober al labouriou tenn. N'on ket bet gouest da zimezi. Piou ar plah yaouank he-defe asantet dond amañ, en douarenn gouez-mañ. Setu on chomet en toull, da vaga an diou skragneg, bouetet treut ganto hag o vond e pilhou e-pad n'emaint o vernia skoejou en armel. Mad! Ma ne vefent bet nemed skragn, hoaz! N'ouzoh ket petra a zo bet greet din, nevez zo? Eun dachennad avalou-douar am-oua hadet, eur ouenn avalou-douar dibabet. Warhoaz e raio pemzekteiz abaoe em-eus greet al labour-ze. Ma, tri pe bevar devez warlerh, em-eus kavet an dachenn freuzet, troet ha distroet gand ar varr e-pad an noz, taolet din an hadenn war an dachenn, drouzivet va labour. Gwasoh hoaz ! Disul, p'on deut d'ar gêr deuz an overenn, em-eus kavet va marh, er marchosi, leun a wad war e 'fri. Skuilhet e oa bet dezañ tammou gwer e-touez e gerh.

N'ouzoh ket penaoz eo bet fur awalh al loen paour da jom heb debri tamm beteg distro e vestr. Panefe-se e oa echu gantañ.

LAGADEC
Arsa, n'eo ket êz beva asamblez, er memez ti, pa n'ez eus santimant vad ebed etrezoh. M'hen goar mad, ar brasa enebourien a vez kavet e-touez an dud a memez gwad. Ha piou e-neus lazet an tad, Lom ?

LOM
N'eo ket me. Gouzoud a ran petra zoñjit : Lom e-neus tennet eun taol fuzul war e dad ablamour e-neus tamallet dezañ freuzadeg an dachenn avalou-douar hag an taol 'fall greet d'e varh. N'emañ ket ar wirionez ganeoh. Ha perag ? Ablamour an tad, ken gouez ha ma oa, n'e-nefe klasket gwinta din va marh evid mad ebed. Biskoaz n'e-nefe greet droug d'eur marh. Gand ar zaout ne ree ket 'forz, med ne oa ket gouest da hōzañv al loened askelleg, ar helienn, ar gwenan, al lapoused. N'ouzoh ket perag. Med evid ar hezeg, ar roñsed, e-noa kalon dener kemend ha ma helle. Hag evid gwez e liorz. A-hend-all...

LAGADEC
Kemend-se ne ziskouez ket din perag eo bet lazet. C'hwi, Lom, a lavar e oah o troha melchon. Med n'oh bet gwelet gand den. C'hwi ho-peus kavet ar horv, hag e oah hoh-unan kaer. Ar 'fuzul a zo deoh, ouspenn.

LOM
Gouzoud mad a ran. Ha koulskoude n'em-eus ket lazet an tad.

LAGADEC
Neuze e rank beza ho hoar Gaïd.

LOM
Va hoar Gaïd ? Ha perag ?

LAGADEC
Feiz, soñjit ta ! Gaïd, war a lavar, a oa o tiwall he zaout e Park ar Stankenn. Med piou e-neus gwelet Gaïd e Park ar Stankenn? Den beo ebed. E-leh ho hoar Naïg, toullet he-deus kaoz, er vourb, gand eun hanter-dousenn komerezed, dres d'an eur m'eo bet diskaret an tad.

LOM
Gaïd, n'eo ket posubl. Honnez he-deus kollet eun hanter euz he 'furnez. N'eo ket sod da staga, med tost. Gwir eo, ar re zod a zo gouest da laza, a-wechou. Med Gaïd, gand ar brasa c'hoant, n'he-defe ket gellet ober netra vad gand eur 'fuzul. An dra-ze ouzon mad. M'ho-pefe lavaret din Naïg, ya. Honnez a zo eur plah fin, dornet mad ha gouest d'ober he zroioù dre zindan. Eun droug-spered gwisket

gand eul lostenn. Med peogwir e oa hi er vourh, ne gomprenan netra ebed. Nann, netra.

LAGADEC

Ma, Lom, bez e hellit mond d'ho labour, bremañ. Me a jomo amañ beteg am-bo diskoulmet ar gudenn-ze.

LOM (o *vond kuit*)

Ma n'eo ket Naïg, n'eo den ebed.

V

LAGADEC ha NAIG.

LAGADEC

Naïg, c'hwi eo ar yaouanka euz ar vugale, n'oh ket ?

NAIG

Eo. Petra ra an oad en afer-mañ ?

LAGADEC

Boazet, an tad a gar atao muiob an hini diweza euz e vugale, dreist-oll p'eo deut pell war lerb ar re-all.

NAIG

An tad, amañ, ne gare den ebed. Me ne oan ket tostoh dezañ eged an daou-all. N'eo ket me em-eus lazet anezañ, koulskoude, peogwir e oan er vourh, c'hwi oar mad.

LAGADEC

Ne lavar an netra. Ne ran nemed klask.

NAIG

Klaskit, klaskit ! Ne ran forz ebed ha pa gavfeh pe ne gavfeh ket. An tad a zo maro, Doue da bardono d'an hini e-neus renket dezañ e stal. Mad a zo greet dezañ, ya. Eun den garo a oa, eun den kriz evel ne vez gwelet nebleh. Bez e hellan lavared kemend-se, peogwir n'on ket da veza tamallet, dre ma oan er vourh, dres p'eo c'hoarvezet an taol. Hag on bet gwelet gand teir zousenn a dud. On tad a oa falla den a zo bet ganet biskoaz war an douar-mañ, atao o klask ober droug. Selaout ! Me em-oa plijadur braz gand va gwenan. Teir holoenn em-oa, em liorz dirag an ti. Desket em-oa o doare ha mad-dreist e kaven ar mel. Ma ! pevar devez zo, em-eus kavet va gwenan mouget en o lochennou. Stanket e oa bet warno, goude beza taolet er holoenn eur seurt louzou-apotiker en eur vuretenn.

LAGADEC

Hag e tamallit an torfed-se d'ho tad ?

NAIG

Da biou all ? An tad ne oa ket gouest da houzañv al loened askelleg. Seiz gwech war-n'ugent e-noa mennet din e-nefe distrujet va gwenan. Kavet e-neus e du gand al louzou divalo-ze. Rag ne oa ket gouest d'ober d'ar gwenan pez a ree d'al lapoused.

LAGADEC

Petra ree d'al lapoused ?

NAIG

Petra ? Bep tro pa wele eul lapous bennag war eur wezenn pe eun dachenn, e taole eur mèn warnañ. Ha ral an dro ma ne oa ket tizet al loenig paour. Eur valtam gom a veze gantañ aliez ivez, med kentoh e hoarie gand eun taol mèn. E lagad a oa lemm hag e zorn eeun spontuz da deurel mèn. Med koulskoude, evid laza eur wananenn e oa paket berr.

LAGADEC

Trugarez deoh, Naïg. Awalh em-eus klevet. Bremañ ouzon piou e-neus lazet an tad, ha penaoz ha perag.

NAIG

N'eo ket posubl ! War eun taol, e-giz-se ?

LAGADEC

War eun taol-krenn eo deut din ar wirionez. O ! Lousouarn ! Gwivarrh ! Kerzit da glask din Gaïd ha Lom ! Buan !

VI

LAGADEC *hag ar re all.*

LAGADEC

Setu eo deut ar mare, va zud, da ziskleria doare an droug-laz a zo c'hoarvezet hirio e Kerdrenket. Med marteze e rafen mad, a-raog displega penaoz eo eet an hini koz da anaon, konta deoh eun nebeud traou diwar ho penn hob-unan, kemend ha m'emaoh amañ.

LOM

Dalhit ho kaojou ganeoh, mar plij. Re bell-ze en em anavezom etrezom, siwaz !

LAGADEC

Ha koulskoude oh faziet an eil war egile, ha setu perag eo maro an hini koz.

GAID

Faziet ? Ma zo faziet unan bennag n'eo ket me.

LAGADEC

C'hwi koulz hag ar re all. Selaouit, ma kontin deoh pez a zo bet e Kerdrenket abaoe eur miz. Ne vin ket pell.

Da genta, c'hwi a zo faziet, Gaïd ar Zaout. Ya, c'hwi. Ho saout o-deus kollet eun hanter euz o lêz ha blaz o amann ablamour int bet gwanet gand ar hleñved. Eur hleñved boutin awalh, ha n'eo da veza tamallet da zen ebed.

GAID

Sorserez, ya, me oar gwelloc'h egedoh, paotr.

LAGADEC

Marteze. Med ar medisin loened a oar gwelloc'h egedoh. Ha lavaret e-neus din dioustu, ar mintin-mañ. Hogen, c'hwi ho-peus tamallet ar hleñved-se d'ho preur Lom. Hag oh eet, da noz, da 'freusa dezañ e bark avalou-douar. Hag ho-peus taolet tammou gwer drailhet e neo e varh.

LOM

C'hwi 'ni oa, sab-ludu, tamm-teil, sodez da staga!

LAGADEC

Peoh ! C'hwi a zo faziet ivez, Lom Kerdrenket, peogwir ho-peus kredet e oa bet ho c'hoar Naïg war-dro ho touar hag ho marh. E-leh kastiza Gaïd, ho-peus mouget gwenan Naïg gand louzou ar vuretenn-mañ.

NAIG

Va gwenan, Lom ! C'hwi a bako diganin-me, bezit asur !

LAGADEC

C'hoariet fall ho-peus, Naïg, ne welit ket, bremañ ? N'eo ket an hini koz e-neus distrujet deoh ho kwenan. Ha koulskoude ho-peus greet eun dra hag e-neus kounnaret ho tad spontuz.

NAIG

Me ? N'em-eus greet netra ebed !

LAGADEC

Eo. Deh d'abardaez, pe marteze en noz-mañ, ho-peus eskennet ar gwez per a zo bet plantet nevez zo gand ho tad. Eun taol eskenn da beb hini, tre d'an traon, eleh m'eo kuzet an dreujenn gand ar geot. N'eo ket awalh da ziskar ar gwez, med awalh eo da lakaad anezo da zizeha prim. Na lavarit ket nann : kavet em-eus an eskenn er geuneudeg, hag ar brenn gwez per a zo chomet warni.

LOM

Penaos ho-peus dizoloet kemend-all a draou ken buan ?

LAGADEC

C'hwi ho-tri ho-peus diskleriet din eun hanter euz ar wirionez. N'eo ket bet diêz din c'houesa an hanter-all.

LOM

Mad, memez tra. Med piou e-neus lazet an hini koz, neuze ?

LAGADEC

Gaïd, kerzit da 'furchal en dilhad-gwele, war-du ar speurenn, e-leh ma oa ar 'fuzul. Eur mên a gavoh a-dreñv ar holhed. Ahanta !

GAID

Ya. Emañ ganin. Eur mênig ront ha rust. Petra eo ?

LAGADEC

Ar mên-ze e-neus lazet ho tad. Ha setu penaos : an hini koz a zo bet fuloret broust pa 'neus kavet e wez per eskennet ha kondonet da zizeha. Kemend a zroug du a zo eet ennañ m'e-neus soñjet en em laza e-unan en doare ma kouezfe warnoh ho tri an tamall euz e varo. Gourvezet e-neus e 'fuzul war holhed e wele, eur gartouchenn e-barz. Eet eo da azeza war an oaled, dres dirag ar 'fuzul. Ha neuze, gand ar mên-mañ, e-neus tizet ar hi ha paket dioustu an drajeou en e benn. Setu. Hervez al lezenn, ne hellan teurel hini ebed ouzoh en toull. Ho tad a zo maro evid netra. E gwirionez, avad, eo bet lazet ganeoh ho-tri. Ha bremañ kenavo ! Prez bras a zo warnon da vond kuit deuz an ti-mañ.

**

— Diskenn a ra an hent, Erwan? 'Vond da beleh emhout?
Pell ema ar mor? Ha prederia 'ri pelloh?

Prederia?... Ne raio ket. Ne 'fell ket dezañ prederia. Da betra
e talvezo dezañ prederia! Daoust ha ne-neus ket prederiet a-walh?
Re zoken?

Setu eur garront a vo êz tizoud ar mor dreizañ. Diskenn a ra
kompez-digompez, eun êzenn 'frésk, c'hwég, o redeg ennañ, euz ar
seurt hini a vez ar horv e kerz an deveziou hañv.

Hag ar film-ze o trei, o nijal en e spered, dalhmad, diehan...

Reuz ha freuz ar hoari. A youl kaer e lamme Erwan e-touez an
enebourien. Stag e vouchouer ouz e houriz, meur a « vuhez » difram-
met digand ar re all. — C'hwil oar petra eo eur « vuhez » : an dra
a vez staget ouz ar gouriz pa vezer o c'hoari, hag a vez grêt « buhez »
anezañ o veza ma chomer maro, pa vez bet paket gand eun all.

Glép-dour-teil e dal, ar berr-alan warnañ, en em dennet 'oa
Erwan euz mesk ar hrogad evid klask eun tamm diskuiz...

Pegeid amzer e valeas, beuzet e spered en e zoñjou, heb gouzoud
dezañ da beleh edo o vond?

Ne oar seurt ebed. Ar pezh a zo, eo e oa degouezet, a-greiz-pep-
kreiz, dirag eur 'foenneg, hir ha stank ar geot enni.

Harpet ouz ar bleuz, teltennou, troñset o « mogeriou », a domme
sioul o lien melen.

Den ebed war o zro?

Kerkent, avad, eun torrad pennou bleveg a zifoupas euz a douez
eur bodad balan a boulze a beb tu d'an ode.

Skoutezed e oant.

Diou anezo, goude beza tostaet outañ, a doullas koz.

— Gwall bell oh deuet diouz ho kamp.

— N'emaoh ket o c'hoari gand ar re all?

An hini vrasa, triweh vloaz dezi, diouz he gweled, a zisplegas
ez edont-i o kampa eno, wardro eul leo diouz e gamp dezañ.

Eul leo ! Mantret e chome o kleved kement-se. Ne gave ket
dezañ e-noa baleet keid-all.

Amañ eo e krogas an « abadenn »...

Perag, avad, eo en em gavet ganti evel-se? Perag eo bet chomet
ganti da varvailhad, hag ar plah all eet kuit?

Eur pennad mad a hent a rejont o-daou.

Pa deuas koulz ar himiad, Erwan a ouie ervad he gwelfe hoaz...

Perag, avad, e oa chomet ganti da varvailhad hag ebeñ eet kuit?

**

« Arabad din soñjal, arabad din beva kemend-all en-dro ! Iski-
sat, c'hwekat taol ha ne zoñjen ket ennañ ! Bleunienn va zriweh
vloaz, diwanet a greiz eun deiz hag a gas abanon d'an dizesper ! »

Gwir eo, n'eo ket greet pep hini diouz e hiz. Pa n'emaer ket o
hortoz kement-se ! Ar zouez eo a zo kaoz, ar zouez, an dihortoz eo a
zo da damall !

Rebechet ez eus bet dezañ, meur a wech, penaoz e oa ennañ
e-unan. Ne grede ket dezañ... Nann, ne grede ket dezañ e vije deut en-
dro d'ar hamp hag-eñ o trebi soñjou.

Daou zvez e oa chomet evelse ! Dén ne gompren.

Na ped kwech e-noa kemeret hent war-zu ar 'foenneg hir, hag
a-daol-trumm, deut en-dro war e roudou ! Hag an trede deiz, re laosk
a youl, chachet en despet dezañ, e-neus bet kemeret ar memes hent.

Digouezet el leh ma troe kein en deizioù all, e kredas mond
pelloh ha paka tro an hent a guze dezañ dor e vuhez.

Eno edo ar plah.

Spurmanti a reas, en deiz-se, he daoulagad glaz, hag he bleo
teñval.

A-zeiz da zeiz — pegeid e padas ? Ne oar kén — e stagas e
ene ouz he hini, kement ha ker brao ken na oe stag ha stag-krenn.

Penaoz n'int ket bet gweler gand dén, penaoz eo bet chomet,
beteg-henn, kuzet o darempred? Gwelloc'h e vije bet dezo beza bet
diskuliet azaleg deiz kenta o abadenn.

**

« Arabad d'in beva kemend-all en-dro ! Ma teu din beva en-dro
eur seurt darvoud, penaoz ne vezo ket va daoulagad beuzet a zaelou ?

O, hennez a vez uhel an eienenn gantañ, a lavare din va mamm,
pa oan yaouank, an dour bepred o ruilha war va dioujod d'an dis-
terra poan-galon.

En dro-mañ n'eo ket eun abeg dister eo a lakafe abanon da ouela.
Ha pa stagfen da ouela, daoust ha gwalhet e vijen euz ar pehed
edon o vond d'ober ? »

Diskenn a ra ar garront.

E skeud ar hleuziou, ne zanter ket tommdet an devez.

Gwir eo, ema dija an noz o tond. Péd eur e hell beza ? Bre-
maig e vo du an traou war da dro. Bremaig e vo da stad re bar da
hini an noz tremenet. Soñj az-peus ?

... Ar véz a oa kouezet warnout o veza ma oah bet kavet ho taou, Gaid ha te, gand penn-rener ar hamp. O huñvreal out bet a-héd peurrest an devez, o trebi soñjou c'hwero.

Ha gwasoh c'hoaz. Da garnedig, az-poa skrivet warnañ da zoñjou kuzeta a zo bet kavet ive. Setu ar pezh e-nevoa henchet ar penn-rener etrezeg ennoh...

Hag ar pep gwaso a zeu warlerh.

An noz hag a zo o vond da goueza, a lakay ahanout da zoñjal en noz tremenet.

Kalon an dén a vez traou souezuz enni, traou ha ne hortozet ket. Kalon an dén, a ra dezañ awechou mond a-eneb an traou deraed, dreist-oll pa vez ar big krog en e skouarn.

... Deuet an noz. Chachet gand nerz da vuhez, didrouz kaer, out savet hag out get er-mêz euz da delenn. Barr-leun da galon a anken en abeg d'ar véz bet taolet warnout... bet taolet warni.

Ezomm braz da aveli d'az penn az-poa, ha netra kén.

Kaer e oa an noz; eun dudi: steredennou an oabl, douster an hañv, mantell deo ar peoh.

N'edo ket skrij an digenvez ennout, penn-kil-ha-troad, evel bremañ. Edos chachet, en despet dit.

Daoust hag hag eñ eo heb gouzoud doare dit ez out bet en em gavet dirag ar 'foenneg valaneg?

Kredi a reas dit gweled eur penn bleveg treset, mesk-ha-mesk gand ar bodou glaz.

— Gwelloh deoh mond d'ar hamp en-dro, a rannas mouez haro ar benn-renérez, a-dreñv e gein.

... Hag abaoe e teh, e teh, klañv gand ar vuhez.

**

« Piou oh-c'hwi a glevan ho mouez?

— Mouez da eñvorennoù, bremaig hini da goustiañs!

Diskenn a ra Erwan, ha d'e heul, ruil-diruilh, mein ar garront. Gand ar véz eo en em dennet kuit. Diwar ar véz eo ez eo diwanet ennañ ar zoñj euzuz.

A-daol-trum e chom a-zav.

« Doue, va zikourit! Klañv eo va spered. »

Ne hell mui padoud.

An noz a astenn warnañ he mantel gañvuz; eur vantell bonner a holo e gorv hag e spered war ar memez tro.

Daoust ha pell ema c'hoaz ar mor?

Ema o vond d'ar réd.

— Erwan, arabad dit...

Hag e chom adarre a-zav. Eun tenn-alan hir hag hiraezuz a ra. Koueza 'ra er 'foz, brevet e izili...

**

Tarz an deiz.

Ema an heol o sevel.

A-uz d'ar menez, eur goumoulen deo a astenn he 'flegou.

Hir, gourzouret gand ar housked, ema ar bannou yah o hounid an oabl dibunet.

C'hwéz an deliou, c'hwéz ar geot a leugn an êr.

Dindan e zorn, Erwan a zant eur blazenn 'flour, gléb gand ar hlizenn.

Digeri a ra e zaoulagad ha mond a ra en e hoazez.

Redeg a ra ennañ ar vuhez. Pegen dous eo beva! Hag eun huñvre eo e-neus greet? Ha gwir eo e-nevoa bet c'hoant mervel?... D'e driweh vloaz!!

Ema en e-zav. Goustadig e tiskenni gand ar garront. Eur gar-ront kaer eo, kleuziou uhel a beb tu dezañ, balan ha dero war o hein.

Mond a ra goustadig.

Setu ar mor... an tevenn...

Péd troatad uhelder? Don eo. E zaoulagad a bar war ar mor divent.

Lammad a ra e galon a daoliou ponner. Naon e-neus. Mousc'hoarzin a ra pa zoñj ema war yun abaoe eun devez hanter.

— Erwan! Erwan!

Eur youhadenn o tond euz a bell.

Hi eo. Berr warni.

— Erwan, Erwan!... Nann!... gortoz!...

Eur mousc'hoarz tener eo respont ar paotr.

Dorn-ha-dorn, sklêr o daoulagad emaint o daou o pignad gand ar zao.

Lirzin e kan al laboused.

Daoust petra bennag a hoarvezo, dalhmad e kano al laboused evito.

Kristian BRISSON,
(hañv 1957).

Soazig Gankour

Piou eo honnez, Soazig Gankour? Klevet he-deus en he havel
Rouanezig al lann, an dour. Mouez ar mor hag an avel.

P'edo bihan en eur porzig
E c'hoarie gand ar brennig.

Deski ' reas leun a halleg, Ha pa deue ar vakañsou
Med hi gane e brezoneg. Kerkent edo war ar bagou.

He 'fenn uhel, he zae digor,
E leine gand an avel vor.

Lann alaouret ar Gilligi Aot Treompan, tevenn Kerroz
D'ar pardaez ' vleunie dezi. Rede enno diwezd noz.

Kaer ' oa dezi kerzed d'ar skol
Eh hunvree en o askol.

Avel or Breiz eo a wigour Gantañ setu m'eo eun teñzor
En da galon, Soazig Gankour. Leun a berlez broig Arvor.

Med an teñzor, red e ranna.
Petra ' hedevid evid kana?

Skign dre ar bed da ganiri O ya! Kan deom, Soazig Gankour
Skeduz 'vel lann ar Gilligi. Ar vag a hed, ar mor a zourr!

MAB AN DIG.

Ar re veuzet

Kontadenn euz bro ar Hap dastumet
ha renket gand Urvan PERENNES (1).

Etre bae Gwaien hag hini Douarnenez, ez eus eur bég-douar
ma sailh warnañ ar mor braz euz an daou du, skubet heb ehan
gand an avelioui, anvet gwechall gand ar Romaned ar « Habeum ».

Deuet eo ar gér-ze da veza evidom: « Ar Hap ».

Ar bég-douar, avad, kollet gantañ e ano, a zo deuet da veza
« Bég-ar-Raz ».

A-héd ar « Habeum », kadourien Rom o-doa digoret daou
hent braz.

Unan anezo, c'hweh troatad ha tregont lehed dezañ, etre Sant-
Servan anvet d'an ampoent « Aleth », ha Bég-ar-Van, dre Gër-
Ahez.

An hent-se, eur wech paket gantañ Douarnenez, a heulie ar
bae, o troha dre barreziou Treboul, Poullan, Beuzeg, Goulien ha
Kleden evid erruoud, en diwez el leh m'ema bremañ chapel an Ao-
trou Sant Tewy, dirag bae an Anaon.

An dén a vale dre eno, a lez war an dorn kleiz ar bourhaden-
nou-se e-kreiz o 'farkelier éd, o 'foenneier ha gwéz o liorzou.

War an tu deou, avad, ne wél dirag e zaoulagad, nemed eun

(1) Urvan Perennes, ganet e Treboul, beleg, dén desket braz a oa, troet
kenañ war draou Breiz. Klafvidig, eh en em dennas en e « lochennig », e
Treboul. Eno eo e tastumas hag e renkas eun nebeud kontadennou euz bro
ar Hap, e-neus bet fiziet ennon, a-raog ma varvas er bloaz 1948.

Lezet e-neus ganin, ouspenn ar gontadenn-mañ:

— Ar Pab Inosant (eur werz a 410 gwerzenn) (kontadenn);

— Jakez an ti Plouz, pe Ar Breizad hag an diaoul (kontadenn);

— Kolas ar Moug (kontadenn);

— Soniou fentuz, evel: Skubom an ti (evid divenn Treboul a-eneb Douar-
nenez). Servicherien a Vreiz (kanaouenn d'e garabasen); Rouanez ar « Paro »
(da Vari-Jo); Boulou brevet, pe eun droiad e pardon Santez Anna 'r Palud;
Eur garrigellad pechez (istorig euz amzer e yaouankiz); Gwez avalou Breiz
(barzoneg)...

Unan euz e oberennou: « Pe Iz, pe Ahez » eur werz hir, 550 gwerzenn,
war istor gosa or bro, a zo bet moulet en eur haier, gand « Le Courrier du
Finistère » e 1944.

V. SEITE.

tamm douar meïneg, diazezet war ar roh, difonn d'al labour, trohet beb ar mare a stankennou don a gas o doureier d'ar bae.

Dre ma tostaer ouz ar bég, e teu ar parkeier labouret da veza rouesoh-rouesa.

Aze, war k'z an hent braz, ne weler kén nemed eun nebeud ta-chennadou éd-du, gwez pin krommet gand an avel-walarn, ha tostoh d'ar mor, eur vodenn lann bennag, geotennou rouz, treut ha rikluz, hanter boazet gand an aveliou, pe hoaz, etre ar vein, gremilh, ha war an tuniou, uhel a-zioh ar bae, reier, evel hadet e-touez ar brug, amañ hag ahont, lod anezo « meinbir » pe « lehiou », savet eno gwechall-goz, gand an dud kenta deuet er vro.

Erfin, tre war ribl an aot, torradou reier kalet, drebet gand an tarz, hag a zivenn, er barrou-amzer, douar yah Breiz-Izel, ouz koummou dirollet ar mor.

MONA HAG HE LEZVAMM

Pa guitaer an hent-braz, da gemer hini Kleden, e kaver war léz an hent, e-touez ar gwéz, eur geriadenn vihan: Kêr-Hermen, hanter guzet er hlazenn.

Eno e veve — o, pell a zo abaoe — eur plah yaouank a dri-weh vloaz, anvet Marivona.

Er vro ne veze greet nemed Mona anezi.

Houmañ n'oa ket eüruz he stad e ti he zad.

Kollet gantañ abaoe daou vloaz e brïed — mamm Mona, — an tad a oa nevez dimezet gand Katell ar Moal euz a Borz-Piron, e Beuzeg.

Houmañ, eur vaouez oajet dija, a oa en em daolet d'an evaj muioh eged muzul.

Katell, ablamour d'an tech fall-ze, ha da galz re all, n'oa na karet nag istimet gand dén ebed tro-war-dro.

An oll, o weled he dremm askorneg, he dent hir, he lagad born leun a oaz hag a gasoni, he dioujod kleuz ruziet gand ar gwïn hag ar yuanegez, a debe diouti, evel diouz eur zorséréz droug ha fall.

En tiegez ne oa nemet o sevel he mouez hag o kas an traou en-dro. An tad, e-unan, ne grede lavared grik ebed.

Ar paour k'ez Mona, eo, dreist-oll, he-devoa da houzañv, ar muia, a-berz he lezvamm. Ha koulskoude, plah yaouank furroh, na karantezusoh, gand muioh a zouster hag a basianted, ne vije ket bet kavet e nebleh.

Katell, avad, ne oa ket evid he gouzañv.

Mona, daou vloaz 'zo, a oa bet prometet gand he mamm d'eur paotr yaouank a zoare, Kled Karval, euz a Gergaradeg, ar gêr dosta.

Eur poanier e oa Kled, hag eur paotr renket mad.

An eured a dlie beza bet greet, eun nebeud miziou warlerh, pa deuas prim an Ankou, da gerhad ar vamm.

Ar hañvou, neuze, a lakeás an traou da zalea, hag abaoe m'edo Katell en ti, e ree houmañ kement ha ma helle evid lakaad freuz etre an daou zén yaouank.

Dija he doa diskouezet toull an nor da Gled, eun deiz ma oa deuet da Ger-Hermen, d'o gweled.

Setu ma rankent bremañ, o-daou, en em gavoud dre guz el liorz; n'eo ket dre m'o-doa eun dra bennag da guzad en o hompor-tamant, rag n'oa komz ebed etrezo ha n'o-dije ket lavaret dirag o zad. Méd, fallentez al lez vamm eo a oa penn-kaoz da gement-se.

Houmañ a lakae he 'flijadur da vired outo d'en em gavoud asamblez.

Setu eun deiz m'edo Mona o tivizoud dindan ar gwez gand Kled, e-kichen an ti, kerkent, evel eun diaoulez, e sailhas Katell warno, hanter vezo, eur penn-baz ganti etre he daouarn.

Neuze, o veza peget e Kled dre e vañch, e tiskouezas dezañ hent ar gêr, hag en em gemeras dioustu ouz Mona.

— « Allo 'ta! merh divergont, evel-se eo emaoch o henaoui, o koll hoh amzer e-leh labourad! Al labour n'en em hraio ket e-unan, koulskoude! »

Ha follet gand ar gwïn hag ar gounnar, e skourjeze gand he oll nerz, a daoliou baz, diskoaz ar plah yaouank.

Ar grouadurez paour a strake he dent gand ar boan hag ar spont hag a debas kuit en eur yudal.

Mond a ree, en eur vale atao dirazi, a-dreuz spern ha dréz, parkeier ha kleuziou, ar buanna ma helle, pell diouz ar vaouez fuloret.

Treuzi a reas an hent braz, ha bremañ, setu hi war an tun e-mesk ar reier, a-zioh bae an Anaon.

Erruet eno, ne helle mui bale kén gand ar boan, ar skuizder hag an digalon.

Neuze en em daolas war an tirien, e serras he daoulagad, hag ar housked a begas enni.

AR BIZOU

Pa zihunas, al loar a oa uhel en oabl, ar stered a lugerne.

ha war ar bég douar-se, gouez, distu ha direpu, Mona a grene gand ar riou hag ar spont.

An avel a yude evel hirvoudou d'he diskouarn.

Gweled a ree, a-zioh he 'fenn, stered losteg o redeg dre an neñv, ha lavaret ' oa bet dezi e oant eneou tud, o vond d'ar béd all.

Ar hoummou fuloret, uhel evel meneier, a zislonke hag a stlape o eon gwenn-erh war reier ar Raz gand eun trouz ivern spontuz a veze klevet a veur a leo en douarou.

Setu ma teuas beteg he diskouarn, da heul klemmou an avel ha blej ar mor, son mouget eur hloh a zibunas nebeud-ha-nebeud, daouzeg taol an hanter-noz.

Kerkent, en-dro dezi ar brug en em laka da dregerni ha da finval. Petra ' wél neuze?

Dirag he daoulagad, euz a zindan eur roh, tost dezi, e sav eun denig koz, korr ha munud, ha ne oa ket uhellog eged eur bugel, teo e benn, gand eur baro gwenn hag hir a goueze beteg e dreid.

Prest goude, Mona a wél en e gichen, eur vaouezig koz, rou-fennet he dremm, neuz dezi da gaoud ouspenn kant vloaz.

Ha diouz pep mên, diouz pep bodenn vrug e savas eur horrig heñvel ouz ar re-mañ.

Goude e teuas re all euz kostez ar mor, euz a douez kerreg an aot, ha diwar eon an tarziou.

A bep tu hag a bep korn e teuent hag en em vodent war an tun.

Bez ' e oa anezo milierou, muioh eged a breunenn en eur voezel-lad mell.

Oll e redent amañ hag ahont, en eur fringal mibin.

Neuze, an eil krog e dorn egile, en em lakeas ar vandenn da goroll en-dro d'ar mên-hir, en eur gana:

« Ra vezo an oll eneou... »

Ra vezo an oll eneou... »

Ar plah yaouank a glaskas tehed kuit, med eur horrig a zeuas beteg enni, a begas en he dorn hag a yeas ganti daved ar gorollerien :

— « Setu amañ Mona, emezañ, unan euz merbed an dud, deuet da goroll ha da gana ganeom. »

— « Ya, koroll ganeom, Mona, ha kan ive », eme an oll.

— « Penaoz, a gav deoh, e korollfen ganeoh ! a drohas ar plah. Atao e kanit ar memes tra. »

— « Ma, neuze, Mona, astenn deom or pedenn hag e tistani or poaniou. Rag ni a zo eneou er boan, eneou ar re o-deus kavet o

zremenvan dirag ar bég douar euzuz-mañ, el leh ma kav an Ankou kemend a labour.

Barnet om da zañsal ha da gana amañ, a-zioh bae an Anaon, bemdez, euz an hanter-noz d'ar beure kén a vo savet ha peurechuet ganeom eur hantig da hloar Doue.

Ouspenn daou hant vloaz ' zo emeom krog gand al labour-se, heb dond a-benn da denna euz or spered netra all nemed ar homzou hob-eus klevet bremaig. »

Hag an oll zañserien a astenne o divreh treut war-zu ar plah yaouank hag heb aspede gand moueziou truezuz :

— « Ya, Mona, astenn, astenn or pedenn ! »

Houmañ, neuze, o veza, prederiet eur pennadig, a grogas e daouarn unan euz ar gorriked hag a ganas :

« Ra veulo an oll eneou, »

« Ra veulo an oll eneou »

« Doue, o mestr hag o aotrou ! »

O kleved kement-se, oll e tregernjont gand ar joa, hag e trojont bunannoh-buanna, oh adlavared kant kwech warlerh, ar homzou nevez desket dezo ganti.

An heol a oa o sevel, hag e kendalhent atao da goroll.

Ar paour kèz Mona ne bade kén war he zreid, skuiz maro ma oa he divesker, o trei, evel-se, heb ehan, en-dro d'ar mên-hir, abaoe keid-all.

Méd, bépréd, mouez truezuz an Anaon a zave enni, da houlenn :

— « Astenn, astenn c'hoaz, ar bedenn, Mona ! »

— « Nann, eme ar plah yaouank, a-walh evid hirio. Dond a rin en-dro, avad, a-raog m'e-nevo ar hilhog kanet peder gwech. »

Unan euz ar gorriked, neuze, hag a zeblante beza kosoh eged ar re all, a lavaras dezi :

— « Evid da zigoll diouz ar pez az-peus greet evidom, goulenn diganeom ar pez a blijo dit. »

— « Ma, eme Vona, setu ar pez a houlennan: Va lezvamm, o klask lakaad freuz etre Kled a Gergaradeg ha me, ne 'fell ket dezi en em welfem. Goulenn a ran diganeoh rei din an tu da weled va muia karet heb na hello nikun on direnka. »

— « Kemer neuze, ar bizou-mañ. Bep tro ma tougi anezañ ouz da viz, e rañko da lezvamm mond d'he 'fark da gonta he haol, hag e chomo eno keid ha ma kari. »

Mona a gemeras ar bizou, hag a zistroas da di he zad.

Pa erruas er gêr, edo uhel dija an heol, a-zioh an dremmwel.

E-kichen al liorz, ar plah yaouank a gavas Kled, deuet eno, ha mall gantañ da gaoud euz he helou.

Lagad born Katell a welas dioustu an daou gomper, hag hi da redeg gand he 'fenn-baz, war-zu enno.

Kerkent avad, Mona a lakeas he bizou war he biz, ha raktal, ar « Geben » a stlapas he baz d'an douar, hag a debas buan-buan war-zu ar park, savet c'hoant ganti da vond da gonta he haol.

Eur wech echu ganti, al labour-se, eh adkrogas adarre, ha pa zistroas d'an ti, e oa ken skuiz ma ne zoñjas kén kanna he merh.

Antronoz e teuas Kled adarre, hag eur wech all e rankas Katell tehed d'ar park.

Mona he-dije karet atao ar paotr yaouank en he hichen, ha pa veze gantañ e klaske an tu d'ober dezañ dale ar muia ma belle.

Hogen, dond a reas buan Kled da skuiza, ouz he gweled bemdez heb « antell » ebed : trei a ree evel an avel ha nebeud a boell a gave enni.

Ha d'an trede deiz, diouz ar mintin, e lavaras dezi :

— « Mona, ne dalv ket ar boan dit, hiviziken, kas da lez-vamm d'ar haol. Ne deuin mui d'az kweled. Skuiz on deuet o selled ouz da zaoulagad bepred ruz gand an daelou. Re drist e kavan an trouz ganéz. Hirio ez an da bardon ar « Veaj vad » gand Annaig a Gerfeurgel.

Honnez, avad, n'eus ket warni eun dremm « interamant » evel warnout-te.

Kenavo eta! ha chañs vad! »

Mona gêz, o klevet kemend-all, a gredas sempla gand ar rann-galon, ha daelou leiz he daoulagad, e soñjas :

— « Allas ! va bizou n'e-neus talvezet din da netra... nemed da goll va mignon Kled. Mond a rin, en noz-mañ, end-eün d'e renta da eneou ar re veuzet. »

AN DORH (1) VURZUDUZ

Deuet an noz, goude koan, e kemeras, evid an eil gwech, hent an tun.

Bale a reas, e-pad pell amzer, e-kreiz an deñvalijenn. He halon a skoe a daoliou kreñv; an disterra trouz a ree dezi krena evel eun delienn gand an avel.

(1) *Torques*, latin : collier — « Aourtorhok », porteur de collier d'or (Liwarc'h-Hen, vi^e s.) (notenn gand an oberour).

Goude eur pennad bale evel-se, eh erruas el leh m'edo kousket er wech all.

Tost eo bremañ da hanter-noz.

Ha setu adarre an eneou er boan o tond daveti. Oll e reont kelh en-dro dezi en eur lavared :

— « Deuet eo Mona a-nevez, da goroll ha da gana ganeom. »

Neuze, o veza kroget en he dorn, en em lakejont da drei ganti en-dro d'ar mèn-hir, en eur gana :

« Ra veulo an oll eneou,

« Ra veulo an oll eneou

« Doue, o mestr hag o Aotrou... »

— « Med, n'eo ket a-walh kement-se, a drohas Mona. »

— « Astenn, neuze, astenn hoaz or pedenn ! » a youhas an oll.

Hag ar plah yaouank da gana d'he zro.

« Ra veulo an oll eneou,

« Doue o Mestr hag o Aotrou,

« A ginnig ar zilvidigez... »

O klevet ar homzou-ze, eul levenez vraz war o zal, en em lakajont adarre da drei, buan-buan ha da gana beteg ar goulou deiz. Neuze, hepkén, e paouezas an dañs hag ar han.

Ar hosa euz an eneou, a dosteas ouz Mona, hag evel ar wech kenta, e lavaras dezi :

— « Eur plah a galon vad out, Mona. Distanet ez-peus hoaz or poan. Goulenn eta diganeom kement tra a raio plijadur dit. »

— « Renta ' ran deoh ho pizou, a respontas ar plah yaouank. Gantañ ez on bet maleüruz-kenañ. N'e-neus talvezet din, allas ! nemed da goll karantez an den a garen. Gwelloh e kav-eñ, hiviziken, rei e galon d'eur plah yaouank all kaerroh egedon. Setu perag e houlennan diganeoh ar gened, evid ma teuio Kled d'am hared evid atao. »

Ar gorrigez koz a lammas neuze he zorb, pe he holier, diouz he gouzoug hag her stagas en-dro da hini Mona, en eur lavared dezi :

— « Kee ! Bremañ ez out kaerroh eged an deiz. N'eus nikun, e-touez merhed an dud hag a hallfe beza par dit evid ar goanteri. Hiviziken e vezi eüruz, marteze, ha neuze e tilezi an eneou paour a zo er boan. Ha koulskoude, hebdout ne hellim biken peurechui or pedenn. Deus en-dro, a-nevez, kenta ma helli, Mona ! »

— « N'eus forz petra hoarvezo ganin, emezi, distrei a rin adarre davedoh, a-raog m'e-no ar hilhog kanet peder gwech. »

Ha dizammet he halon, e kemeras hent ar gêr.

Mond a ree, skañv ha lijer, heb teurel evez, a-dreuz kleuziou ha parkeier, o soñjal pegen êz e vije dezi bremañ, gounid karantez Kled.

Pa deuas a-nevez, he skiant vad dezi, ne ouie kén e peleh edo.

Kollet e oa e-touez klouejou ha gwenojennou e-pad m'edo he spered o redeg henchou all.

Setu hi, bremañ, dirag eur gêr na anaveze ket.

Tud a zo aze o torna éd-du.

Mond a ra beteg enno, da houlenn he hent...

A-veh, avad, m'o-deus ar wazed savet warni o daoulagad ma tilezont kerkent o labour. Stlapa ' reont o 'freilhou pell diouto evid redeg etrezeg enni, skoet ma 'z int o weled ken brao krouadurez.

Hag e lavaront an eil d'egile :

— « O na kaerrat plah yaouank ! »

Hag e reont kelh en-dro dezi oh en em ginnig da heulia anezi beteg ar gêr, o kinnig, hemañ e garr, henez e varh, henhont e gein evid he dougenn da di he zad.

O weled kement-se, avad, ar gwrazez a oa eno, gloazet gand an oaz, a hourdrouze ar plah yaouank, o tiskouez dezi meilh o dorn, ha prest da lopa warni gand o balaenou pe o restell, en eur youhal dezi e-kreiz he fas :

— « Allo 'ta ! kerz da bourmen pell ahann, loudourenn ' zo abanout ! »

Ar paourkêz Mona a dehas kuit buanna ma helle.

Méd, seul-vui e ree hent, seul vui e teue tud war he lerh, cha-chet daveti evel houarn gand mên-touch.

Evel-se eo eh erruas e bourh Kleden gand eur bodad gwazed war he lerh.

Kled he gwelas ive, rag eno edo. Hag o sevel warni e zaoulagad, e chomas bamet evel ar re all.

Mona, en desped d'he doan, a dridas neuze gand ar blijadur.

Eur pennadig goude, setu Katell o tigouezoud d'he zro, hag ouz he gweled, e krogas enni kounnar ruz.

Mond a reas da Vona 'vel eun diaoulez.

Hogen, pa gouezas he daoulagad war an dorh perlez a zouge he lezverb, he diframmas diganti kerkent, hag e lakeas anezi en-dro d'he gouzoug.

Neuze, kenavo d'an dremm askorneg, d'an dent hir, d'al lagad

born, d'ar penn koz o vransellad... Ar « Geben » a oa deuet da veza eur berlezenn a hened.

Kerkent ive, edo ar wazed oh ober o reuz en dro dezi. Ha pep hini a glaske beza an tosta outi, ma savas freuz ha taoliou dorn zokén.

Katell heb-unan a oe bloñset oll hag hanter vouget, stardet evel ma oa ouz moger eur puñs.

Pa deuas da houzoud e oa ar holier penn-abeg da gemend-all a drubuilhou, e tistagas anezañ diouz he gouzoug hag henn stlapas er puñs.

Setu adarre ar roufennou o tond war he 'fas, an dent skilfeg en he genou, he lagad born en he 'fenn. Hag an oll wazed bremañ oh ober goap outi :

— « Ahanta! Keber goz, kollet ganeoh ho kurunenn a goanteri ! Bremañ ez oh villoh eged eun diaoulez ! »

Hag e kemerjont mein da stlepel outi.

Katell a zistroas d'ar gêr, foll gand ar gounnar.

Diskoaz Mona gêz, avad, eo a baes an oll zoaniou he-doa bet al lezvamm da houzañv.

Kled, e-unan, zokén, a zeuas warlerh Mona, d'ober dezi rebe-chou c'hwero, ablamour, emezañ ma 'z ee da redeg an noz ha ma tenne ar wazed d'he heul :

— « Ne deuin kén amañ, a lavarar-eñ dezi, rag anaoud a ran bremañ eur plah yaouank hag a zo kalz pinvidikoh egedout. »

Mona a ouelas a-hed an deiz penn-da-benn hag eun nozvez ouspenn :

— « Her gweled a ran, a zoñjas Mona, donezonou an Anaon n'o-deus ket talvezet din da galz a dra. Perag ive n'em-eus ket gou-lennet ar binvidigez ? Mond a rin d'o haoud adarre, en noz a zeu. »

**

DAELOU PERLEZ HA SPILHENN AR GARANTEZ

Deuet an noz teñval, p'edo an oll kousket en ti, evid an trede gwech, ez eas Mona trameg an tun ha d'an taol a hanter-noz an eneou en em ziskouezas dezi adarre.

— « Edom ouz da bedal, Mona, emezo. Daoust ha kendalbet az-peus da labourad da beurechui or pedenn. Kan deom, kan deom hoaz ! »

Hag ar gorriked en em lakeas adarre da goroll en-dro dezi, o kana evel en dro ziweza :

« Ra veulo an oll eneou
« Doue o Mestr hag o Aotrou,
« A ginnig ar zilvidigez... »

Beb an amzer e paouezont evid youhal d'ar plah yaouank:
« Astenn, astenn c'hoaz! »

Mona, neuze a ganas :

« Ra veulo an oll eneou
« Doue, o Mestr hag o Aotrou,
« A ginnig ar zilvidigez
« D'an oll dud, en e drugarez. »

Oll e kanont ar homzou war he lerh. Ha dioustu, o paouez da goroll, e lezont youhadennou a joa, en eur ziskouez o eürusted dre zañsou ha lammou a bep seurt.

Brug an tevenn, e-unan, a zeblante tregerni gand al levez. Oll e youhent :

— « Trugarez dit, Mona, on dieubet az-peus. Setu peurechu or pedenn, ha bremañ e hellim tañva eürusted ar Baradoz. Goulenn, goulenn diganeom ar pez a gari ! »

— « Evid gounid karantez Kled, emezi, e karfen kaoud ar binvidigez. »

— « Hag ez-po, emezo oll. Pinvidig e vi. Pinvidikoh eged roue. »

Eur gorrigez koz, neuze, a stokas ouz he dorn en eur lavared dezi :

— « Kee, merh an dud ! Pep hini euz an daelou a gouezo euz da zaoulagad, a vo hiviziken eur berlezen gaer meurbed. »

Eur horig all a dostaas goude, gantañ en e zorn — o, nebeud a dra — eur spilhenn hag en eur rei anezi d'ar plah e lavaras :

— « Kemer ive ar spilhenn-mañ. Keit ha ma vo sanket en da gorrvenn, e vezi karet en eun doare dispar. Kee ! ha mil bennoz dit, Mona ! »

An deiz a oa o tarza en dremmwel. Ar gorriker neuze a dehas diouz ar brug, a zavas hag a deuzas en oabl evel ma teuz ar vogidell-hañv pa vez sunet gand bannou kenta an heol.

Ha Mona a zistroas da di he zad, he halon gwall nehet o kimia-da diouz an Anaon karet, med eüruz koulskoude o soñjal e hounezfe bremañ evid mad kalon he muia karet.

A-veh ma oa eet dreist treujou an ti, ma sailhas warni al lez-vamm, he daouarn serret hag e krogas d'he hanna en eur youhal dezi-droug-komzou a bep seurt.

An daelou a gouez puilh euz daoulagad ar plah paour, evel an dour euz ar 'feunteun.

A-boan avad ma kouezont d'an douar ma vezont kemmet raktal e perlezennou euz ar re gaerra. Goloet eo ganto al leur-zi.

Ar « Geben » a jom da genta dilavar gand ar zouez. Med prestig goude, eo follet gand al levez. o weled kement a binvidigez o tond dezi, hag e sko neuze kreñvoh-kreñva war ar valeüruzez, en eur huchal :

— « Gouel ! gouel 'ta ! med gouel 'ta muioh hoaz ! »

Hag an taoliou a gouez war gein Mona, evel an taoliou freilh war eul leuriad ed.

Evid dastum an daelou perlez, ez a Katell da glask ar zailh, ar bodez, ar skudilli... kement pod a zo en ti, hag heb dale ez int leun a berlez lufruz.

D'an ampoent edo Kled o tremen dre eno, henchet, emichañs gand spilhenn ar garantez a zouge Mona.

O klevet hirvoudou ar plah yaouank, e teu e-barz an ti. Ne daol evez ebed ouz an teñzoriou perlez strewet war leur an ti, ne wel nemed eun dra : E Vona skourjezet gand al lezvamm digalon.

Truez ha karantez a zav ennañ, med kounnar ive.

Lammad a ra war Gatell; pega ' ra enni dre he gouzoug. Yudal a ree houmañ, heb ehan :

— « Med, Kled, sko warni 'ta ! Sko kalet ! Ne welez ket e skuilh daelou perlez ? »

Kled a zalhe peg atao. Ar « Geben » neuze, o weled n'helle mui kanna he lezverh da gaoud perlez diganti, e krogas enni eur barrad kounnar ken taer ha ken gwaz, ma savas ar gwad d'he 'fenn ha ma kouezas maro-mik war an taol.

Eun nebeud sizuniou goude, Kled a zimezas gand Mona.

Houmañ ne gollas morse he spilhenn vuzuduz, ha setu perag e renas bepred ar vrasa karantez hag ar vrasa eürusted e tiegez Ker-Hermen.

Ar wrég yaouank ne ankounac'haas biken en he 'fedennou, min-tin ha noz, da bedi evid an Anaon.

Grit evel di hag ho po ho tigoll.

U. PERENNES.

Brehoneg Bro-Guéned

Lihér ur habitén ar ur pemb gwern

Christchurch, New-Zealand, d'er 7 a viz hwavrér 1921.

Me moéz karet.

Arriù om ér Zéland-neué er miz-mañ a-benn er fin, ha mal e oè. Marsé n'ho-peus ket bet me lihér deühan, ha ne ouies ket hoah pesort béaj spontuz zo bet groeit en taol-mañ, a houdé mah om oeit kuit a Capetown, tro penn ketañ kalañ-gouiañ. Pendégwir éh oè deit en hañv du-zé, ha ne huéhé ket mui en auél kornog, er Westerlies é! ma larant, em-boè lakeit ém hokenn er soñj-mañ : dichenn d'hé hlak émen é oè, daved en hantérkantved parallell, izél erhoalh de gaved en énézenn Kergelen ar me hent, hag en auél-kornog a-benn kaer. Oem ket arriù hoah de dreuz ged Inizienn Crozet e zo édan béli Bro-Hall (nameid ne vé kavet enni kén deved goué hag éned-mor) ma koéhas arnom gwsañ amzér em eus biskoah gwélet ém buhé-moraer, deusto dehi boud hirig erhoalh brémañ. A-houdé el lun ketañ a galañ-gouiañ, de fin miz du, é padas er grollereh! Deu viziad a-béh é chomas er gwall-amzér ar hur hein. Na kalet ur vuhé hun eus añduret geti héd-ha-héd, édan ar yeinizion hag en arnañ ! Ret e oè bet kargein d'er buannañ er gouélieu, deit de voud reud èl pe vehent bet oeit de houarn, kén e rèùé a-zourn. E riskl braz é oè er varteloded kèh de goéh ag er

El lihér-mañ zo bet saüet goudé mem boud lennet unan gwirion, bet skriuet ged me eontr, kabitén ar er pemb gwern Frañs, dem moereb. Marit é er heh dén, (en Eutru Doué d'é sekouro), oeit d'er foñs ged ul lestr arall, er-méz, dirag aodeu Bro-Spagn. Na kaletet ur vechér e oè hani er voraerion ar el listri dré ouél, esoh e vo d'el lennerion her homprén, p'o-devo lennet el lihér-mañ.

G. BERNIER.

gwerni, ged er glérenn e oè a-streü er fardaj. E tro suhuniadeu a-béh é oè ret kapécin, édan en hunirieu-stag hebkén, rag ma tas er mor d'em ziroll, kén é saüé tarhieu-mor eahuz de zeg metr marsé, hag é lakent er mor tro-ar-dro de chumennein èl uiu foetet.

Serret e oè édan prélardeu rah en toullou ha dorieu a vé kavet ar er bourh ha hwéh dén e oè bet lakeit genein de zelhér ar er stur, ha de lakad eüeh ne zehé er gouélieu de voud skoeit ag en araog, rag er gwerni e vehé bet taolet d'en dias ha ni d'er foñs. Trouz er mor e oè ker blaohuz èl m'ema ar hun aod braz pe huéh barr-amzér er reversi-vraz. Hur hag e zalhè penn biskoah ker braü d'en amzér ha d'er mor, ha fier éh oen-mé a me femp-gwern, rag, ne gav ket genein, nann, ne fehé ket bout kavet hañni, hag e vehé chomet diseblant elti édan taolieu ker rust ! Koutant e oen ahanon eué, de voud bet soñtil erhoalh, é lakad fardein hunirieu neué-flamm é Capetown : delhér e rezant doh er reklomeu dizal-baduz, meid a pe oè paset er gwall-amzér eh oent deit de voud tenaü, hag éh oè deit er chadenneu-skout de voud flastret èl pe vehent bet pladet a daolieu-morhol ar en añneü. Nebed a zroug zo bet én oll; ur martelod hebkén zo bet bléset, taolet ma oè bet ged un tarh-mor ar ur habillod, ged kement-se a nerh ma strinkas é lagad kleiz ér-méz a é benn. Direbech éma bet rah er varteloded. ag er mous d'er bosko, gronnet én dro dein ha sentuz-meurbed. Fardet e oè bet men gulé ér gambr-veill, hag er fornigell é roh kennad a tro en dé. Gourén em eus groeit éno aveité hag é chonjal ennes eué, doh un amzér e seblanté dein boud renet ged mil diaoul en iüern-yein. Diés e oè fardein boed, rag men dè glustraj er ham-buz ag en en tu d'en all én un troedad deur e strebaoté ged kas er vag : Mamadou e zigase flip dein al kent, ha reit e oè eué d'er baré marteloded e oè ar servij, tré ma oè er réral é klask kousked.

Pesord meskaj e oè kavet ér fardaj a pe oè ret chañj tu d'er gouélieu, èl a pe ran en dorn des-té de zibunein te neud (as ket soñj ?). Te oér erhad penaoz éh oem bet é 1905 deu viziad a-benn, bord ar bord, taolet ha distaolet, dirag aodeu er Japon é voned d'Hakodaté, ged mousson er gouiañ e strinke arnom barrad-erh ar varrad, ar bourh er Charles Lecourt ? Ama gwahoh éma bet en taol-mañ hoah. E tro ur miz n'em eus ket kousket un nozéh penn d'er benn, rag bihan a harp e gaven ged en eil-kaptén (ur ménour) ha ged er létanant (ur hrennbaotr).

Er vichér-mañ ar er lestri-dré-ouél e yei de goll ged en diés e vou kavet marteloded hag ofiserien apert erhoalh de zelhér penn d'en taolieu fall e ra dem el lavagnon kounnaret.

E Christchurch hebkén em eus gallet diskuih é ti Fransizion amiabl, o-deus groeit én dro dem èl a pe vehen bet o hroédur-int. Geté on bet de valé devad er manéieu ihuél ma réer Alp er Zéland-

neué anehé. Bourrabl e oè bet dein, goudé boud bet épad tri miziad a-béh, er mor chumennuz hebkén édan me sell, lézein en deulegad de voned ag ur prad glaz d'ur hoed, ha selled doh deved ha seut biskoah ker lart é péreïn.

Un taol kañpenn zo bet reit d'er lestr, ha fier é oen un tamm anehi, a pe zas tuchentil kér de vizitein deh. Nag a fotoieü zo bet groeit. Gwir é eüé éh oè kaer-meurbed mem hag, gwenn kann ma oè édan é liuaj neué. Fierroh é vein hoah a pe zeïn d'er gér én dro, de valé kazell-ha-kazell genes-té, me moéz karet, fardet é te gouif gwenn, hag é vragal ged er bragerizeu maoris e zigasein des-té ahanemañ.

Kénavo, moéz tinér ! Genes-té éh on ataü, dré nerh me spe-red. Bokein e ran des hoah ha hoah, me muiañ-karet.

Te bried.

PENNAD EVID ER SKOLIEU

Istoér ur "Symbol"

(SORBIENN)

En dra-mañ zo bet arriü é penn devéhañ er hantvléad paset é kosté en Oriant.

Bep mintin, er mestr ag er skol e ré d'ur paotr bennak un tamm koéd haval doh ur votéz ha hanüet er « symbol ». Er paotr-sé e ré er symbol d'er hetañ e gleüé é komz brehoneg; henna d'un arall hag elsé en diaol a symbol e gerhé a unan d'en arall betag en achimant ag er skol. El ma oè ur yoh é kaouid er symbol, ne vezé kastiet meïd en hani e-noé eañ pe achiué er skol.

Bamdé éh erriué er boh a symbol-sé ém sah ha liés braz her haven-mé abarh a p'arriué pedér ér, ha bamdé é kreské er haz em-oè eid en tamm koéd-sé. Hoant braz em-oè d'er has geneïn, eid her loskein, rag n'hellen ket parrad a gomz brehoneg.

Un dé, mé ha tolpeïn me hansorted én ur gognel ag er porh, ha lared dehé : « En tamm symbol-sé zo kaoz ma on lakeit é penijenn beh anderü. Chueh on getoñ. Hiniü, komzam rah brehoneg ha de deir ér, m'hen taolo ged an diaol. »

Er momant ma yen d'her gwinteïn drest er vañgoér, é kleuezan trouz é-tal dor er lioh ha kentéh é wélezan er mestr é tiboukein ér porh ar un dro ged er meüél : « Hwi zivallo, émé-eañ de henna é brehoneg, nen déi Médor ar dro er hounifled. » Ur sonj e saïllas én un taol ém 'fenn a groèdur. En ur saïll hag én ur huchal é tostezan d'er mestr hag é laoskezan er symbol de ruskein é fiched é lévitenñ, heb gouïed nitra dehoñ.

Ha mé ha moned joéiuz de gas en doéré dem hañsorted. Biskoah èl on-oè hoarhet. Ha hireh braz dem de wéled er skol é achiü en dé-sé eid gouïed petra vehé digoéhet.

Un tammig éraog pedér ér é houlenas er mestr, sériuz èl ur barnour : « Piü e-neus er symbol ? » Hañni ne respont.

Rah er vugalé e daol ur minhoarh arnon. Hantér fachet, é houlenas-eañ hoah ur weh : « Piü e-neus er symbol ? » Nitra atao !

A ! a lar eañ, é goall imur, ni ya de wéled piü er labous-sé e faot dehoñ obér en azenn. Sur erwalh, en hani e-neus er symbol e béo kér... Yehan Toumelin, me m-eus eañ reit deoh er mitin-mañ; de biü ho-peus eañ reit ? — De Job Tokplouz. — Ha hwi

Job ? — De Bier Maheù. — Ha hwi Pièr Maheù ? — De Izan Kerzereù... Rah er sklas e-noè bet er symbol, ne chomé mui meid Matelin er Saoz ha mé de respont. — Ha hwi Matelin ? — Me m-eus eañ reit diù weh de Franséz Treh-er-boulom.

Un taol hoarh e strimpas ér-méz a galoneù me hansorted. Er mestr kounaret e houlennas genein : « Petra ho peus-hwi groeit ged er symbol, azenn korneg ? — Dam er mestr, mem eus ho kleùet é komz brehoneg ged er meùel ha mem eus eañ reit deoh ! Ema én ho fiched. » ...

Er mestr e vout é zorn én é fiched hag e denn en diaol a symbol-hont ér-méz. Neuzé é saùas skrignereh, ha hoarhereh ! Er mestr e chañjas liù ha kent er fin em lakas de hoarhein genem.

Franséz TREH-ER-BOULOM.
(*Dihunam*, Gourhelén 1907).



Sonj a vugaléah

Pe zé en han é tèbrem étal en nor hor hoén :

Aveid stalein hor predig, n'hor boé ket kalz a boén.

Ur mén hor boé eid kadoér, aveid taol hon deuhlin;

Ha leah dous gwennoh eid erh e évem é lèh gwin.

Sonj ha es té ag er brud, ag er brudig distér

E saùé adal peb dor penn-d'er-benn ag er gér ?

Hoarhein e hrem a galon, o ! ya, a galon vad;

Ha, kent moned de gousked, é pedem Doué hon Tad.

Ha sonj ha es té, me hoér, pe zesken el latin,

E tes ged chif de lemel oll me lévreu genein ?

Sonj em es ag en taoleu, en taoligeu bihan,

E res ged ha wialenn ar ziskoé ha vrér Yann.

Te laré : laosk, me Yannig, laosk te ziksionér,

Ha bem ataù el agent, en hoérig hag er brér !

Ha sonj ha es té, me hoér, ag hor bugaléah ?

N'em es ket mé ankouéheit en amzér-sé biskoah.

ER JOUBIOUX

(Doué ha mem Bro, 1844.)

Diarbenn BRUD

Ne houian ket lennerion *Bro-Guéned* hag ind e anaù rah *Emgleo Breiz* (Fondation Culturelle Bretonne). *Emgleo Breiz* e zo ur gevredigezh vraz hag e dolp énni « Kendalc'h », er « Bleun Brug », « Ar Falz », er « Studierien Vreizeg » hag un nebed stroladeu arall. Ar dachenn er yéh é labour. Peb plé, yeu en Asansion, é hra ur gest aveid er « Brehoneg ér skol », hag en argand dastumet e servij d'embannein obereu skriuagnerion Breiz ha livreu aveid er skolieu. Ohpenn un douséniad livreu e zo bet mollet betag breman.

E gourhelén devéhan, un tammig éraog gouilleu braz Kempér, en des hoah embannet *Emgleo Breiz* un dastumadenn trimizieg, skriuét é brehoneg penn d'er benn. Diù niverenn, ardro kant pajenn peb unan, e zo deit ér méz betag breman. Kavouid e hrér enné gwerzenneu, péhieu-hoari, sorbiennu..., skriuét ged tud hag e anaù o michér, èl Per Helias, Yeun ar Gow, Charlez ar Gall, h.h. Nen det ket ha kredein n'en des nameid brehoneg abil abarh. BRUD e fall dehi rein hoant d'er Vretoned de lénn treu talvouduz skriuét én ur yéh éz de gompren, ur yéh ged girieu ha troienneu e impléant bamdé, de lared é, brehoneg biù. Setu perag é hellér kavouid abarh pennadeu « Brezoneg beo ar bobl ». Er ré yaouank ha rah en des o léh goarnet aveité, ha gellein e hrant kas o labourieu de « lodenn ar Yaouankiz ».

Digor é eùé en dastumadenn de rannéh Gwénéed, ha mar des unan bennag ahanoh e sant é bluenn é trapikellad étré é vizied, ne hortet ket, kaset ho labour de « BRUD ».

(« *Bro-Guéned* », Niv. 46).

O tresa eun nor en eur 'ferm e oa pa lavaras d'in : « Rouesaad a ra an drapejou. An *draped* a vez anvet awechou an dorigell. Gand eur hliked eo e vez dalhet serr an draped.

An nor vraz a vez dalhet serr gand ar *prenn*. Mogeriou an nor a zo eun toull enno da rekour ar prenn. En tiez nevez ne vez greet toull ebed, rag, bremañ an noriou a vez war alhouez. Daoust da ze e vez lavaret prena ha dibrenna an nor, kentoh eged alhoueza ha dialhoueza.

Micher ar halvez oa ober prennou. Brema e rank prena, e ti ar hinkailher, ar potailhou doriou. Lod a zo braz, ar re brenn; lod all, bihannoh, a zo houarn tout. Deom-ni eo o staga ouz an noriou, ha peurliesia o zresa, pa ne valeont ket mad; ar pezh ne c'hoarvez ket aliez.

Alhouez a zo gand an daou seurt potailh-ze, med bez' e vez greet ive doriou dialhouez. E-leh alhouez e vez lakeet morailh dezo. Eur morailh a zo eur hliked, brasoh avad ha ront; ar hliked a zo plad.

An alhouez a laka ar *gleizenn* da vond ha da zond er *hrapoun*. Pa zerrer ha pa zigorer an nor, trei a ra war he *medurenn* e-barz ar *hon*, pa vez pounner an nor, evel e vezent greet gwechall da vihanna. Eveljust e oa medurenn ha kon er penn uhella hag e penn izella an nor.

Peurliesia bremañ koataj an noriou a zo skañvoh. Troi a reont war eun driklenn houarn gwiset ouz an nor, en traon ha war-laez, ha war ar medurennou simantet ouz ar voger. »

Desket em-eus ar vicher digand va zad a ree boutegi, kevell-mor ha klondreou. Eur hlondre (1) a vez grêt gand kolo ha drez. An drez a vez diszreinet, raklet, faoutet en o hed; ar vouedenn a vez tennet kuit.

Ar hevell-mor a vez grêt, koulz hag ar boutegi, gand aozilh, gand ivor (eur wezennig a zo ganti boulou ruz en hañv), haleg, kelvez. Trohet e vezont da viz du, pa vez kouezet o deliou. Ez-glaz e vezont gwevn.

An aozilh teo a vez faoutet evid ober postou. Eur gontell a zo awalh evid ober ar vicher; nemed evid ar hestou-gwenañ, grêt start gand kolo ha drez, e ranker kaoud eur minaoued.

Evid ober boutegi eo red kaoud eur voull-boutegi, gand eun toull e kreiz ha daouzeg tro-dro, war ar bord. An hini kreiz a zo da rekour eur vaz a vez kloummet warni ar pevar bost kenta, a-groaz. Ar postou-ze eo a ro dalh d'ar boutegi; teo braoig, eta, e rankont beza, hag hir, pemp troatad wardro. Endro d'ar postou e vez lakêt gwial.

Pa vez fin gand ar bouteg e vez pleget ar postou evid o lakaad da ziskenn an donna posubl e kostezio ar bouteg. Eleh ober pleginier ganto, e lakeer eur skouarn a beb tu. Evid *mujula* peh tra, e vez grêt gand an daouarn. Eun troatad a dalv an daou zorn pleget hag ar biz meud astennet; eur raouenn a dalv ar biz bihan hag ar biz meud astennet, an tri biz all pleget.

Evid ober boutegi fin ha gwevn, da lakaad lienennou, e vez poazet an aozilh ha dibluskennet. Lod all a laka an tammou aozilh da *vouilhaza* en douar.

L. LOK.

(1) Sous-plat.

Brezoneg beo ar bobl

Lizer eur zoudard (1839)

Versail ar bemzec a viz Eost 1839.

Va zad ha va mam gêr

Scrifa a ran deoc'h gant cals a hast evit klevet eus o qelou, evidon-me a zo yac'h ac a zezir pa en em gavo al lizer-man ganeoc'h, e veac'h er memes tra. Cridi a ran oc'h inouet defot clevet eus va c'helou, prometet em boa em bije scrifet evel ma vijen erruet e garnizon, m'en assur ne de qet dre negligañç car caout e ranqen amzer evit franchissa va lizer, ac araoc prena cals traou eus a bere em boa izom. Cals amzer n'em boa qet ive, car dious an nos ac ar mintin e ranqen mont da zesqi an exercis d'ar gonscriet, a da greisdeiz mont da ober scol, mes brema emeus obtenet ne din nemet dious ar mintin da zesqi ar gonscriet, car e fond re dracasset oan er c'hiz-se. brema em eus amzer da ober scol er c'hartier, ac emeus dija pemp scolaer.

En em gavet omp e Versailles ar c'henta a vis gouère. lavaret em boa e zeamp da Baris, mes ama omp chomet. an diou Vatalion quenta zo e Paris. ar Ru zo ive eno. Bet oun yac'h en ent, bet emeus un tam squisder a sec'het, car tom bras oa an amzer. En deveziou diveza oa deut va zreit da goëvni un dra, ac oun bet daou zeves er c'har. Loget mad oun bet partout nemet e daou leac'h er Fouillez, ac e Plelan. Passeet Roazon oun commanct da velet ur vro vras, a dre ma tostaemp ous Paris oa ato braoc'h braoa. Dre aman neus cleuz ebet, neus nemet plenennou leun a viniz, a guerc'h, a foen terien ac a bep seurt (raou). An eost a zo brao dre aman, mez tri pe bevar devez araoc en em gaoud on deus guelet epad ar spaç a bemp leo varnuguent, un eost ravajet gant an arno ac ar c'hazarc'h. Tri pe bevar devez araoc erruout oun bet bevet e leac'h ma lojen, a cistr on deveze da efa ar pez a garemp, va c'hamarad a me. Ama eo qer ar bara, pemp guennec al lur, ar c'hic nao. Bevet fall omp aman, calz zo o deus naoun, an arc'hant a vanq ac ar bara zo qêr.

Ama e maomp en ur gear vras, beza zo tyes ar re gaëra, ispicial Castel ar Roue, ac e jardinou, ne deus netra kaëroc'h, ar c'haera ilizou ne dint netra e qichen ar c'hastel-ze. Neus qet anter blaç var ar paper-mâ evit conta deoc'h ar pes em eus guelet ebars, mont a rear ebars e leac'h ma gareur, da zadorn, da zul, da lun a da veurs, en deveziou all ne antreer nemet er jardinou e pe leac'h e zeus lennouigou bep ar mare, ac el lennou-ze e zeus patrom a bep seurt loenet e ploum ac a deol dour dre o guinou devexiennou zo. Ar jardinou ac ar c'hastel axo leun a imachou marbr e peb feçon. Er c'hastel e veler taolennou bras evit representi ar breselliou, ispicial victoriou Bonapart, guelet a rear ive patrom qement Roue zo bet e Franc, patrom quement general bras a

quement den capabl ac habil zo bet adaleg comañçamant ar Rouantelez. Mar continufen neme qet a blaç da c'houlen an traou em eus muia interest da c'houzout.

Clevet emeus en deus great cals dommach an avelou dan eost duze, mall bras emeus da c'houzout. Merca a reot en o lizer penaos eme an eost, ac en zo avancet, piou vez oc'h o sicour. a pe seurt amzer a ra. Deiz ar pardon e scrivon al lizer-mâ, pebez plijadur din ma vijen bet ebars. Ama eo arnevus hirio, petra bennac eo duze. Livirit on o lizer un nevezenti bennac eus ar vro. Grit va gourc'hemenou da Baol ar c'hoz, d'am zintin Nouela, da Louisa, erfin d'am oll guerent, nemeus qet a blaç da envel anezo tout, da dud Kerfeunteuniou, da re an ty mean, d'am paeron a da guement ini em boa habitud da veza ganto, a d'an amezeien. Ispicial e reot va gourc'hemenou d'an otruou Postec, mar dema ato e Bodilis. Livirit dezan oun anaoudeg bras eus ar merkou a amitie en deus reot din pa oan bet er gear. Ne deus nevezenti ebet aman, nemet or c'holonel a zo passeet general.

Tranquil bras ema ar bet brema, ne deus bet trous ebet epad gouëliou Gouère. Pa zeor ur pennat var an ent bras, o veler Paris.

Scrifit din er c'henta amzer, car mall bras emeus da glevet eus o qelou a ma c'houffac'h peguement a c'hlaç'har ac a zizesper emeus da veza bet ar grueldet d'oc'h abandonni, e pardonfac'h din va ingrateri, mes re vras eo evit beza pardonnet. Ne deus mui plijadur ebet evidon, ar rest eus va buez ne de qet aoualc'h evit deplori va malheur. Ne sortian ral, pam bez great va labour ac echuet va scol, en em lacaan da scriva pe da len, peotramant en em daolan var va guele, evit sonjal em foot, mes, me o ped, pardonnet anei din, a ma tistroan james e vezin tranquill ganeoc'h en o qichen.

O c'hortos ar moment eürs-ze, ec'h ambrassan ahanoc'h a greiz va c'halon ac ec'h assuran deoc'h e zoun ac e vezin ar rest eus va buez an tenerra ac an obeissanta eus o pugale

K/GUTUIL Alain.

Cetu ama va adres, laqit evez de c'holl.

Mr K/gutuil, Soldat au 65^e de ligne, 3^e Bataillon
Grenadier à Versailles, Département de Seine-et-Oise

Laqit tachit da blega propr o liziri, a piou bennac a leqai an adress e pedan anezan da scrifa mat an adres ama araoc. O pidi a ran ive da franchissa va liziri, ne gousto james nemet pemp guennec deoc'h, a dime e couste daou-varnuguent.

Chomleh

Monsieur,

Monsieur Kergutuil Thomas, village de Kernevez-al-Ian, Commune de Bodiliz
Canton de Landivisioù Département du Finistère

[Kavet em-eus, e diellou poultrenneg parrez Bodiliz, merk-ganedigez Alain Kergutuil :

* Alain K/gutuil, fils légitime de Thomas K/gutuil et de Marie-Joseph Péron, ménagers de K/névez-al-Ian, né le 28 novembre 1814 et baptisé le même jour. »

Mével Desst.

Sinadur oll ebed, nemed hini ar paeron, Alain Léon, hag hini ar vaeron, Isabelle Breton.

Er presbital, eun daolen ouz ar voger a zigas soñj euz buhez an aotrou Yves Mével (1804-1824 e Bodiliz), maro er Bugu, d'an 28, Ebrel, 1929. Naha a reas beza beleg-touer, hag e tigoras, en e di, er Bugu, eur skol. Boda a reas enni beteg 60 skoliad, kalz o teski latin. Kaset e vezent goude-ze d'ar Skolaj, evid kemer leh ar veleien tehet kuit pe lazet niveruz e-pad trubuilhou ar Reveulzi-Vraz.

Gantañ marteze e teskas Alain Kergutuil lenn ha skriva, rag e dud ne oant bet morse er skol.

An Aotrou Postec e oe kure e Bodiliz (1837-1845). Anvet e oe goude-ze da berson e Logonna-Kimerh ha dand a reas da ziskuiza, goude bloavezhio hir e garg beleg, e-kichen Itron Varia Rumengol. Eno e varvas.

N'eus Kergutuil ebed ken nag e Kernevez-al-Land (anvet hirio Al Land) na kennebeud, e kav din, e parrez Bodiliz.

Y. V. D. (Moualh Kernav.)



Les CAHIERS du BLEUN-BRUG

Stagadur trimizieg da « Bleun-Brug », e galleg

Komanant : 200 lur. — An niverenn : 50 lur.

Chomleh : Jean Cormerais, 13, rue Félibien, Nantes (L.-M.).

C.C.P. 77-60 Rennes.

Resusitet !

Spontet ? N'eo ket ar ger ! Strafilhet kentoh, ha hoaz ? Kredi a ran ne hoarzh ket o lenn va hontadenn, hag an neb va anavez a ouezo bremaig perag, abaoe an oad a eiz vloaz, eo sonn va bleo war va 'fenn e-giz dent eur skrivell...

Eiz vloaz am-moa, eta, hag e oan e ti eur vamm-guñv krog gand he 'femp bloaz ha pevar-ugent, anvet « Mamm » gand an oll vugale.

— Minor e oas 'ta? a houlennoh ganin.

— Minor ne oan ket, mez eul lodenn euz tud an ti a oa o frikota ar bourk en deiz-se, da lavared eo d'an deg a viz Kerzu naonteg kant eiz war-n'ugent. Eun devez teñval meurbed ha, siwaz, chomet sklêr em spered evel ma vefe ßet deh !

Petra 'ta oa hoarvezet en deiz-se ?

Olier, eun amezeg, a oa digouezet, teñval e benn, da zisplega eur helou fall :

— Cheun Dreud, emezañ, a zo maro.

— Cheun Dreud ? eme Mamm; klevet em-oa evedo oh ober e dalarou, ne greden ket koulskoude e vije bet sammet evel-se en eun töl krenn. Che ! Hag amañ emañ an dud o frikota ! Piou 'z ay da daol dour war ar horv ? Ar mous-mañ ne jomo ket c-unan er gêr. Divalo e vefe, koulskoude, chom heb mond. Biskoaz hoaz !

— Eur banne ay ganex, Olier ?

An den ne lavaras na « ya » na « nann », mez eveljust e trinkas. Neuze, etre daou lonkad, Olier ha Mamm a gomzas diwar-benn buhez Cheun Dreud. Eun den seh e oa bet eñ, nerzuz, c'hweg d'al labour, mez pront, prest da skei evid an disterra tra.

Skoet e oe va spered bugel gand ar seurt komzou-ze : « prest da skei ». Pa oa beo, Cheun ne sponte ket ahanon; mez bremañ pa 'z eo maro, deuz petra a vefe gouest an den koz-se ?

— Kenavo, eme Olier.

Setu Mamm nehetoh eged biskoaz.

— Mond a ri d'az kwele, mous ? emezi. Me rank mond d'ar bater, ne vin ket pell.

— Ne din ket, emezon, ha ma teu Cheun amañ ?

— Cheun 'zo maro, diod, ne valeo ket ken, siwaz !

— Ne jomin ket va-unan.

— Ma ! deus d'ar bater ganin neuze, emezi.

Goude koan ez ejom dre ar hoad. Me groge stard e dorn Mamm, rag an disterra labous dihunet gand trouz or botou a oa evidon ene Cheun Dreud o klask nijal war-zu ar Baradoz ! Eur wetur dre-dan war an hent braz ? Ne oa gouest da veza nemed karrig an Ankou ! Krena a reen, penn da benn, gand ar

spont. Mez kement-se, siwaz ne oa nemed eur vlazennig dister euz ar pez am gortoze...

Emaon bremañ digouezet dirag ti Cheun Dreud. Sacha a ran war darn ha lostenn Mamm, an daelou a zo war ar poent da zifuka, med red eo, kousto pe gousto, mond beteg ar penn.

— Ar bater a zo digor, eme Mamm, deus buan 'ta !

An ti a oa leun a dud, penndaoulinet, azezet war o botou, lod anezho grañchet war ar bankeier dirag ar gweleou-kloz, lod all e-kreiz al leur-zi. Mamm a zochas ahanon beteg Cheun Dreud e tal ar vaz-kañv, e-leh m'evodo Mari Fresk oh oremuzi etre diou houlaouenn goar.

Raktal ne welis ket ken an dud, ne g'leven nemed eur voudinadeg tro-dro din, hag « Amen » beb ar mare. Va daoulagad ne dehent ket diwar Cheun Dreud : an den prest da skei !

Cheun a oa sebeliet e plas an dôl. War dri marh-koad e oa astennet golo an dôl-doaz ha war an dôl-doaz, korv hag ene Cheun Dreud. M'ho-peus gwelet eur wech bennag skeudenn « Voltaire » diskolpet gand « Houdon » e lear « Lavisse », neuze e helloh barn Cheun. Gwiskit Voltaire e justinog, displantit dezañ e vleo, hag e spered, klozit e lagad dehou, hag ho-pezo Cheun Dreud : ridet, treud eveljust, du beteg hanter e dal. Evid ar pez a jome euz e benn disvlevet : heñvel-mil ouz eur pilerad amann dizall war golo eur ribot. E penn all d'ar vaz-kañv, eun trohellad botou-ler koz, drouksoliet ha treusteuliet a daole o skeud war eur volennad dour benniget. Gand e dok-boulouenn, e soñjen, Cheun ne vije ket bet ken iskis da weled. Hag e lagad, va Zalver ! Siwaz ! e lagad kleiz oa digor hag a bare eoun warnon.

— An den-mañ, emezon, n'eo nemed hanter-varo. Ma krogen stard e breh Mamm a-raog, bremañ e sachen muioc'h hoaz warni. Krena a reen e-giz eur bern deliou. Teuler a reen eur zell e-touez an oll dud bodet aze, gand viziañs da gavoud eur gwaz bennag gouest d'am zivenn diouz Cheun Dreud. Siwaz, pell evedont, oll, diouz ar vaz-kañv ! Hag al lagad kleiz a zelle atao ouzin..

Setu an « Amen » diveza ! Emaon saveteet pelloh, emezon. Allaz ! den abed ne zave. An oll a jome mud. Ha puchet atao. Mari Fresk eo a zavas da genta evid teuler dour war ar horv. Kropet e oa, morzet ouspenn ha kamm gand ar remm. Spega a reas he zroad er marh-koad kenta a oa dindan ar vaz-kañv, hag a bilas anezañ. Ar marh kreiz a ranke beza tostoh da benn Cheun oged d'e dreid, rag, raktal ma oa dispeget an hini kenta, an dôl-doaz a zivintas ha setu Cheun, brao, o sevel plamm en e-zav ! Ha pilet ar goulaouiou-koar ! Dre drugarez, e gwirionez, rag gwelet em-oa trawalh...

Youhadeg ! Strafuilh ! Hopadeg !...

— Cheun a zo resusitet ! Resusitet eo Cheun !

Hopadennou a-zehou, skrijadennou a-gleiz. Ar boteier a strake o vond er mêz, ar bolennou hag an asidi a zraske o vruzuna e peb tu. Mamm, war an tól, he-doa kavet he divesker ugent vloaz.

Penaoc'h e oam eet endro d'ar gêr ? Dre-dan ? War-nij ? Na Mamm na me ne ouie. Ar pez a ouzon, evodo Cheun war or seuliou.

L. K., 37 bloaz.

O vond da weled eun neiz moualh...

... An neiz a oa en eur vodenn haleg, e traoñ ar leurgêr; a-barz mond beteg ennañ e oa eur lagenn ruz hag eur wazig zour. Me a rankas dougen va breur dreist an dour; lakeat eun troad ganen en tu-all d'ar waz, e klevis eun dra bennag o sutellad. Selled a rean en-dro din. O ! va Doue ! Ha me gweled eun naer, kazi harp ouz va botex, he lost moulet, he 'fenn savet uhel, digor-braz he ginou, hag he zeod hir er-meaz dioutañ.

Stennet-oll e oan... Dond a rean war va hiz; en eur drei, ' oan kouezet war ar lagenn. Sevel a rean en eur grena evel deliou gand an avel. Tapet 'm-oa krog em breur dre zindan e gazelou, ha buanna ma oan gouest e kerzen trezeg gorre ar leurgêr. En em gavet hanter-hent e rankis chom a-zav : va divesker ne oant mui evid va souden; va halon a lamme em hreiz, tenna a rean va alen buan-buan. Selled rean war va lerh : naer ebed a welis. Neuze oan azezet war ar leton, gand va breur war va barlenn. Ken behiet e oan, ma n'oan ket gouest da gozeal ouz va breurig.

Pa oan chanet da grena eun tammig, va halon da skei goustatoh, oan eat gand va breur d'ar gear. Or mamm ouz ar gweled droug-livet ha behiet, a houlennas : « Petra zo en em gavet ganeoc'h 'ta ? » Kounta ris d'ar mamm om-oa gweled eun naer-wiber ha klevet anezi o satal.

Ne 'm-oa nemed eiz vloaz d'ar mare-ze, med eur gwall spontad zo diêz d'ankounac'haad.

An Itron QUEMENEUR, euz an Trehou.

An tevenn minet

... D'ar mare-ze — e-pad ar brezel diweza — e oan o chom en eur gêriadenn war aot Bro-Leon. En tu-all d'an torgennou, dedennuz e oa galy ar mor glaz ha skeduz dindan bannou an heol. Bez e oa reverzi an deiz-se, ha divizoud a ris mond da ormela gand Perig, eur hañfard a oad ganin.

Ganeom eur hrog da zistaga an ormel diwar ar reier hag eur bener-aozilh da lakaad anezo e-barz, mond a reom gand on hent, stad ennom hag o tiviz evel soudarded o vond da « Stourm an Tregont »... Med ar pezh a glever a bell n'eo ket stokadennou goafiou pe klezeou, — trouz ar mindrailherezed ne lavarant ket, rag or mistri, an Alamaned, a zo bemdez o c'hoari an emgann dre ar mêziou...

Heulia a reom eur wenodenn a ziskenn tamm-ha-tamm war-du an aot. Diarhenn emaoñ hag on freid noaz a zank en trêz klouar ha bouk. E traoñ an dorgenn, e rankom treuzi eur riolenn hag a vourbouilh o tremen war zismantrou eur pont bet freuzet gand eun obuz emichoñs. En diwez, ledanaad a ra an dremwell, hag en eun taol e welom an drêzenn, ar mor eet pell a-dreñv ar reier du gand ar bezin : du-ze emañ an ormel...

Evid tizoud ar reier-ze avad, red eo treuzi eun tevenn-drêz goloet gand geotenn ha broenn-mor, ha klozet gand renkennadou orjal gouzreineg. Tremen a reom etrezo en eur regi eun tammig or chupenn ha kregi a reom da vond ebiou d'an tevenn, kant metr bennag deom da ober, o teurel evez ouz drein an askol-mor.

A-daol-trumm, Perig a jom a-zav :

— Petra eo an dra-ze ? a houlenn, o tiskouez emañ hag ahont lehiou heb geotenn na broenn.

— Ne ouzon ket, emezon. Ha kenderhel a reom da vond war-du ar mor, tra ma seblant balavennigou glaz diskouez deom an hent. E gwirionez, n'ouzon ket piou eo an dizouria, balavenned pe bugale.

A-greiz-oil e klevom eun den o huchal, raouliet e vouez, hag a welom eur zoudard alaman, tokarnet e benn, eur 'fuzuilh ouz e skoaz, o fonn d'ar red beteg an orjalenn, hag ah en em lakaad d'ober jestroù gand e zivreh, atao an eur huchal. Alamaneg a deu gantañ, ha n'om ket evid e gompren. Eur ger zo a deu aliez e-mesk e youhadennou :

— Minenn... Minenn...

Hag a-daol-trumm, meiza a reom : war eur park minet emaoñ !

Selloud a ran ouz Perig : selloud a ra ouzin ivez, hag e chomom aze, on divreh a-hed ar horv, on diouhar o krena evel deliou gwex-pupli en avel, tra ma leugn an aon on daoulagad ha ma tizeh or gourlañchenn. Neuze ar zoudard a ziskouez deom dre beleh mond ha ez eom war-du an orjalenn, o kerzoud gand kalz a evez, ha ni o kleved dija an tarzadenn spontuz...

Pegen hir e seblant an amzer lakeet ganeom d'ober an hent, kontet gand stokou or halon... Erfin, setu-ni o tizoud an orjalenn, ha, dindan jarneou on tokarnet, kemer a reom en-dro hent ar gêr, dislivet on dremm, ha ken gwan on diouhar m'o-deus beh on dougen.

Loeiz LAGATHU, a Winevez.

Chanson Bretoned Kazarn Hardi (Mezier)

Komposet ha greet e Kazarn Hardi, d'an 13 a viz east 1911
gand Fanch Ar Mahe,

Péhini a gount hoaz 407 kart kafe da eva er 91'

Paotred vailhant Finister n'o-deus biken klevet
Na penaoz da Vezier ez afe soudarded,
Biskoaz er harter ne oa klevet ano
Demeuz a Vezier baour war bord ar fronterioù.

Goulskoude ar hlaz eiz a zo bet designet
Da vond da Vezier hag ar Frañs 'neus freuzet.
Ya, digaset 'z eus emañ eun toullad kanfarded
Da gazarn ar « Hardi » da ober soudarded.

Soñjal a rê deom oll pa oam e-barz ar vro,
Moned d'ar rejimant a oa sur eur friko.
Mez allaz ! ar baotred, siwaz, zo bet 'roumplet,
P'o-deus tañvet ar zoubenn int chomet souezet.

A-benn eur pennad goude ne glever nemed ano :
« Na me a gav kerse o 'tioueri va bro ! »
Gand eur vouez e lavaront, ya, ar homzou-mañ :
« ' Benn peur ar-bezo great daou vloaz an toull-mañ ? »

Ar vuhez a zoudard, ar vuhez militer,
A zo gwall disheñvel demeuz buhez ar gêr.
Me a ya da glask rei deoh-c'hwil da gredi
Petra eo buhez ar zoudard e kazarn Hardi.

Deuz ar mintin pa zaver kenta tra vez klevet
Eo youhad war baotr ar « ju », mar bez ket diskennet.
Ar paotr a freuh e vele hag a skub dindannañ
Hag e gamaraded all a ra 'tout eveldañ.

'Vid lounka e zizuni n'eus ket eun tamm dale,
Kar evid ho 'tizuni ho-peus eur hart kafe.
Da houde d'an « teori », ahano d'an « exersis »,
Da zeg eur 'ma ar zoubenn en eun 'ti a ziviz.

Da houde ar zoubenn ' vezom oll rassemblet,
Ar horveou da ober a vez neuze lennet.
Pa vez lennet an dra-ze, distribuet lizerou,
Vez kignet ar patatez ha great ar horveou.

Da eun eur nemed kart 'vez kriet « sakodo »
Evid mond da vaneuvri a-dreuz an douarou.
Dizrei a ra d'ar harter araog poent ar zoubenn,
E voutou, e zilhadao zo karget a vouilhen.

Dre ma teu hir an deiz ha gant nevez-amzer
E koumans, ya, gantañ ar « marchou militèr ».
E zah gantañ karget hag e gartouchierennou,
Neuze kouez gand ar zoudard ar c'hwezenn war e voutou.

Pa vez drebet ar zoubenn, da bemp eur deuz an noz,
En em gav ar Vretoned araog mond da renoz.
Evelse ar zoudard a ankounac'ha e boan,
Oh eva eur jopinad bemdez goude koan.

Da hortoz an « apel », ' vez da nav eur sounet,
E kempen e voutou ha gwalhi e zilhad,
Kar beb sizun ivez vez « revu » warnexo,
Hag e rankont beza propr ha didoull atao.

Echui a ran va jañson, ya, en leur lavared,
An dervez diweza a zo kaer da weled,
'Vid ma hello peb hini dizrei 'barz en e vro.
Lod a ielo da Ventroutez, lod all da Blouigno.

Lod a deuo da Blouvoan, Sizun ha Sant Kadou,
Lod all da Blourin ha lod all d'an Trehou,
Lod a ielo da Bleiber, da Vielan, da Daule,
Lod all da Lannilis ha da Witalmeze.

Lod a ielo da Vrest, Guipavas ha Kleder,
Lod all da Landerne, partout er Finister,
Lod all a 'z ay da Blouvoan, hag ivez da Laneufret,
Pep hini en em gavo leh ma oa partiet.

Ma ' peus c'hoant da houzoud ano ar kompozer,
Bez ' eo eun den vaiihan: e-barz en e gartier,
Mez 'barz Kazern Hardi, e-mesk ar zoudarded,
E talh ar memez renk gand e gamaroded:

Kompozer ar jañson-ma zo eur paotr dizoursi,
Ganet e Kerlouan e-touez e genvroidi,
Ganet eo en Arvor, ha chom barz e Kerliver,
Ar jañson en-deus great ne lavar ket a heier.

Delher a reom da zoñj euz an ail « bataillon »
E-leah ma vez great kasz kontchou direzou,
E-leah ma weler tud a beb « kalite »
O plega d'ar memez mestr 'barz eur memez arme.

(Kaset deom gand an Ao. Raoult-Mazé, mab-kaer an Ao. Fanch ar Mahé,
« Roue ar hignen », euz ar gar, Plouneour-Tréz).



LODENN ar YAOUANKIZ

Eur miz e Bro-Gembre

An hañv-mañ am-eus bet an eurvad hag ar blijadur da dremen eur miz
e Bro-Gembre ha, pa 'z on deuet en-dro da Vreiz, ez eus bet goulennet
ouzin skriva ar pezh am-eus gwelet ha klevet du-hont ha lavaroud va zoñj
diwar-benn an dud, doare ar re yaouank ha penaoz e stourmont evid o yez
ha frankiz o bro.

N'em-eus tamm an anaoudegezh euz ar vicher kelaouenner, med, daoust
da ze, e klaskin displega, gwella ma hellin, va beaj er vro-ze. Peurliesha e
plij an danevellou beaj d'an oll ha peb den e-neus eun doare dezañ e-unan
da varn eur vro diouz he stumm ha boaziou an dud a vez enni o veva. Evid
kaoud eur wir anaoudegezh euz ar vro, e vefe red beza enni o chom. Rak-se
n'em-eus ket a-walh a skiant-prenet evid ober eun displegadenn ouiziezh euz
kement a zell euz Bro-Gembre.

C'hoant am-eus keben da gomz euz ar pennad amzer duduz tremenet
du-hont ganin hag euz an digemer dreist ha dispar greet din gand Bretoned
euz Breiz-Veur. Pedit a ran va lennerien eta, da dreuzi ar mor d'am heul ha
da arvesti euz Bro-Gembre, a-dreuz daoulagad ha menozioù eur plah yaouank
naonteg vloaz.

Kuitaad a ris Breiz d'an deiz kenta a viz eost. Kaer-tre e oa an amzer
ha mall am-oa da zigouezoud e Sant-Malo ha da bignad war eul lestr a gui-
tae ar porz war-dro nav eur diouz an noz. Leun-tenn e oa hemañ dija p'en
em gavis war ar bourz, goude beza tremenet dre di ar valtouterien. Diéz e oe
din kavoud eul leh a-zoare war ar bourz, da weloud shane mogerioù koz
Sant-Malo sklerijennet gand goulou ruz-tan ar huz-heol.

Sioul e oa ar mor evel eul lenn ha war an dour, heñvel euz eur melezoù
alaouret gand hannou izel an heol o veuzi ennañ, e riskle goustadig al lestr.
Didrouz e oa an noz hag, er pellder, e pare gouleier ar porz o vihanaad
beb eun tammig..

Antronoz-vintin e tigouezen e Southampton war-dro seiz eur. Pebez
souez din oh en em gavoud er porz braz-se! Abaoe eun hanter-eur dija e
neulle on lestr ar haou pe « dockou », melladoù listri a beb bro eoriet outo.
en o zaouez ar « Queen-Mary » o paouez distrei euz an Amerik. Furbouch e
peb leh ha, war ar hae-dilestra, poz brezoneg na galleg ebed, eveljust.
E gar Waterloo, e Londrez, edon a-raog kreisteiz. Deuet e oa di d'am
gortoz an aotrou J.-H. Roberts, eur Hembread hegarad, mignon braz d'am

zad ha brezoneg yah gantafi, med distaget gand eun taol-mouez ha ne oa ket tre hini or bro. Hogen n'eus forz, kompren a reen anezafi mad hag ez-ire.

Deuet e oa, emezafi, d'ober digemer din a-berz Bro-Gembre, ha laouen e lavaras din: « C'hwil a vo ostizadez Cymru e-pad ar miz e dremenoh e Breiz-Veur. »

Nebeud goude e savis en trefi a gerze da Vangor hag an aotrou Roberts a gimidias diouzin en eur zistaga ar homzou-mañ: « **Breiz ha Cymru am byth!** », da lavaroud eo: « **Breiz ha Bro-Gembre da viken!** »

Eun tamm mad a hent am-oa d'ober a-barz en em gavoud e Bangor. Pounner e oa an amzer ha tomm an heol hag, e peb leh edod o vedi.

Al lodenn greiz euz Bro-Zaoz a zo plén, parkeier braz ha prajou frank enni, med koadet nebeud a-walh.

Tremen a reas an trefi dre Rugby, Crewe, Chester... N'edon ket pell ken diouz Bro-Gembre ha, prestig goude e welen ar mor, glaz ha skeduz dindan an heol bero. A-benn eun eur diwezatoh e oan erru e Bangor.

Digor braz va daoulagad ganin, e sellen a beb tu gand ar c'hoant da weloud peb tra... Mond a ris ebiou Rhyl, eur gêr braz a-walh, e-leh ma tired bernou tud diouz an hañv. Hotellou kaer a zo eno tost d'an aot, dalhet kempenn ha fichet gand bléuniou ha gwez. Eun dachenn-c'hoari evid ar vugale a welis ive.

Pelloh emañ Bae Colwyn ha, larkoh hoaz, Llandudno, Penn-da-benn an aot e oa goloet an trézennoù gand eun engroez, hañverien, deuet di da gampi gand **karavanennou**, kement anezo ma oa eur zabatur. War-hed n'ouzon ket ped kilometr biskoaz, azaleg Rhyl beteg Bangor, ne oa nemed kirri-kampi ar seurt-se, oh ober gaou ouz kaerder ar vro ken a oa eun druez.

Neuze en dremmwel e tiskoachas dirazon menezioù tosta Bro-Gembre, dreist-oll pa oen en tu-all da Benmaenmawr (Penn ar mén meur) ha da Llanfairfechan (Iliz vihan Mari).

Ha setu me e Bangor, eur gêr vraz ha brao-tre, gand eur Skol-Veur evid studieren hanter-noz Bro-Gembre. Ar Skol-Veur, kozig mad, a zo bet savet e kreiz kêr e-doug ar c'hwezegved kantved. Tro-war-dro dezi ez eus flourennoù glaz ha liorzou kaer leun a wez hag a vleuniou.

Tostig da Vangor emañ Ynis Fon (Anglesey, e saozneg). Brazig a-walh eo an enezenn-ze, teir gêr grenn enni: Biwmaris, Ambouch ha Caer Gydi (Holyhead). Anvet eo Enez Von « Mamm Cymru ». Evid treuzi ar Strait, pe ar striz-vor, a zo etre Bangor hag an enezenn, ez eo red tremen war bont Menai, unan euz ar re gaerra a zo e Breiz-Veur.

Daou bont a zo, e gwirionez, unan evid an hent-houarn hag egile, ar Menai, evid an dud hag ar hirri. Diwarno e vez gwelet ar vro en eun doare dispar: diouz eun tu, e-touez ar gwez stank, emañ an hent da gas da Viwmaris ha, diouz an tu-all, kêr Vangor hag ar menezioù, goloet a vrug, o para er pellder. Lies-gwech em-eus treuzet ar pont, rag eur zizun penn-da-benn on bet e Biwmaris.

Brudet eo kastell Biwmaris ha talvezoud a ra ober eur gwel dezañ. Savet eo bet gand Edouard kenta, roue Bro-Zaoz, er bloaz 1282, evid stourm ouz Kembreiz ha lemel o frankiz diganto. War-dro ar mare-se, moarvad, eo bet savet kastell Caernavon, Harlech ha Conway am-eus gwelet ive. Kes-

tell niveruz a vez kavet e Kembre ha chomet eo mad en o zao an darn vuia anezo.

Eun abati koz-tre, savet a-raog ar Grenn-Amzer, ez on bet ive o weloud e Sir Fon. E-kichen an abati ez eus eur puñs hag eur feunteun o tenna d'ar re a gaver, tost d'ar chapelou, e Breiz. Hervez eur gredenn goz, an neb a c'hoari teir gwech an dro d'ar feunteun a zo sur da veza eüruz e-pad e vuhez. Eet on bet beteg an elenn vuzuduz ha greet am-eus teir zro dezi, hervez ar hiz. Hogen daoust hag eüruz e vezin e-pad va buhez? Doue hebken her goar, hogen ra blijo gantafi kentoh rei din an eürusted er bed-all!

A-bred a-walh e oan digouezet e Kembre evid gelloud mond d'an Eisteddfod, ar gouel kembraeg ken brudet.

Daou Eisteddfod a vez beb bloaz, an hini broadel dalhet bewech e Llangollen, e-leh ma tired tud euz ar bed-oll da glevoud kan ha muzik ha da arvesti ouz an dafisou. Hogen egile, lidet e korn pe gorn euz ar vro, a vez dalhet gwech emañ ha gwech a-hont. Ar bloaz-mañ e oa bet dibabet evitan Llangefni, eur gêriadenn e-kreiz Enez Von.

Marteze e ouezet e pad eiz deiz an Eisteddfod. N'em-eus gellet kemeroud perz er gouel-se nemed a-hed eun devez hebken ha diduet on bet gand ar pezh am-eus gwelet ha klevet emañ. En Eisteddfod e vez pleustret, dreist-oll, war ar zonerezh, al lennegezh hag ar han kembraeg. Gouizieg eo Kembreiz, zoken an dud euz ar bobl, war an oll dachennou-ze.

A-bred diouz ar mintin eh en em gavis e Llangefni, eur gêrig o tenna da Gastellin, plijuz, hervez doare, beva enni. Pellig a-walch edo tachenn ar gouel diouz kêr ha, war an hent a gase di, e oa bernou tud ha kirri-tan euz a gement leh.

Neuze eo e klevis, a-greiz oll, unan bennag ouz va gervel. Chom a ris souezet, evel just, oh en em gavoud gand an aotrou hag an intron Kêrian, euz Pariz, deuet ive da ouel an Eisteddfod. Kregi a rejom da gomz brezoneg hag an dud, en dro deom, a oa o klask gouzoud pe yez a oa ganecom.

Diouz ar mintin e oa eur vodadenn evid ar Gelted a beb bro deuet d'ar gouel. Mond a rejom dezi ha dizale e oe eno eun ugent den bennag euz Iwerzon, Enez Vanao, Kerne-Veur, Kembre ha Breiz.

Souezet e chomas an oll o weloud pegen tost eo ar brezoneg d'ar kembraeg, rag eun niver mad a heriou a vez distaget heñvel-mik en diou yez, daoust d'an doareou-skriva da veza disheñvel-tre. « **Yez on Tadou** », leor an aotrou Seité, a oa gand an aotrou Kerlan, ha setu heñv oh ober eur gentel vrezoneg d'ar re a oa er vodadenn.

Kenstrivadegou kan ha muzik a oe goude m'ezenn hag eul lid kaer evid kuruna ar gwella barz kembread, « **Seremoni cadeirio 'r bardd** ». Eun diskouezadeg arzou ha traouerez aozet gand tud euz ar vro a oa en eur zal vraz, renket dispar kement tra enni. « **Plaid Cymru** », da lavaroud eo Kostezen Vroadel Kembre, e-nevoa ive eno eun diskouezadeg leoriou, kazetennou ha luhskeudennou. Prena a ris arouez ar vroarourien kembread: eun noze-lenn warni tri menezig pri-gwer stag-oh-stag, liou glaz-gwer dezo. Goullenn a ris petra a verke an tri menezig ha setu ar respont a oe greet din: « Kembre, or bro, a zo goloet a verezioù ha dezo ez om dleour da veza miret or yez ha divennet anezi diouz ar Zaozon. Int-i a zo bet evel mogerioù dir en dro d'or bro. »

E gwirionez, n'em-oa ket klevet kalz Saozneg abaoe ma oan e Bro-Gembre. Ne oa nemed kembraeg gand an oll, kerkoulz gand ar re yaouank ha gand an dud eet war an oad. Aliez ez on bet e-touez re yaouank ha sebezet e vezen ouz o hlevout o komz heb distaga morse eur ger saozneg. Santet e veze e oa lorch enno o komz o yez.

Beo-tre eo ar yez hoaz e hanter-nnoz ar vro. Er hreizteiz, e-leh ma teu kalz micherourien Saoz da labourad, e koll tachenn beb eun tammig. Koulskoude e vez kelennet er skolioù.

Eun niver braz a gelaouennou o-deus Kembreiz, darn sizunvezieg hag hiniennou pemdezieg, evel « Y Cymro » (Ar Hembread). Deskadurez a zo e-touez ar bobl hag ar vicherourien, koulz hag e-touez an dud pinvidig.

Al lennegezh a blij dezo; anavezoud a reont al lennegeziou estren hag e-touez ar re-mañ hini Bro-Hall. Meneg a zo bet greet din euz Mauriac, Proust, Maupassant, Duhamel, h.a.... ha gwelet em-eus kalz troidigeziou kembraeg euz skridoù an oberourien-se.

War ar muzik ivez ez int gouizieg ha laziou-kana mad o-deus. Beb sul da noz e plije din mond d'an templ da zelaou kana himnou kembraeg. Leuntenn e veze al leh, beb taol, gand an dud diredet di da gana euid o 'fijañdur. Na tregerni a ree neuze an templ gand o moueziou nerzuz!

D'eun abadenn sonerez ez on bet eet ive, e-kerz unan euz an deveziou kenta a dremenis e Kembre. Aozet e 'oa gand studierien yaouank hag e-leiz a dud a deuas d'o selaou. En Eisteddfod e oa bet ar studierien-se hag, eiz deiz diwezatah, e kuitaent Bro-Gembre euid mond d'an Holland. A-barz kregi gand an abadenn e oe sonet « God save the Queen », nemed e chomas azezet an oll selaouerien war-bouez unanig bennag. Dioustu war-lerh, pa stagas al laz-seni gand « Bro goz on Tadou », e savas an oll en o zao da gana a-bouez penn, ken a groze ar zal.

Tud plijuz-tre ha digor eo Kembreiz. E peb leh em-eus bet diganto digemer dreist. Pa lavaren e oan euz Breiz, ne ouient ket penaoz ober plijañdur din. Ya! Hagarad ha seven eo an oll er vro-se.

Greet em-eus anaoudegez peuz-vad gand hanter-nnoz Bro-Gembre, rag eur miz am-eus tremenet o redeg euz an eil kêr d'eben. Er hreizteiz, avad, n'on ket bet, med, war am-eus klevet, e tenn kalz da Vreiz.

Al lodenn gerra eo an hanter-nnoz, gand he menezioù uhel hag he 'hoajou don. Eun dudi eo d'an daoulagad ha, rak-se, n'eo ket red beza souezet pa zired di kement a zivroidi beb bloaz.

E-kreiz ar menezioù em-eus tremenet eun nebeud deveziou en eul leh anvet *Bettws-y-Coed*, da lavaroud eo « Ar Baradoz e-kreiz ar hoajou ». Ya! Eur baradozig eo ar vro-ze e gwirionez. E peb leh ez eus lennou, lam-mou-dour ha gwez kaer.

Pa bigner war ar menezioù, ez eo dispar ar gwel ahane, Striz-tre, avad, eo an hent a gas di ha diéz d'eur harr-tan kerzoud buan gantañ.

Sevel em-eus greet, eur wechad, war lein ar Snowdon, ar brasa euz menezioù Bro-Gembre, war-dro daouzeg kant metr sao dezañ. Eun tref bitouz a gas an dud betek al lein ha Kembreiz a lavar eo an hini bihanna euz ar bed-oll. Fentuz eo da weloud ha beh a vez warnañ aliez o pignad gand ar menez. Termal a ra kalz ha klevet e vez an trouz a ra euz an draonienn. Gwelet euz ar gar, e seblant ken bihan hag eur e'hoariell...

Goude beza bet o kantreal er menezioù, e tiskennis e Criccieth, eur gêriadennig e-kichen an aot. Gand ar « bus » ez een da redeg bro. Porth Madoc a zo tost da Griccieth hag er porz bihan-se e tiskenn marhadourien ougnon euz Rosko. Dalhmad e veze goulennet ouzin: « Ha c'hwil a zo euz bro ar baotred a vez amañ o werza ougnon? » Hervez m'am-eus klevet e vezont atao resevet mad-tre, rag komz a reont mad ar hembraeg.

E Liannystemdyw ez on bet, eun atardaevéz, o weloud bez Lloyd George. Er vourhadennig-se, tost da Griccieth, e oa ganet, ha douaret eo bet e-kichen eur ster, en eul leh fresk ha sioul.

Euz Criccieth ive, em-eus bet amzer da vond da Lenn Bala hag a zo, gand he temp kilometr hed, unan euz brasa lennou Breiz-Veur. Tost dezi e oa, ar bloaz-mañ, eur hamp euid ar vroadelourien yaouank na gomzed ennañ, evel just, nemed kembraeg.

Klasket em-eus deski ar hembraeg, med diéz a-walh eo da zistaga da genta. Eur plah yaouank, studierez e Skol-Veur Cardiff, a ree skol din. Goude e veze va zro da zeski dezi eun tammig brezoneg. Lavaret em-eus eo an darn vuia euz ar gerioù heñvel a-walh en diou yez, ar pezh a lakae esoh on labour.

Ar plah yaouank-se a oa Sekretourez « Plaid Cymru », e Cardiff, ha lies-gwech he-deus bet skrivet, a-berz studierien ar Skol-Veur, da André Geffroy p'edo hemañ en toull-bah. Diskouez a reas din ar responchou he-doa bet digand Geffroy.

Ne vern da beleh ez een, e veze goulennet atao ouzin, p'am-beze lavaret e oan euz Breiz: « Hag anavezoud a rit André Geffroy? »

Siwaz! Eur fin a rank beza atao da beb tra. Eet e oa buan an amzer ebioù Eur miz am-oa tremenet e Kembre ha poent a oa din distrei d'ar gêr, daoust d'am heuz da guitaad an dud ken plijuz ha ken mad am-oa darempredet. D'an 31 a viz eost e kimiadis diouz Bro-Gembre, doaniet da rankoud dilezel ar Gelted vadeleuz o-doa greet din eun digemer ken karadeg.

Hogen fiziañs am-eus da helloud, eun deiz bennag, distrei adarre d'o gweloud ha da arvesti hoaz ouz kaerderioù dudiuiz o bro ha da studia o yez milvloazieg, ken tost d'or brezoneg karet. Marivon AR GOW.

Ar halvar hag al lann

Dirazon 'n em zizolo al lann,
Lann ar vro a garan.
Ar balan e bleuñ a welan,
Bransketet gand an avel hlan.

War ziribin an dorgenn
Ez eus raden
'Vel an hini e reden ennañ
Pa oan-me eur mous,
Eur mousig gouez
Diwar ar miz.

E-harz an dorgenn
E red eur ouerenn,
Hag ar glesker da lammad
Euz an eil loa-zour d'eben.

War lein an dorgenn all
E sav eur halvar mein
Hag a led e zivreh
Evel euid diwall
Al lann en-dro dezañ.

J.-P. LORIN.

Kontadenn Nedeleg

Karget oa an oabl gand kalz a valkennoù teñval. C'hweza a ree an avel euz an Nord. Gwenn oa an toennou hag an douar gand an erh nevez kouezet. Ar goañv a oa aze hag anad oa edo distro amzer Nedeleg.

En eun ti bihan ha koz, kollet e-touez kalz a diez braz ha nevez, Yannig, eur hrouadur a eiz vloaz, a oa o chom. E dud, araog mond d'ar pellgent, a lakeas anezañ en e wele en eur lavared dezañ : « Bez sioul ha cheñtil, hag e tigasim dit madigou. » N'oa ket gwall deñval er gambr, rag kef Nedeleg o tevi en oaled a sklerijenne eun tammig. N'eus forz, ar bugel e-noa aon memez tra. Tamolodet oa dindan al liñseriou. Klevet e-noa dija o semi unneg eur hag unneg eur hanter. War ar poent edo d'en em rei, pa zenas hanter-noz. An daouzeg taol n'oant ket sonet hoaz pa glevas Yannig eun trouz spontuz o tond euz tu ar ziminal. Ez-lent, ar paotrig a dennas e benn euz a zindan ar pallennou hag a zigoras e zaoulagad. Neuze e welas eur goumoulenn huzil, hag euz ar goumoulenn-ze eun den koz awalh o tond er-mez. Yannig ne anavezet ket anezañ. E varo hir hag e vourenn a oa gwenn. War e benn e oa eur galabousenn ruz, bleveg gwenn; war e gorr eur vantell ruz-tan ha war e gein eur vanikin aozilh.

Komañs a reas Yannig da leñva ha da hervel : « Mamm, mamm, deus 'ta buan! Amañ 'z eus eun den deuet en ti dre ar ziminal! » Hogen pell edo ar vamm neuze. An den, goude beza en em zihuzilhet eun tammig, a lavaras : « Yannig, va 'faotrig, ne anavezet ket ahanon? Koulskoude az-peus gwelet aliez awalh va 'foltred war al leoriou-skol. Me eo Tadig-Koz Nedeleg. N'on ket droug. Arabad dit kemered aon. Te az-peus skrivet eul lizer din, setu perag emañ. »

Neuze ar bugel a ehanas da ouela hag a lavaras gand eur vouez sammet a zaelou : « O, c'hwi eo Tadig-Koz Nedeleg! Soñj a deu din, va, am-eus kaset eul lizer deoh er zizun diweza. Hogen, en eun ti bihan ha koz emañ o chom, endra ma 'z eus bugale all o chom en tiez nevez ha braz e-kichen. N'am-oa ket kalz a fiziañs e vijeh deuet d'am gweled, hag ar wech kenta eo din da veza dihun pa vezit oh ober ho tro. Setu perag am-eus bet aon braz. O, mez bremañ, pa ouzon piou oh, n'am-eus ket ken aon! »

— « Mad, gwel! Bremañ out dizoaniet. Evelse, n'az-poa ket soñj e vijeh deuet d'az kweled? Perag? N'eo ket abalamour emañ o chom en eun ti bihan am-mije ankounac'h'et ahanout. Nann, n'ankounac'h'han bugel ebed, dreist-oll pa vezont bet sioul, sentuz ha koant e-pad ar bloaz. Sed emañ ar pezh az-peus goulennet : eun trefi tredanel. »

— « O, trugarez deoh. Tadig-Koz Nedeleg, c'hwi a zo mad! N'ouzin biken ho trugarekaad awalh. Ken aliez am-eus hunvreet er hoariell-ze. Ha bremañ emañ aze, dirag va daoulagad, en va daouarn! Trugarez deoh hoaz. »

— « Trawalh az-peus trugarezet ahanon, Yannig. Bez cheñtil, evel out bet atao, hag er bloaz a zeu e teuin adarre d'az kweled. Ha bremañ poent eo din mond kuit, rag an eur a dremen buan war an douar. Kenavo 'ta, Yannig! »

Tadig-Koz Nedeleg a oa o vond kuit pa halvas Yannig anezañ.

— « Tadig-Koz Nedeleg! »

— « Petra 'ta, Yannig? »

— « Eun dra a zo oh ober poan spered din pell 'zo. »

— « Lavar 'ta va 'faotr. »

— « Perag e teuit atao en tiez dre ar ziminaliou? »

— « Abalamour, d'an euriou e vezañ oh ober va zroiou, an oll zorojou a vez morailhet. Ha lavared a rankan dit eo evidon eur blijadur vraz diskenn dre ar ziminaliou, dreist-oll p'am eus ar galloud hoaz, rag mui-h-mui e teu ar ziminaliou da veza rouez en tiez nevez a-vremañ. Eun eur a deuo ne ouezin ket ken peseurt hent kemered evid mond da lakaad va 'trofou e boteier ar vugale. »

Yannig en em hardisae.

— « En ho micher e tleit dornata c'hoariellou brao? »

— « Ya, gwir eo. C'hoariellou a beb seurt liou hag a beb seurt stumm. Mez amzer n'am-eus ket kalz da zelled outo. Ha forz penaoz, n'int ket gret evidon. »

Hardisoh-hardisa, Yannig a houlenne atao : — « En ho micher e tleit gweled bugaligou evidon. Hogen ar re-ze a die beza kousket, pe ma n'int ket, n'o-deus ket aon dirazoh? »

— « Ya, sur, gweled a ran bugaligou, evelout. Mez, ne da ket d'en em drempla. Lod a vez kousket mord, lod all a vez dihun. Sell! Eur wech am eus kavet eur paotr kuzet a-dreñv eur gwele. Sur, edo aze evid va gweled, evid gouzoud ha gwir e oa ar pezh a oa bet kontet dezañ. Mad, kred ahanon, pa 'neus gwelet ahanon o tifoupa euz ar ziminal, e-neus bet aon. Redet e-neus buan en e gambr en eur youhal. »

Yannig, goapaer, a c'hoarzas.

— « Eur wech all am-eus kavet eur bugel kousket dirag an oaled. Sur on, hennez a oa chomet da veilha evid va gweled, mez ar c'hoant-kousked a oa deuet a-benn anezañ. »

— « Hag eun all, dihonet en eun taol, o weled va baro gwenn ha va mantell ruz, a zigoras braz e zaoulagad hag en em guzas buan dindan al liñseriou en eur leñva. Ha kalz a arvestou all hoaz! Mad, awalh am-eus kontet dit. Er bloaz a zeu e kontin dit hoaz kalz a draou all. Kenavo Nedeleg a zeu! »

« Kenavo, Tadig-Koz Nedeleg! »

Hag an Tadig-Koz a steuzias dre ar ziminal. Yannig a redas d'ar prenestri, a zigoras braz anezañ. Neuze e welas, war neu en er, karr-stlej Tadig-Koz Nedeleg, sterniet outañ pevar marh gwenn-kann, daou élig krog er rañ-jennou. An hini koz a zavas e-barz. A-dreñv e gein pemp él a oa o vuzikad. Yannig a glevas eur zon duiz. A greiz-oll, Tadig-Koz Nedeleg a stlakaas e skourjez hag ar harr-stlej a lohas, gand eun trouz oroulerien, hag a steuzias en neñv.

Ernest BARZ.

Notennoù ar Furcherien

« KANTIK AR PURGATOR »

Gouel an Oll-Zent! Pegen teneroet e veze gwechall ar galon o soñjet en dud ho-peus anavezet, karet, ha bet karet ganto, pa zelaoued sarmon an anaon war-lerh gousperou an Oll-Zent. Pegen trist e veze kavet **Kantik ar Purgator!** Allaz! Daoust ha kanet eo bet e peb karrez? Daoust ha ne ya ket kuit soñj ar re varo, an doujañs a veze evito? Gand ar jeñchamañchou a zo bet hag a zo gand ehonder ar parrezioù, ped ha ped Breizad a gollo ar voaz da zaoulna war beziou o zud! Zoken ar vered a zo en eur barrez, an otant en eur barrez all. Ped bered a zo bet diblaset! Ha n'emañ ket ken stag ouz an iliz!



Evid lakaad va spered da veza a du gand ar gouel, em-eus klasket ar pedennoù hag ar hantikou evid gouel an anaon. Setu petra am-eus lennet war unan: **Kantik ar purgator: komzou gand Per Barisy, 1659-1719.** Evelse ive eo douget war leor kantikou Eskopti Kemper ha Leon. Ha, marteze, ar fazi-ze a zo bet grêt ganin, o veza em-eus roet an dorn, ha n'eo ket a hanter eo, da aoza istor ar hantikou hag an toniou-ze.

Abaoue em-eus bet tro da gavoud ha da studia piz oberou an Tad Maner (1606-1683). En e « **Ganticou Spirituel hac instructionou profitabl evit diski an hent da vont dar Barados, mouladur 1678 gand Guillou ar Blanc, Kemper** » (ar skwerenn a zo e Rozavel), emañ ar: « **Canticq voar ar c'hlem an anaon** », war an ton: **Dan deiz diveza eus ar bet.**

A den à vezo quer calet
Na vezo é galon rannet...
Breudeur, querent ha mignounet
En han Doue hor chelaouet,
En an Doue hor sicouret...
Allas n'ouffe compreni den
Peguen estrench eo hon anquen.

Beteg kavoud tra all e heller lavared: Kantik ar Purgator a zo bet savet gand an Tad Maner, da vihanha en e amzer, rag gand ano ar Hanticou Spirituel emañ ar gerioù-mañ: « **Composet gant an Tat Julian MANER, religius eus a Gompagnunez Jesus, corriget hag augmentet ganta à nevez en edition pemzecvet-mañ.** »

N'e-nije ket an Tad Maner implijet ar gerioù-ze, ma ne vije ket bet aozer ar hantikou. Beteg-henn n'em-eus kavet mouladur ebed kosoh eged hemañ.

Hag an ton? Deveziou ha deveziou am-eus lakaet da glask orin toniou

ar hantikou hag ar hanaouennoù. Deut on a-benn da gaud kalz anezo. N'ana-vezan ket, avad, orin kalz all.

Adaleg penn kenta ar XVII^{ed} Kantved, e penn ar hantikou eo douget aliesoh: « **oar eun ton galleg** » pe « **oar ton ar ganaouenn-mañ** », kanaouenn halleg.

Kerse eo lenn: « **oar eun ton nevez** », pa n'emañ ket muzik an ton nevez-se gand ar hantig.

Gand kantig ar purgator ano an ton a zo roet. Med daoust hag e orin a zo breizeg? Evelato, fromuz kenañ ez eo selled ouz dremmou an dud pa vezer ouz e gana. Anad eo e talhont war o daelou. Gwir eo ez eo ken fromuz all ar gerioù.

« ADOROMP HOLL »

Koulz kenderhel gand ar gaaz war orin ar hantikou anavezet e peb leh.

En **Annales de Bretagne** a zeu, e vezo meneg euz eul leor **Canticou Spirituel, 1642**, ha n'ez eus nemetañ.

Eul leor all a anavezañ, eur skwerenn hebken anezañ ive. E ano a zo: « **An exerciçou spirituel eus ar vués christen evit ar Mission.** » E studiet em-eus piz awalh evid gelloud lakaad da aozer al leor-se an Tad Gregor a Rostren. War ar 'follenn 3 emañ: **approbation Couvent Capucinet Quemper, 28 mai mil pemzec ha seiz cant.** Allaz! Ar skwerenn am-eus studiet a zo bloaveziat 1767.

Diêz eo kompren penaoz e c'hoarvez gand leorioù bet moulet a vilierou beza kollet. Kerse eo, rag n'on ket evid lavared oad an **Adoromp holl.** E-barz an Exerciçou Spirituel 1767 emañ. Piou a gavo deom hini 1715, evid rei e oad d'ar hantik brudet? Serz penaoz ez eo moulet:

Adoromp oll er Sacramant an Aoter
Un Doue cuzet, un Doue a so hon Salver.
Sperejou eurus, c'hui Princed eus e Lez
Gant carantes ardent meulit é da james
Meulit é da james.

Verb Eternel evidomp-ni incarnet
An Ee, ar Mor, an Douar oc'h eus crouet;
Deut, va Salver Jesus, eus an Aoter ho Tron
Da rei brema deom oll ho Penediction...

Enor ha gloar ha carantes Eternel
Bezot dan Tad, da Map, da Speret-Santel,
Meuleudi bezot d'an tri Pherson en un Doue
A hed an oll amzer, hag an eternite.



Ha kement ha beza war-dro an Tad Gregor, piou a gavo e pe leh ez eo bet ganet, ha peur? Hervez ar pezh am-eus kavet dindan 30 vloaz furcherez, e ano a oa Tanguy; Keranna oa ano e di. War rollou ar parrezioù bro-Rostren ez eus Keranna e Canihuel, Rostren, Perret.

Peur? Lakaom war-dro 1660-75.

L. LOK.

Traou klevet ha dastumet gand Kampourien Kerlivio, Poullaouen

AMBAB. Eun ano-gwan hag a dalvez : « na oar ket en em zibab, n'eus ket mond endro ennañ ». Disheñvel eo diouz « abaf ».

Implijet e vez « ambab » e Langoned ha Speied. Ar hontrol a zo « digourdi ».

O keñveria gand « dizemt » hag « amzent » e soñjer kentoh e « dizibab » hag « amzibab ». « Dizibad » a vez implijet e brezoneg komzet : « eun den dizibab n'eo ket da vond na da zond », a lavarer.

BASKODENN. Anavezet eo ar ger-mañ e Pleiben, er Hab, er Vro Vigoudenn. Talvezoud a ra « paner ».

E Pleiben gwechall e oa ar vaskodenn ar baner zu a lakae ar bazvanal, pe « darboder-dimeziou », e koubl e vreh, da vond da houlenn an danvez merh-nevez.

BRAGAL. E Langoned : « pourmen, kantren, rodal, chom dilabour ». Eun dro-lavar :

« An hini a vrag bemdez
Ne vrag mui pa gar. »

Hag eun all :

« An hini ' zo lemm beg e deod
A rank beza kalet kern e benn. »

C'HWEY DA VRI. Setu penaoz e tistager « c'hwez da fri » e Poullaouen. Lavaret e vez ivez « luvéd », « klevé », evid « luhed », « kleze », ha meur a dra all e-leh ma kemer V leh ar Z pe ar C'H (H).

An dra-mañ n'eo ket dre zigouez (« digouev » e Poullaouen), rag e brezoneg-krenn e Kaver e-leiz a rimou etre V, Z, ha C'H (H) (pe F, FF, S, ÇZ, H). Anad e rank V ha Z beza soniou c'hwezet e brezoneg. E Kerne-Uhel e klevet awechou geriennou evel : « ma hont » evid « emañ o vond ». E gwenedeg e lenner « rahouis » evid « refus », « raüs » e Kerne-lzel, « dihuenn », « divenn », h. a. pa oan er skolaj em-ao daou gamalad, unan euz Roudoualleg, egile euz Torc'h, hag e-pad ar vakañsou e kasem lize-rou an eil d'egile e brezoneg. Brezoneg skrivet hervez on ijin, rag ne ouiem ket skriva brezoneg lennegel. An daou baotr-se a skriva atao ar W evel HU. Da skwer : « da weloud » a veze skrivet « da huelt ».

GWANTRENN. eur wantrenn. Ar ger « traoñienn » ne vez ket greet gantañ e Poullaouen. « Gwantrenn » eo a lavarer. Evid « stankenn », traoñiennig striz ha don, e leverer ivez : stankenn. Ha tostaad a heller « gwantrenn » ouz ar geriou « pandenn », « flankenn », « flondrenn » ?

KRICHEN. E Bro-Wened, al lez, al letonenn, ar wrimenn, ar hlazenn e bord eur park, eun hent, eur hoad. An tamm tirienn a jom dilabour.

MEN-ENDERV. Gortozadenn, mern-vihan e Langoned, distaget : mei'n e:rw.

PENEUSS. Setu distagadur « penaoz » e Poullaouen, disheñvel diouz ar « peno:z » boaz. Lavaret e vez ivez « pegiz ». A-hend-all ar ger « neuz » a vez implijet, med distaget « neu ». Da skwer : « n'e-neus neu obed ». E Kerne-lzel e lavarer : « penaoz », « neuz », « oza pe ôa ». E Poullaouen e lavarer « oza ».

SKEUM. E Kerne-lzel e lavarer euz ar hezeg, ar zaout, ar pesked, ez int « skoudig », pa lammont, pa dalmont pa ra an den eur jestr. Daoust hag ar ger « skeum », a dalvez « skeudig » e Poullaouen, a zo ar ger « skoemp » euz ar geriaduriou ?

SKLENTUZ. E Speied, heson, sklint, sklintin.

SKIMINAL. Ha n'eo ket « chiminal » e Poullaouen ha meur a leh all er Menez.



TREDE GOUR AN-DISKOUENZA. Eur skwer : « Ma vellev ket deon e farvo » = « Ma ne wella ket dezañ e varvo ».

Ar reolenn a zo : V a stager ouz trede gour unan amzer-diskoueza ar verbou o 'fennrann oh echui en eur vogalenn.

Skweriou : « An treñ a erruv abred deuz ar mintin. » (a erru)
« Me a bev priz an amann deoh dustu. » (a bae)
« Pa bartiv ne lavar james kenavo. » (pa barti)

An dra-mañ ne c'hoarvez ket gand ar verbou « ober » ha « rei ». E Kerne-lzel a lakaer eur Z en digouezioz-se. Perag an dra-ze ?



GERIOU KILVIZEREZ. Eur halvez eur Speied e-neus diskleriet deom eun nebeud geriou-micher.

Kibrou chevrons. Eur hibr, pe eur hebr.
Bilhetez voliges. Eur vilhetezenn.
Al livennou les filières, pannes.
Ar framou pe ar houblou-koad, les fermes.
Al lein le faitage. Lavaret e vez: daou lein, gourel eo.
An treust pe ar varrenn, l'entrait.
Ar brid le poignon.

◇

DIVINADENNOU (Poullaouen).

— **Peseurt diforh zo etre ar hafe hag an treñ -**

Ar hafe a vez kemeret goude ma ve paseet. An treñ a vez kemeret araog ma ve paseet.

— **Peseurt diforh zo etre eun dimezell hag eur pesketer ?**

Ar pesketer ' daol e linenn. An dimezell ' vir he linenn.

— **Ped forn da boahad bara ' zo etre Kemper ha Poullaouen ?**

Hini 'bed. Da boahad bara n'eus forn ebed, da boahad toaz lavarvan ket.

— **Perag n'eus ket koñje d'ar merhed da lavaroud an overenn ?**

Peogwir ne lezfent gwech ebed ar hurust da gaoud ar ger diweza.



Lennit

BREIZ

KELAOUENN KENDAL'CH

moulet en eun doare plijuz, a ro beb miz d'ar Vretoned eur vriad keleier diwar-benn peb tra a zell ouz emzao sevenadurel o bro.

Komanant-bloaz : 300 lur, — da gas da :

— **BREIZ, B.P. 399 Roazon (C.C.P. 144-67, Rennes).**

Gerioù dastumet e Rosporden hag e Pouldregad

E-touez paperioù chomet war-lerh an aotrou Guivarc'h (Saik Mespaol), bet person Lamber (Bro-Leon) em-eus kavet eur rollig gerioù dastumet e Rosporden hag e Pouldregad.

L. LOK.

ROLL ROSPORDEN

Je ne savais pas	gouien ket.
Je n'avais pas su	m'oa ket gouiet.
Non	paz.
Le feu est long à	'n tan zo difonn da.
Prendre	bega, pego ba (?).
Ce n'est pas vrai	'man ket gwir.
Il fait chaud aujourd'hui	c'hiou 'man tomm.
J'ai pris froid	paket 'm eus unoud.
Mauvais temps (humide)	amzer glak.
Mauvais chemin	hent glak.
Je ne le connais pas	n'anveon ket aneon.
Demain	benn c'hoaz.
Dimanche	benn dichul.
Des racines	griou.
Le soleil	an c'heol.
Ar ger-mell a zo	am.
Le recteur	am person.
Beaucoup	pikol.
Pas beaucoup	paz pikol.
Beaucoup	eur bachad.
Faire	gober.
Tonnerre	c'harme.
Eclairs	luied.
Brouette	raoz (?).
Cafetière	chaptal.

ROLL POULDREGAD

La poutre	ar zol.
Le porche (de l'église)	ar jabarleg.
La balustrade	ar splied.
Donner	ober.
Faire	farda.
Si	mag a.

Eclair	luiadenn.
La brouette	ar c'hrabaz.
Civière	krabaz daou bennok.
Une bêche	eur reon pe eur bâl.
Mousse	toulac'h.
Ruer	talmi.
Prendre	pegi.
Ecrire	skrivi.
Chauffer	tommi.
Beaucoup (une foule)	eur piad.
Un instant	eur boutad, boutadig.
Un champ	eur bar.
Un chemin	eur garn.
Aujourd'hui	hiu.
Demain	warc'hoa.
Savoir (lire)	gouzoud ar mod da (lenn).
Ne pas pouvoir	chom berr da.
Entretenir, soigner	kemeret perz gand.
Etre seul	beza en e geun (eun-unan).
Etre sur le point de	beza e tal da.
Il viendra bientôt	pelloc'h e teuo.
Tout à l'heure	vo ket bell.
Une promenade	eun droiez.
N'être pas difficile (direus)	beza broust.
Je n'ai pas osé dire	ne 'm eus ket padet lavaret.
Où est-il allé?	e pe lec'h eo et?
Vers le haut	tra man lae.
Dans la direction du bourg	tra man koste ar vorc'h.

AMAN HAG AHONT

Goulennoù ha respontou. — Eun nebeud lennerien o-deus goulennet digand BRUD kaoud eur horn evid reseo goulennoù ha respontou diwar traou ba traou all ò selloud ouz buhez, istor ha lennegezh Breiz. Kelennuz, dudiu, e lavaront, e vez aliez pennadoù evelse er hazetennoù hag er helaouennoù.

Greet e vo hervez c'hoant al lennerien-ze. Kasit deom eta ho koulennoù, sinet. Embannet e vint, gand eun niverenn. Kavet e vo, moarvad, e-touez komananterien BRUD, tud gouizieg awalh d'ho respont.

1. Petra a dalv ar ger « Nedeleg » ?
2. Daoust hag ar ger « Pellgent » a zo eun diverradur euz : « N'eus ket pell kent... ganedigez ar Mabig Jezuz ?

Difaziou. — L. Lok a skriv deom : « Eur fazi a oa er bajenn 88, eil niverenn BRUD. Piou a remerkas e oa douget : Michel Guédès ganet e 1856, beleget e 1872 ? Eur beleg gwall-yaouank, eta ! 16 vloaz. Evid gwir, ganet eo bet e 1847.

E Pleyber-Krist eo bet person euz an 19-6-1893 beteg an 29-7-1899.

A hend-all e klasken gouzoud pe ano badez oa G. Guédès. Ar respont a zo deut a-berz Sekretour-Braz an Eskopti e-unan, gand eun astenn ouspenn, hini roll-buhez an aotrou Guillaume Guédès, bet ganet e Lokorn, d'ar 17-8-1851, beleget d'an 10-8-75; kure ar Forest-Fouenant, 1875-1881; Kelenner, 1881-1884; Kure Sant Melani, 1884-1888; dibost e-pad tri miz : Kure Eussa, genver 1899-here 1902; dibost adarre. E 1909 e repuas e Sant Jozef, e Kastell. Eno e varvas d'ar 16-2-39.

Bennoz Doue d'an aotrou Nedeleg. Digantañ em-eus bet rollou-buhez an daou aotrou Guédès.

Geriou brezoneg-krenn. — Hervez ar « Société Archéologique du Finistère » e oa gerioù brezoneg-krenn en eul leor koz e leordi-kêr Kemper : 8838, Arm A. L. Lok a zo bet et da furchal el leor-se anvet : « Expositio

magistri Petri Tartereri in summulas petri hispani... » Douget eo an ano war ar 'follenn : « Imprimé par Nicolas Wolf, allemand, 1503. » Geriou dornskrivet.

Ar pezh a zo amañ warlerh a zo dornskrivet ive :

« Frater Edouardus Arator possessor huius volumini (sinet) Arator. »

« A goezo buhez sô (?) en (?) (ar ger a zo saotret gand liou) bet eo buhez merzer obstinet bep nos en nos bar o costez didâ â doll oz gortoz dez didâ an dol oz gortoz dez

fr Johânes profet..

f a strapada

Posse bile map â marer. »

Piou a zihuno ar gudenn ?

Eun dastumad nevez a ganaouennou koz. — Gouzoud a ra an oll ez eus bet embannet eul levr toniou binliou e derou ar hantved gand ar Horonel Alfred Bourgeois, euz Brest. An oll a oar ivez e veze aozet ar henstrivadegou sonerien e Brest gand an den-ze gwechall. Alfred Bourgeois e-noa ouspenn dastumet eur bern kanaouennou pobl, skrivet gantañ etre 1850 ha 1900, komzou ha toniou da heul. Eun dibab euz ar hanaouennou-ze a oa prest da veza moulet pa varvas Alfred Bourgeois e 1904.

Dre eurvad, eo bet miret ar paperiou-ze e Pariz. Kenvreuriez Sonerion Pariz e-neus adskrivet an dastumad dibabachou. Kaset e vezint d'ar mouller heb dale. Talvoudeg dreist ' vo al levr-mañ e peb doare, pa ne vefe ken da geñveria gand oberennou Kermarker, Luzel ha Penguern, hag an toniou skrivet gand Duhamel.

An neb e-neus c'hoant da gaoud al levr ' zo pedet da gas e ano heb dale da Herve ar Menn, 3, rue Francis-Garnier, Pariz, 17^{es}. Pevar ugent kanaouenn gand an toniou ' vo el levr... Ne vo moulet nemed evid ar rakprenerien a gaso o anoioù.

K.S.P.

Kenvreuriez Sonerion Pariz
3, rue F.-Garnier
Paris, 17.

Kanaouenn ar voualh. — Lennet em-eus e niverenn 2 BRUD (Lodenn ar Yaouankiz p. 91) : E fest-noz ar Hamp « displeget brao eo bet diskan rimodellet Ar Voualh ». Emichañs ar ganaouenn-ze a zo an hini bet kanet e Lokournan-Leon, en ospital ar re goz, dirag an Ao. Guilcher, da viz gouere diweza. Kavet em-eus ar ganaouenn-ze, ger evid ger, e galleg, e-barz al levr : « Le Trésor de la poésie populaire française », par Claude Roy (p. 367), Pierre Seghers, édit. Paris, 1957. He ano a zo : « Chanson du merle qui a perdu son bé ». Pehini a zo mamm d'eben ?

L. LOK.

Youenn Vraz hag e leue, diweza leor Youenn Drezenn, embannet gand SKRID ha SKEUDENN (1947), n'eus bet gwerzet nemed eur hart euz ar moulladur anezañ.

Prenit heb dale an dastumadenn-ze, a lez enni an oberour da ziroll dinask e froudenn laouen ha goapauz.

Eul leor 185 × 140, 168 pajenn, dindan eur golo skeudennet gand Beurlaouën : Priz : 600 lur, mizou-kas ; 70 lur. Heb mizou-kas azaleg 5 skwerenn. Skriva da : Mlle Anne ALBERT, 9, rue Georges-Guynemer, Nantes, C.C.P. 2248-70 Nantes.

Nouveaux Contes du Meunier Breton, gand M. Divanach. Dastumet e-neus M. Divanach eur bern kontadennoù brezoneg e-touez ar bobl, e bro Pont 'n Abad dreist-oll, ha troet int bet gantañ e galleg en eun doare dispar, en eur zerhel dezo o ijin vreizeg hag o blaz saouruz. Goude al leor kenta : « Contes du Vieux Meunier Breton », setu bremañ nevez embannet : « Nouveaux Contes du Meunier Breton », eur sahad marvailhou ken talvouduz hag an hini kenta. Unan a zo troet diwar ar patrom brezoneg a heller lenn war BRUD (Niv. 2) : Tomazig ha Mahi. Embann a rim hoaz kontadennoù all dastumet ha kaset deom gand M. Divanach.

Ar skwerenn : 300 lur. Al leor kenta hag an eil : 500 lur, heb mizou-kas. E gwerz e ti : M. Divanach, Ecole de Saint-Jean-Trolimon (Fin.), C.C.P. 627-67 Nantes.

Gerioù nebeud anavezet. — Lod euz lennerien BRUD o-deus skrivet deom, gwall-nehet pa ne gavent ket en o geriadurioù gerioù ' zo (brezoneg yah, beo ha pemdezieg koulskoude) implijet e niverenn diweza ar gelaouen (2). Setu amañ notennoù evito :

Butun an dilez.

Mond en e voutou	Terri e her.
An dimezi a yafe er harz . .	Ar bromesa dimezi ne vije ket bet sevenet.
Freska	Kanna, gwalhi e zilhad d'unan bennag.

Overenn Sant Tu-pe-Du.

Trideg	Leon : tredeog, e galleg : arbitre.
Divenn	Heb youl (euz ar verb : mennoud).
Mank	Heb êr, diêz tenna an alan emañ.
Dibellh	Digempenn. Peilha eur bern plouz a zo e gempenn evid ar goañv.
Beza en eurvar	Skulz-maro.

An hoh gouez.

Avalou koh-moh	Avalou trefik-put, diwar eur blantenn ha n'eo ket bet imboudet.
Rikou-chase	Binviou-chase.
Teusteukad	E galleg : bricoler.
Moustougnad	Komz etre an dent.
Grêt an io gantañ	Grêt goap outañ.

Burzud Itron-Varia Dreguron.

Choupet	Choupa eur bugel a zo e gemer war ar vreh (ober choupe, choupig).
Krognet	Bronnou c'hwezet ha kaledet gant re a lèz.
Kurza	Berraad, strisaad.

Deñved da douza.

Da hanuzi ahanoh	Ganuzi = gwallgas.
----------------------------	--------------------

Gwechall e Terug.

Erjennet	Hegasi evid c'hoarzin.
Kajoli	Ober war-dro ar merhed (galleg : flirter).
Mañcheriou	Mañchou, korvenn ar merhed.
Deon	Straed, foñs.
Diter	Heb pleg ebed.
Rikabanou	Linennou kamm-digamm.
Pariadenn	Klaoustre.
Eur vagadenn	Magadenn : bugel euz an ospital savet en eun tiegezh war ar méz.

Kóteriad.

Beurleg	Anò pesk, e galleg : tacaud.
Moh-aot	F galleg : poux de mer.
Eur 'treilhad-vad	Eur 'trapadenn greñv.

Skrivit deom heb aon ma n'eo ket sklêr eun dra bennag evidoh, pe goulennit displegaduriou a vo embannet e korn ar « Goulennou ha Respontou ».

« Deskom brezoneg »

Nevez deut er-méz setu amañ ar brava leor a zo bet moulet bis-koaz e Breiz evid ar skoliou, hag eñ par d'ar gwella leoriou-studi a vez kinniget en deiz hirio gand ar brasa tiez-embannaduriou e Pariz hag e leh all.

Eun drugar eo e zigeri, plijet ma vezer dioustu gand al liviou implijet ha gand skeudennou mistr or heneil P. Péron : eur gwir bli-jadur a grog ennoh o weled eur seurt taol-micher deut da vad. Anad eo, gand levenez e lenno ar vugale brezoneg gwisket ken kaer, ha, da heul, e lakaint o 'joan da brederia ar henteliou, diskleriaduriou ha taolennou a deu war-lerh ar pennadou-lenn.

Ar pennadou-lenn-ze a oa dija, eun darn anezo da nebeuta, e « Yez hon Tadou », embannet e 1949. Ar henteliou a oa el leor-mañ a zo bet skañveet, avad, ha roet ez eus bet dezo eun doare dedennusoh.

« Yez hon Tadou » ne oa nemed an hanter genta euz labour an Aotrounez Sèité ha Stéphan : e « Deskom Brezoneg » emañ bremañ a-gevred diou lodenn o oberenn, oh ober eul leor klok, displeget ennañ an oll gudennou euz yezadur ar brezoneg a heller rei da studia da vugale etre 10 ha 15 vloaz.

Al lennaduriou a ya da ober eil lodenn « Deskom Brezoneg » ez eus d'o heul eun nebeud goulennou, darn anezo e galleg (Yezadur; frazennou da drei e brezoneg), ha darn e brezoneg (Diviz diwar-benn ar pennad bet lennet). Savet int bet gand an Ao. C. Riou evid boaza ar vugale a ya da dremen ar B.E.P.C. ouz ar seurt goulennou a vo greet outo ma tibabont an arnodenn brezoneg. Eun dra a-bouez muioh eta el leor embannet gand ar Bleun-Brug evid e skoliou.

« DESKOM BREZONEG », gand V. Sèité ha L. Stéphan; skeudennou gand P. Péron. — Eul leor 206 p., ment 22 X 15,5 cmad; embannet gand skoazell « Emgleo Breiz ». — 650 lur (720 lur dre ar post).

« Bro-Gwened »

Niverencu diweza ar gelaouenn « BRO-GUENED — REVUE MORBIHANNaise » a zo enno meur a bennad e brezoneg Bro-Gwened :

— Doériteu « Héolaterion » en Touldouar, eur skrid diembann chomet war-lerh an Ao. J.-M. HENEU;

— Tud en Amzér Treménet (Fransez Kerlu);

— De Hortoz Kementrall (Job Jaffré);

— Boteu en Nédeleg (F. Kerlu);

— Merhed er Bregereu (Kanaouenn).

Lenet on-eus gant plijadur eur studiadenn diwar-benn implij lezennoù Doare-Skriva ar Skol-Veur evid yez Gwened. Ar pennad barzoniez a room amañ a-hend-all e Lodenn « Brehoneg Bro-Gwened » — « Sonj a Vugaleh », savet gant Er Joubiour — a zo eur skwer euz pezh e teu bremañ da veza doare-skriva ar gwenedeg. Tamm-ha-tamm e vo implijet ar skritur nevez e kelaouennoù hag e skolioù Bro-Wened. Leoriou-studi evid ar skolioù a vo embannet, da genta-penn eur Geriadur hag emeur bremañ o peurechui e gempenn.

Ar homanant-blcaz da « BRO-GUENED » a zo 500 lur, o talvezoud evid 6 Niverenn. Komanant-skcazell: 1.000 lur. — Kas an arhant d'an Ao. ROUAUD, Sainte-Anne d'Auray (Morbihan). — C.C.P. 1119-42, Nantes.

C'hoariva Brezoneg

E meur a barrez e vez displeget peziou brezoneg dirag an dud, da geñver ar gouelioù-skol da skwer. Siwaz, nebeud-tre e vez komzet er kelaouennoù euz an abadennoù-ze, pa rankjed er hontrol rei brud dezo ha rei kalon d'ar strolladoù a zalh da implij ar brezoneg e-leh ober peb tra e galleg...

Diwar pezh a ouzom, n'eo ket ken rouez-se an abadennoù e brezoneg: aliez awalh e vez goulennet peziou-c'hoari diganeom, hag eun tammig a beb korn euz ar vro. Ha dalhmad e vez lavaret deom e ra berz, ha berz braz zoken, ar peziou-c'hoari e brezoneg.

Unan euz kefridiou pouezusa « Emgleo Breiz » hag ar strolladoù a labour gantañ a zo pourchas « danvez » d'ar strolladoù a implij ar brezoneg en o abadennoù, dre embann peziou-c'hoari nevez, advoulla peziou na gaver ket ken, kas rolliou peziou-c'hoari dre oll d'ar strolladoù bihan pe vraz a zo e kemend parrez, e kemend skol koulz lavarred, ober « bruderez » da zigas kevredigeziou nevez d'ar C'hoariva e yez ar vro. Setu pezh a ra, peb hini euz o zu, « Ar Falz » hag ar « Bleun-Brug », gwir eo. Red e vije ivez en em lakje kelhioù « Kendalc'h » da labourad da vad war dachenn ar C'hoariva. « Emgleo Breiz » hag e gelaouenn lennegel « Brud » a roio dezo ar muia posubl a skoazell.

Karoud a rafem rei kelou hiviziken e « Brud » a-zivoud ar strivou greet, forz a be tu a ve, evid rei lañs d'ar C'hoariva brezoneg. Goulenn a reom eta ouz ar hevredigeziou parrez, ouz on oll lennerien rei deom da houzoud kemend a vez greet en o horniad war an dachenn-ze, petra vez c'hoariet, ped abadenn a vez, ha plijoud a ra d'an dud, hag all...

Evid hirio e venegim tri daol-esa nevez, embreget e broiou pell an eil diouz eben ha gand strolladoù disheñvel-tre, peogwir unan anezo a zo bet kaset da vad en eur skol laik, hag ar re all a zo lakeet en hent gand ar « Bleun-Brug ».

E BRO-LEON

Emañ « Bleun-Brug » Bro-Leon oh aoza troiadoù C'hoariva e brezoneg e meur a barrez, gand Kelh Lanniliz (renet gand an Ao. Favé) ha strollad Kanerien Plougerne (renet gand an A. Plantec).

C'hoariet e vo ganto : « Mari Beg-An-Diaoul » (eun arvest) hag « Ar Goell Bier » (4 daolenn), ha kanet eun dibab euz gwealla kanaouennoù strollad Plougerne. Eur pezh-c'hoari all emeur o studia.

Kelou hirroh a hellim rei diwezatoù diwar-benn an abadennoù-ze.

E BRO-WENED

E Sant-Teliav, e talher ar hiz da zisplega peziou-c'hoari e yez ar vro. Ar helaouennou o-deus meneget eo bet c'hoariet, e miz kerzu diweza, « An Aotrou Kerioulet », drama e 3 arvest Job er Bayon, ha « Troieù kamm Barnabe », eun arvest all gand Er Bayon hag a zo bet savet evitañ eur zonerezh gand an Ao. Le Padrun. — Livadurioù al leurenn-c'hoari a zo bet greet gand an Ao. A. Pasco.

E GRONVEL (Kerne Uhel)

An hañv-mañ, da geñver XI^{ed} Skol-Hañv « Ar Falz », d'ar zùl 8 a viz gwengolo, eo bet c'hoariet evid ar wech kenta unan euz ar pevar pezh-c'hoari bet embannet war niverenn genta « Brud » : « AN DOUGER-TAN », savet gand Per Helias.

Desket eo bet an arvest kaer-ze, karget oll a varzoniez, gand strollad-c'hoarierien Skol Gronvel, renet gand an A. Ar Merser. Red eo kas gourhemennou d'ar c'hoarierien evid o labour hag evid an doare fromuz kenan m'o-deus displeget drama planedenn « Sorser Gouel-Yann ».

Livet e oa bet taolennou al leurenn-c'hoari gand daou arzour ampart, S. Sénéchal, euz Pont-n-abad, ha Glaodina Mazeaz, euz Gwengamp. En o labour reiza an abadenn, o-doa bet ar c'hoarierien kuzulioù daou zen mañh war arz ar C'hoariva, — oberour ar pezh-c'hoari e-unan, Per Helias, ha R. Trovel, rener strollad « ar Gouel Hlaz » e Gwengamp.

Berz braz a reas « An Douger-Tan » e Gronvel, ha goulennet eo bet ouz ar c'hoarierien mond d'e zisplega er parrezioù tro-war-dro.

KELHIOU EUZ BREIZ-IZEL !

Pa lakait c'hoari peziou brezoneg, kasit kelou deom dre sekretour « Kevredigez kulturel » Kendalc'h, evid ma vo roet da anaoud d'an oll pezh a vez greet ganeoh evid rei brud da yez ar vro da geñver ho kouelioù. Skriva da Loeiz Roparz, R. Jeanne d'Arc, Kerfeunteun.

Ma fell deoch kaoud roll eun dibab peziou-c'hoari da veza studiet gand ho strollad, kasit kelou da sekretour « Brud ». Evel-se e ouezoh anoioù ar peziou-c'hoari a heller hoaz kavoud da brena. Peziou all a hellom rei adskrivadurioù anezo, pe presta deoh al leor d'e adskriva. Oberou savet gand Dirnadour, Jarl Priel, Per Helias, de Carné, Youenn Drezen, hag all... a hellom presta deoh. Ma fell deoh kaoud an oberenn-mañ-oberenn, roit deom he ano, hag e raim or seiz posubl d'he has deoh, forz pe skrivagner a vije an oberour.

Skriva da « Emgleo Breiz », B. P. 17, Brest.

Pelloh e room kelou deoh diwar-benn eul leor peziou-c'hoari savet gand Youenn Drezen, ha bet embannet e 1947 gand « Skrid ha Skeudenn », hag a gaver ennañ dreist-oll : Karr-Kañv an Aotrou Maer, Youenn Vraz hag e leue, Anduilhenn ar Person.

EMBANNADURIOU "EMGLEO BREIZ"

BARZONEGOU :

- | | | |
|---|-----|------------|
| 1. - Barzonegou Reunan Ar Mougn..... | 200 | lur franco |
| 2. - Gand Red an Dour, gand Ropars Broudig. . . | 200 | " " |
| 3. - Bleuniou Arvor, gand Mab an Dig. | 220 | " " |

DANEVELLOU :

- | | | |
|---|-----|-----|
| 1. - Geotenn ar Werhez, gand Jakez Riou..... | 385 | " " |
| 2. - Ar Roh Toull, gand Jakez Kerrien | 385 | " " |

MOJENNOU BREIZ :

- | | | |
|-----------------------------------|-----|-----|
| 1. - Ar Mor, gand Per Helias..... | 305 | " " |
|-----------------------------------|-----|-----|

BREZONEG GWENED :

- | | | |
|--|-----|-----|
| 1. - Dasson ur Galon, gand Loeiz Herrieù | 670 | " " |
| (embannet gand skoazell "Emgleo Breiz"). | | |

KAN :

- | | | |
|--|-----|-----|
| 1. - Kanom Uhel (Emb. Kendalc'h) | 170 | " " |
|--|-----|-----|

KELENNADUREZ :

- | | | |
|--|-----|-----|
| 1. - Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg, gand an Dr Tricoire..... | 285 | " " |
| 2. - L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne, gand F. Falc'hun | 190 | " " |
| 3. - Geriadurig Brezoneg-Galleg ha Galleg-Brezoneg, gand Stéphan-Séité | 335 | " " |
| 4. - Cent Textes Français à traduire en Breton, gand P. Trepos | 285 | " " |
| 5. - Breiz Hor Bro (Emb. Kendalc'h) | 170 | " " |
| 6. - Deskom Brezoneg, Stephan-Séité | 620 | " " |

LEORIOU SKEUDENNET EVID AR VUGALE :

- | | | |
|-------------------------------------|-----|-----|
| 1. - An Azennig bihan. | 235 | " " |
| 2. - Ar Honiklig Boudedeo | 235 | " " |

Embannadurioù "EMGLEO-BREIZ" :
Editions "Emgleo Breiz", B. P. 17 BREST
C. C. P. 380-96 RENNES

=====
Imprimerie du Télégramme
- Place Wilson - Brest -
=====

Le Gérant : Dr DUJARDIN



Ar Yez hog ar Vro
- EMGLEO BREIZ -
B. P. 17 BREST